

BARR HEOL



Directeur : M. Le Clerc, Rect. Buhulien C-d-N } kourcenant :
No 14, Mars 1957, Trimestriell, Prix du No : 125 fr } 500 lur

Rener : M. Le Clerc, Pesron Buliem, Bro-Dreger, Sekret. D. Bideau
N-enn 13, Meurzh 1958, trimiziek, Priz an Niv. 125 lur

T A O L E N N

FRANKIZ	p.2- 4
LAOUENEDIGEZH DA VREIZH	p.4
ROPARZ HEMON HA VA MALIZENN	p.5 - 9
E BOURZH UR VAG-TOUNETA	p.9 - II
LIZHERI	p.12-13-14
PLADENNOŪ NEVEZ	p.15-16
LEVRIOŪ NEVEZ	p.16
NEVEZ -AMZER (Son)	p.17 -18
KUZUL AR BREZHONEG	p.18 -20
LUZiatez	p.20 -24
KELEIER A-DREUZ HAG A-HED	p.25-26
Okitania e Lourd, Fatima ,	"
Bulien (Uranion), Breizh ha Brussel	"
PREDERIADENNOŪ WAR AR YEZH (Radioïg, Hor Yezh	p.27-28
ar Bed Keltiek, Preder)	

pep gwir miret -strizh

vvvvv

Diwar bluenn unan eus hol lennerion hag o deus degaset dimp war un dro gant o adkoumansant o menoz diwar-benn BARR-HEOL , e lennomp kement-mañ :

Aotrou Person ker, Degemerit, mar plij, va gwellañ hetoù e-keñver deroù ar bloaz, evit ar pezh a rit evit Feiz ha Breizh. Barr-Heol a blij din kenañ .N'eo ket ur gelacuenn glouar na flemmus tamm etet.Plijout a ra din ho toare kreñv hag hebask da vern an dud hag an darvoudoù..." An hini a skriv kement-se a zo du-hont war an dachenn a vrezel en Algeria.

Un all avat, un den a bouez hag ur poanier start war e dachenn a lavar pegen souezhet eo bet o welout ar "Gasoni" a oa en hor pennad-talbenn diwezhañ " Sizailhoù ".

°°

N'eo ket fell a gav dimp degas de soñj eus hor pemed-stur moulet war niverenn 6-7 B.H., en niverenn gentañ deust er-maez goude an disperti diouzh ar Eleun-Brug " War e anv e valeo hag e sklerio Barr-Heol.Chom a rae dishual e-grenn,nemet evel just,e-keñver ar Wironiez hag al lealded ,nemet e klasko bern an dud hag an darvoudoù gant ur spered reizh ha kristen." Barr-Heol n'eo ket kezetenn ur strollad bennek ,ne gomz en anv kevredigezh etbet hag e vrasañ med hag e welleañ perzh ez eo e frankiz klok . Moarvat ne deo ket difazi met strivañ a ra da chom feal d'e roudenn vroadel ha katolik.

°°

Evel katoliked e fell dimp gwelout sklaer direzomp ha gouzout gant piv hor bez d'ober e-rack kenlabouret ganto ,hag en askont da se hon eus hor ger da leverout e-keñver an intent pe ar c'hontrad etre tud ar FALZ ha ne levaront ket petre ez int, ha katoliked ar BLEUN-BRUG .

Ar c'hontrad-se a sell ouzh ar Yezh hepken, emezo. Ne labourer ket evit ur Yezh e-giz pe vefe un dra bennek distag diouzh pep tra all: distag diouzh ar Vro, diouzh ar Bobl, diouzh an istor, diouzh ar Feiz, diouzh ar Filozofiezh .Ur yezh a zo greset evit diskleriañ memoziou .Un den ha ne vo ket dinden gezelge ,ne skriv ket traoù berboeliek evel ar pezh a zo skrivet war niverenn gentañ " BRUD" "Re elies ,siwazh, e vez savet kelaouennoù er vro-mañ evit klask senkañ mojennoù brizh e -tousez an dud paour... Gensomp-ni ar Brezhoneg a vo Mestr ."

Ur yezh ne deo ket un dra difetis,ur c'hoariell ,ur ver -c'hodem d'ober pecheroù dezhi . Perak e-benn er fin kerout ar Yezh ma n'eo ket abalamour da gement a speredant outi : frankiz ar spered

er stumm soñjal,er stumm prederiañ,er stumm bevañ, gent an holl hengounioù stag ouzh buhez ar Vro hag ar Bobl . Honnezh eo ar wri-zienn c'hoazh eus ar gwir he deus pep yezh da vevañ ,hag eus deves pep koustiañs -den d'he difenn ha d'he gwerezif.

°°

Bez'ez eo ar Yezh un dra a bouez bras eta,un dra a dalvoud-gegezh veur, un dra sekr dre ma'z eo er stumm dioutañ e-unan gwasket gent spered ,gent ijin ur Bobl. Ha koulakoude n'eo ket ar Yezh al lodenn gentañ he priziusañ hon eus da zifenn koustet a gousto,hag emañ ec'h adkevomp an ebegoù hor boa roet e pennad-stur diwezhañ Barr-Heol "Sizailhoù "

Evel Breizhiz ne fell ket dimp bezañ stummet diouzh giz he spered ar C'halleciad ;met evel Breizhiz Katolik ne fell ket dimp kernebet bezañ stummet hervez filozofiezh ur Gouarnant hag ur Stad dizoue. Piv eta a zo dall a-walc'h evit nac'h pebezh riskl a vezo evit bugale Vreizh, mar bez krouet e brezhoneg,er skolioù-stad gent tud direlijion , pe laikad, pe gomunisted c'holoet pe zizolo, un hengoun dirulijion , un hengoun laik , un hengoun komunist ?

E-kerzh miz Du 1957 e savas an Aotrou Kardinal Roques , arc'heakob Brezhon e vouezh enep mennad-lezenn Billières ...Keer a vez kenañ gouarnant, e vez dalc'het lopered, e-giz ma ouzer,ar ministrerezhioù pouezusañ etre daouarn an hevelep kostezemou ,hag an Aotrou Billières a zalc'h stav e grog .Ac'hantel mar deu a-benn eus e youl , mar bez taolet war ar vro er rouded skolioù-se gent o spered dizoue ,mar bez lekaet muioc'h c'hoazh dorn er Gouarnant war ar vugale betek mont zoken enep gwirioù ar gent hag an I-liz, na pebezh disantir na vo ket sevenet emañ e Breizh-Izel,gant holl nerzhioù bev ar Yezh o silañ ar spered dizoue e gwabied er vrezhonegion !

Pa stourmomp evit ar Yezh e stourmomp evit frankiz ar spered .Pa stourmomp evit ar Feiz e stourmomp c'hoazh he muioc'h evit frankiz ar spered ha ne vannomp ket lezel ar Sozialistiezh nag ar Gouarnantiezh d'ober gent an dud niverennoù er Gouarnantiezh he sklavet ar Stad ,na lezel da zisker a-blad ar gwir en deus pep den da vezañ kelennet he stummet,desavet he diorcet hervez e Relijion e skolioù pebet gent arc'hant ar Stad,da leverout eo Arc'hant ar Bobl.

Setu perak kent ma vo re ziwazhet ,betegout ne zeufe da wir ar gwalleur a rekvelomp ,hon eus ni,Katoliked Vreizhat,an deves hag ar gwir ,kent lekaet hon dorn e dorn ur c'henlabourer bennek ,da c'houlenn digentañ kacout resped ha doujñs evit hor Relijion hag hor Filozofiezh kristen .

En emzer e ren hon eus d'en em ziwell muioc'h-mui diouzh galleud nac'homer ar Gouarnantoù a glask mougañ pep frankiz he pep

personelezh . Wer zigarez difenn ar Yezh pe c'hoari genti ,n'hon eus ket de vont da skoazellañ tud e ra dija re e souple-sac'h dirak gelloud mougus Pariz, da c'hortoz sentif warc'hoazh ouzh gelloudh krisoc'h c'hoazh .

Ar Yezh a zle chom ar pezh ez eo bet en amzer dremenet :
Yezh hor Frankiz.

BARR-HEOL

LAOUENBEGEZH DA VREIZH

Anvet eo bet gent hon Tad Santel ar Pab an Aotrou Visent Fave, vikel-vras Kemper, da eskob-skoazeller, da zougen dorn d'an Aotrou'n Eskob Fauvel, eskob Kemper ha Leon.

Hep mar ebet, ez eo bet anvet an Aotrou Fave da eskob abalamour d'an anaoudegezh don en deus eus spered Breizh hag eus Yezh ar Vretoned . Brudet e chomo e labour dispar evel sluzener ar Yaouankizoù kristen ; brudet e tle chom ivez e nerzh-keñon, rak diouzhtu goude maread ar spont ec'h adsavas e-unen gent an Aotrou Liberal (Doue d'hen pardono !) banniel Feiz ha Breizh evit kenderc'hel gent labour ar Bleun-Brug ha kefridi an Aotrou Perrot

Rener Barr-Heol, en e anv e-unen, hag en anv holl lennerion B-H, en deus kaset e c'hourc'hemennoù d'an Eskob nevez, hag an Aotrou Fave en deus teurezet respont un nebeut geriennoù hegeret-meurbet d'hon trugarekist.

E-giz ma tere hon eus kaset ivez en anv hor c'helaouenn hor gourc'hemennoù da Gannad ar Pab e Pariz, en testeni eus anaoudegezh ar Vretoned... Dre un taol dievezhted avat, n'hon eus ket miret an adskrid eus hol lizher hag e oa skrivet e galleg; klasket hon eus edsevel hor skrid, met ne domp ket deuet e-benn . Hol lennerion d'hon digarezo.

Hogen e Uhelded an Aotrou Marella, Kanned Hon Tad Santel ar Pab, en deus bet respontet (e galleg) hol lizher er stumm-mañ :

An Aotrou Paol Marella Arc'heskob Doklea, Kanned ar Pab e Pariz, en deus resevet lizher an Aotrou Klerg, rener BARR-HEOL, hag en deus prizet meurbet ar sentimentoù diskleriet gantañ da genver anvidigezh an Aotrou Fave da eskob-skoazeller Kemper.

Pariz, 13 e viz Genver 1958

(sinet) Paol Marella.

... Plijet gent Doue ha Sent Breizh reiñ d'an Aotrou Fave gras un Eskobelezh hir ha bleunius. Ad multos annos.

ROPARZ HERMON HA VA MALIZENN (eñvorennoù)

Se 'oa un deiz bennak, ur bloavezh bennak goude ma oa echuet ar brezel 1939-45 . Ur prizoniad a oa da vezañ barnet e Roazhon : R. Hermon .

Bet e oa mont da welout ha da glevout petra a oa e kof ar Frensisizien ha petra a c'hellent kaout da lavarout . En tren, va malizenn e-us d'an fenn, e tiblusken diouzh va gwellaig ul LLEGOR kembrek an boe bet e prest digent Iwan an Diberder . En hevelep kombod edo an Aotrou Leiz ar Floc'h, ha neuze an Tad Medarz o vont da Roazhon ivez, met evit kefreديو all, moarvat da aozañ dija ar misionoù bras o deus brudet anezhañ sbace . Div zimezell all a oa en hevelep kombod ganimp, div gelennerez moarvat, rak ouzh hor c'hlevout hon-tri o vrezhonegañ, e krogjont da seoznegañ . Ur soudard a oa eno ivez en e damm kogn . A greiz holl setu hemañ o tirollañ da c'hoarzhim, hag o tapout e bekedig-traoù eus roud ar pakadoù hag o lavarout en ur galleg ssourus a droen e trefodaj Treger " Biskoazh kement all ! Ar retored gent o brezhoneg hag an div soufflez-se gent o seozneg ! Kenavo !!! " Ne ouie nemet galleg an den kaezh, hag e chas chas bagon da glask tud o komz ur yezh komprenus.

Pen errujomp e Roazhon, e tiskennjomp eus an tren hag ez is gent va malizenn em dorn, war-du Palez Breujoù Breizh, e-gevret gent an Aotrou Floc'h. Ya! da di Parlemant Breizh lec'h ma oa ur Breizhad da vezañ barnet dre m'en devoa labourer evit Breizh, ha barnet evel traitour .

Sentez Anns verniget ! Nag e chupennoù glas, nag e dud gent togoù-brezel war o fennoù, ha faskadoù-arnoù emañ hag ahont : polised hag archerion diouzh an druñh . Amañ 'z eus trouz da vezañ moarvat, gent kement-se a dud o tiwall an traoù . Ur vamedigezh ofisiel ha publik, gwir d'an holl dud e feson ha marteze d'ar re all ivez da vont da welout ha da soleau.

An dud e feson : un archer o tont din, ha me gwisket evel just e beleg " Ho malizenn ? Kontant e vefe c'h, mar plij da zigriñ ho malizenn ?

Penaos ? emezon-me sebedarnet . Menel a ris ur frespadig d'en em soñjal . Feiz ! ya ur valizenn a oa ganin e pign ouzh va dorn . An archer hegeret ha doujus avat, a c'hortoze . He me o ti guriñ va malizenn : va breviañ, ul levri bennak, va eotenn ha va soavon-barv, ur serviedenn bennak, en ur ger ar pezh e c'hell vezañ gent ur beleg oc'h ober ur veaj verr . A-hend-all ne oa na bombezenn, na greunedenn ganin, na pistolenn na traktoù dispac'hus .

- Trugarez, eme an archer, dalc'hit gent hoc'h hent ! He me o terec'hel gent va hent betek dor al lezvarn . O vont d'entren edon, pa dostaas un archer all din ... Met an archer kentañ a reas sin hag e c'hellis entren, malizenn ha tout.

Ur pezh sal uhel e oa anezhi, ha tud e-barzh e-leizh, en o sev, dreist-holl studierion a anavezenn darn anezho. Dreist pennoù an dud e klaskis da gentañ gwelout an hini a oen deuet da welout hen bern. Krog-mat e oa an traoù dija.

A-hont edo, e skabell ar re damallet, archerion en e gichen evel just. Sicoul hag o selacu an testoù.

Liakeozh ne oa bet dic'hafset din gwelout prosez ebet hag e heulien an traoù eus va gwellañ : an testoù o tmet a bep eil dre ar memes dor e korn al leurenn lec'h m'edo ar vermerion, hag ar frazenn levaret gant Pennrener al lezvarn da lakaet an testoù da douñf e lavarjent ar wirionez hep kasoni ha gent lealded.

E-touez an testoù a-enep e oa ur vaouez ha n'ouzon ket piv na petra a oa hag a levare traoù a bep seurt a dreuz hag a hed ha pa voe gouennet digenti hag aneout a ree Roparz Hemon e reas ur sell war-du er prizioniad ha satouilhant un nebeut gerionnoù. Ma voe kaset da ezezeñ e -kichen an testoù all hag a oa tremenet dija, mezhek hag izel he fern.

Sechet e oa va holl evezh gent ar prosez, na petra'ta, nemet koulskoude e reas ur sell gwech ha gwecha all en-dro da welout piv a oa eno ha d'ober ur seludig d'ar re a anavezenn. E-touez an dud a oa eno, e oa tud dianav-kear din, paotred iskiz e-walc'h, gwisket holl en hevelep stumm, e du, kofek un tamm, dremmoù kuilt dezho, pennoù ront mat da wic'hañ togou-melofs : "Tud eus an emsev moarvat, a soñjen, deuet ewldon-me d'ar prosez !" deoust ma kaven anezho misterius-tre. Ewel-se o gwelen-me. Met biskozh, evel m'emaon o peouez hen diskleriañ, ne eon bet en ul lezvarn ha ne ouien ket, dinnoz-glan ma oen petra' o oa an dud-se hag a zalc'he d'en em sileñ e-touez ar selacuerion.

Ma'oa eno eta, gent va malizenn e pign ouzh va dorn, ha me savet war begoù va zroid. A-greiz-holl setu unan bennak o lakaet e zorn war va brec'h, hag o sileñ goustadik em skouarn ur ger berr-berr, met war un ton seven : "Aotrou, emezañ, deut'ta !" "Sell'ta, a leveris ouzhin va-unan, n'anavezenn ket an Aotrou-mañ, met karget eo hep mar ebet d'am gervel er-meez ... N'am boa c'hoant ebet da goll netra eus ar prosez ha me d'e heul. Del ma oen erru war dreuzoù dor ar sal, e tistroas an Aotrou ouzhin : "Digorit ho malizenn !"

°°

En deiz all, e miz Genver 1958 em eus bet gwelet war ar c'hazennoù luc'hskoudenn un Aljeried gronnet gent soudardet pe bolised, darn anezho o souten e zivrec'h, darn all ouzh hen testomat, hag o furchel en e zilhed. Abalamour d'al luc'hskoudenn-se emeon hiziv o skriven an eñvorennoù-mañ adlakaet ganti da sevel war c'horre va memor ! Me'oar petra 'sonje an Aljeriad-se.

Mezhek, ne rvennek, fuloret ez is en un taol hag e teolis kraz d'ar "poñsin", rak ur poñsin an hini'oa evel ma lever ar studierion :

- Me! emeon o peouez ober ! Hag e ris ur sell tro-war-dro din en t pas bras. Etre c'hoant enebif ha c'hoant plegeñ. Un archer a dos tees, marteze ar memes hini ha bremaik p'edon oc'h antren evit ar wech kentañ. Ur sin a reas, ur ger a leveras :- Yelvel gret en deus dija !"

Evit en eil gwech e c'hellis mont e sal ar vermedigzh, hag ar poñsin mont ivez d'e du gent e zilhed du, e benn tog-melofs da sikour e genvreudeur kofek un tamm, dremmoù kuilt dezho da sileñ kaoc'hoù en dud deuet d'ar prosez.

Polised kuzh e oant, hag e luc'hañ er poliserezh e vez gret poñsined anezho.

°°

Evidon-me da vezañ bet un tamm strafuilhet gent an teol dismegeñsus-se, e talc'hia da heuliañ ar prosez eus va gwellañ. Derc'hel a reas an testoù da dremen, an testoù e-du gent an tamall. Paol Kentel, ur c'helenner anezhañ, hir-hir e ziskleriaduric'hoù evel pe wefe bet direk ur seliad studierion. Kreston o lavarout e c'hell bezañ Roparz Hemon ur spered fall e zen, diess en em ober gentañ, met evit ar peurrest avat, mann ebet da rebech dezhañ. An Aotrou Even eus Lendreges. An Aotrou Per Laorens eus Pariz, un dukerd anezhañ, deoulaged o skeidif en e benn, ur vouezh o krenañ gent an ten e warve en e greiz, ur vouezh o sevel tamm ha tamm hag o treiñ ar prosez war e wir dachem : droedoù Breizh. Ma kevas met Pennrener al lezvarn hen pedif da deurel evezh ouzh e gonzoù.

Evel-se eo e welen an traoù, i2 vloez bennak goude ar prosez. Met n'eo ket ul levr istor emeon oc'h sozañ, hag o vezañ na deo ket dispar va memor ez eus marteze tra pe dra da reizhañ er pezh a skriven anezhañ.

Bepred eo, pe voe bet tremenet an holl deutoù e voe gret ersav-aeleñs ha lezet pep hini da vont er-meez da gemerout ur bannec'h sêr. Un hater-er bennak da c'houde, setu ur c'hloc'hig o seniñ hag an dud mek-ha-mek d'en em voueñ er sal adarre. Ha me ivez, krog bepred em malizenn.

Ma sevas neuze Komiser ar Gouarnamant, reut he hieratek, en e sae-verner :- E-doug an ersav-aeleñs, emezhañ, ez eus bet lakaet etre hon deouarn a-barzh an Aotrou ... an droidigzh eus ur pennad sinet gent Roparz Hemon ha moulet war ar gasetenn ARVOR. Setu anezhañ eta ar pennad-skrid-se, hervez an droidigzh a zo etre hon deouarn."

Hag e krogas an Aotrou Komiser da lenn ar pennad brudet-se lec'h ma levare Roparz Hemon krak-ha-berr o devoas renket ar C'hallaoued plegeñ da c'houlennoù ar Vretoned ..."

°°

Keit ha ma vin bev, da vilhenañ keit ha na vin ket koue-

Jer evit er pesketærezh ordinal : unan e bep tu war ur berchenn
voan ha berr, ha div all a-dreñv.

E-lec'h 6 martolod er bourzh, ezhomm a zo bremañ 12 den.
A-reck mont kuit, e vez karget er "skotilh" (= er skornlec'h) 10
tonell skorn. Boued a bep seurt a vez renketa ivez evit penzek deiz,
hep ankounac'haat gwinn an ekipaj, ha gaz-oil evit ar c'heflusker.
Diwar neuze, ar vag a zo pere da lakeat da ouel.

Ar pezh a glask ar mestr da gentañ, ez eo tapout sardined.
Ezhomm a zo 800 lur ha betek un donell-bouez anezho da leuniañ ar
c'hibellou pe ar beolioù dour-red. Anat deoc'h ez eo ret d'ar c'heil
da reiñ dour fresk d'ar sardined da virout outo a verwel.

Ur wach peket gent ar roued-troñ, e vez dastumet ar sardined
pe ar gwilheganned a-hed er bourzh e plegioù er wialenn (= gwial
er roued). Ac'halase, ar SALABARER (peotr e avañell) a dap anezho
gant salebardennou bihan (= avañelloù pe roñvalad) d'o lakeat ar
buanañ ma c'hell ar c'hibellou, e-lec'h ma telont chom bev-buhezek.
Ar reoù friket a varv diouzhtu, hag a lak ar re all da bennfolliñ.

Diæs a-walc'h ez eo micher er "C'HIBELLER" a rank eus -
shest ar sardined, o boueta div wach bendeiz pe dair gwach, gant
greun-rogaj (= vioù mora pe hañkaj), skarzhañ ar re varv, teurel
pled ouzh ar gouleier-treden hag a zle chom war eneoù er vivanieroù
(bevelec'hiou), diwall na dafe re vuan en dour-red, ar pezh a lak ar
sardined da vont dreist ar "goulotinier" gent ruilhaded ar vag.

Pa vez graet ar "Boued" (= sardined bev) e c'hell ar vag-
touneta senkañ en donvor, tu pe du, d'al lec'h ma'z eus pesked da
dapout. Gant ar Skingomz ez eo ses a-walc'h her gouzout. A-benn
antronoz, da dazh an deiz, e vez dispaket ar peder linenn.

Pa vez klevet ar youc'hadenn "Bec'h" digent unan bennak,
kerkent e vez torret tizh ar vag ha dastumet al linennoù. Kerkent all
e vez teolet sardined er mor gent ar "BOUETÆR", a-zomadou da gen-
tañ, ha goude hini ha hini, met hep peouez, ken e te an touned d'o
debrif a-hed er bourzh.

Neuze e vez digoret war un duellenn dour-sil, e re glav
munut ha glizhañ, da goach ar vag ouzh decouleged ar pesked. D'an
suppent e wisk pep martolod un dehañjer-lar houarnet a-zoare da
herpeñ troed e vach-pesketa.

Pep hini gent e vach en e zecouarn, e bennoù-glin harpet
ouzh al listenn, hag un tammig kluchet a c'hortoz bec'h an touned.
Rak ar re-mañ, pe grogont, n'eo ket c'hoari e reont, met sachañ rust da
da gacut. ar strad.

Ar pesketæer en deus ezhomm eus e holl nerzh da gas dreist

e besk en un taol, dreist-holl pe vez ur mell anezhañ, war-dru 20
lur bouez. Hiniennou a dap tremen 40 lur bouez, nemet e vez tapet
ar re-mañ gant ar vach-krog.

Awechoù pa vez re bonner ar besk da sachañ anezhañ er
bourzh, e vez riskl o tremen hep implijañ ar vach-krog; rak ma te
ar besk da ziskregiñ e vez teolet ar pesketæer war lein e gain
en riskl da derrañ un ezel bennak, pe zoken e walenn-gain.

Riskl a zo ivez evit an decouleged pe c'hwiter ur besk,
rak en higenn a c'hell strinkañ e lagad ar pesketæer e-unan pe e
lagad unan bennak en e gichen.

Tra ma chom ar "Mat" da voueta a-hed er bourzh e vez
laveret "loened toum" diouto. Neuze n'eus nemet kargañ d'ober.
Pep hini e leka ur sardinenn fresk war e higenn. Kerkent ha stle-
pet er mor, krog diouzhtu "Bec'h mañ! Bec'h aze!"

Ar vertoloded a vez decoubennet-krenn, pennfollet. Pep
hini evitañ e-unan. N'eus ket amzer da goll.

Gwad ar pesked o tifreñt o lost war ar pont, a strink
dre-holl: an dremmou, an dilhad, ar c'horfoù a zo ruz, evel pe
vijs bet ul lezhadeg pe un engenn morlaeron.

Arabat evit, c'hwiteñ war al loen, anez ez a kuit en ur
ges ar re all d'eo heul, e-giz ma weler ur haged-defved en ur park
o tec'hout kuit holl assemblez pe vez spontet unan bennak anezho.
Arabat ivez leuskel ar gwad da redek en dour a-hed er bourzh:
an touned a ya kuit kerkent.

A-wechoù na bad an abadenm-besketa en tu-hont da 20
munud. Koulskoude na vez ket pell o pekañ un donell-bouez.

Er bloaz-mañ n'eo ket bet koulez ar pesketærezh gent
"boued buhezek" hag ar pesketærezh gent perchennou. Marteze na
eo ket "tomm" a-walc'h ar pesked!

Ar pezh a zo sur ez eo penaos gent ar seurt pesketærezh
pe vez tapet pesked, e vez tapet kalz unioù anezho e berr-saer.
Setu perak ar baramentourion pe "armatourion" a zilas tamm ha
tamm ar doare all da besketa, hag a zalc'h da ferif (da soneñ,
da ferdaj) bigi brasoc'h, kempennet ha ferdet er c'his nevez.

Er bloavezhioù da sont e vo gweliet ha met o deus graet.
An doare-pesketa a dle kemm evel an traou all a weler o vont
war-reak hag o kemm. Met ar pezh n'ouzer ket, ez eo ar pezh e
soñj ar pesked eus kement-se!

KORN AL LIZHERI

Evel pep rener kelaouenn e tegouezh genimp lizheri e-leizh hag e vefe a dre sur peadra d'ober un niverenn e-bezh eus BARR - H. ganto. Met ellez! ken bihan ez eo c'hoazh ment hor c'helaouenn ma n'hellomp plegeñ d'hor c'hoant.

Un teaked menozioù evelto a fell diimp tennañ eus darn a-nezho: "Leval des Rapides d'en 18 e viz Kerzu 1957, (KANADA)

Aotrou Klerg ker,

Tri deiz'zo hon eus bet Barr-Heol, ha, m'hen lever deoc'h, n'hon eus ket diskroget dioutañ ken na oa lennet penn-da-benn! N'ou- N'ouzon ket hag -efi em eus bet lennet biskoazh gwirionezioù displeget ken c'hwec'h all. A-du ez en geneoc'h: kent dre gent. De vihanaf e leverit an traoù evel m'eo gwelit, da lavarout eo, evel m'emaint: ar penned "SIZAILHOU" a zo dreist er poent-se

Plijout din o deus graet ivez ar pennadoù diwer-benn an Aotrou Lec'hvien: hen anvet mat an eus me ivez. Ur c'hemered bras d'em zad e oa. Ha soñj aus eus da vezefi bet degemeret div pe deir gwec'h en e gembr pe oa e ti el Lezenez, e Lendreges. Istor hon merzherion, re nebut e dud a vez ouzh hen brudeñ diouzh ma'z eus o klask hen mougeñ

N'ouzon ket penaos emañ ar bed gent Lemuoniz, hogen kaout e ra din e tle levrig an Ao. Bourdallez lekaat un tamm mesk e kokenn kokenn tud'zo. 'M eus ar gredenn: al levrig-se a raio kalz a ved.

Geneoc'h emañ ar wirionez ivez, pe lavarit e tle ar brezhoneg e-vremañ ha dreist-holl an hini da ren, bezañ ur "Yezh ar c'hêrioù"; rak mui-ouzh-mui en em vodo an dud er c'hêrioù, keere vo ober. N'eo ket hepken en Europa, e Bro-C'hall pe e Breizh hepken emañ ar maezioù o tiboblañ. En Amerika emañ ar c'hêrioù (pe ar boez nevez-se) oc'h ober e reuz ivez. Er c'hanada ez eo trec'h poblañs ar c'hêrioù war hini ar maezioù meur a vloaz'zo dija. Maezioù bro-Gebek a zo o'n em garzheñ buan spontus. Ur bern traoù a boulz an dud da vonet e kêr. N'ouzon ket hag-efi e talc'her kont eus un toullad anezho da skouer: levezon ar skolioù, n'eo ket hepken dre ar gelemedurezh e roer enno hogen ivez ebelamour d'an diesterioù m'eo o lec'hiasur pennaeg dezho. Evit mirout da geout re a zispign ... ez a er gerent da chom e kêr. Aesoc'h e vez dezho derec'hel o bugale er skol ha ne vez ket disrannet an tiegezh en un doare mentrus

.... Aneñ e reomp ar pezh a c'hellomp evit hor Bro: ur miz henter 'zo hon eus korolllet evit ar "Broedoù Unnet": ur pikol banniel gwenn na du genimp, douget gent R/M (eus Fouenant), ur fiftveksudennour

anezheñ. Keneded e Vro-C'hall a oa eno. N'eo deus rennet grik.

Ar pezh hon befe ezhomm bras anezheñ (e Breizh ez eo ken bras all an ezhomm) eo ul levrig iistor Breizh berr-he-berr, e-gi an hini a voe moulet gent ar P N B e-pad ar brezel. Anaoudegezh an Istor eo an alc'houez e zigor ar speredoù; hag an dud ac'henn hon eus gallet distreiñ ouzh Breizh eo dre an Istor ez omp deut e-benn d'eo gonit...

Jekez Konan, Krec'h ar Roue

Setu emañ arroudadoù diwer ul lizher all hag a glot gent hor penned-stur an dro-mañ: Frankiz.

Ar M'ns. 1958

E rouestl an emgann evit ar vro ne fell ket d'far gatoliked enkounac'heat un emgann all, unan pouezusoc'h evito eget an hini kentañ: hini o feiz.

Rak n'eo ket ur belbiaj evit koustieñs ur c'hatolik kemerout perzh en un emgann hag a c'hell e ges, evel m'eo dija c'hoarvezet meur a wech n'eus ket pell, direk ul lezvarn, en un toull-bac'h pe zoken d'ar Bed all.

Arabat gwelout en emgann-mañ evel ur sport dedennus da leuniañ an enzer vak. Ret eo deomp reiñ ur ster don ha kristen d'ar pezh a c'hoarvezomp evitañ.

An neptuegezh a zo un dañjer bras, zoken na reomp ur si-chem start d'hon ober. Soñjal a reer evel-hen: "Ar Pal nemetañ eo adsevidigezh ar Vro. Kement hini a glask tizhout ar pal-se, a zo ur mignon din. Un sfer diavaez ez eo ar relijion. A dra sur e c'hellomp bezañ dizunvan e-keñver menozioù personel, ar pep pouezuseñ-holl ez eo." ... Da dostast ouzh ar pezh a c'hoarvez etre ar FALZ ha BLEUN BRUD da skouer.

Menzioù faos ha fell ez eo kement-se. Ur c'hatolik n'en deus ket an droed da vezefi neptu gent na vern petre ha na vern pehini. Servij Doue en deus da gentañ-holl da seveniñ.

Honaf eo er gudenn evidomp: Penaos lekaat Servij Doue da gengloteñ gent Servij Breizh". D'ar gudenn-se n'eus nemet an diskulm-mañ: Servij Breizh a zo lod eus Servij Doue.

Bresañ gwallour Breizh ez eo bezañ kollet he frankiz ha zoken he Frankiz gent ur F bres: frankiz arzel, frankiz espennel, frankiz speredel evel frankiz ensoniezhel - Sentif a ra Pobl Breizh evel ur mevel fur ouzh gourc'hemennoù ar Stad C'hall, da lavarout eo evit gwalc'heñ c'hoantañ un toulladig tud a anver dre vras "Aotronez" ...

(Meur a dre all a vefe c'hoazh da dennañ eus lizher ar peotrig yaouank-flamm-se, rak ur peotr yaouank flamm eo en hini a skriv ar pezh hon eus merket a-us, met an traoù-se a sell kentoc'h ouzh al I^e Lennegezh a-kraver Relijion :ur gudenn da wezañ studiet abred pe ziwezhat ex professo gant B.Heol)

An trede lizher-mañ a zo disheñvel diouzh ar re a-us dre ma komz eus an Abostolerezh d'ober war-dro ar Vretoned divroet. Daoust hag ar gentel a roer mañ a sell hepken ouzh Breizhiz divroet ? Se 'zo da welout.

....Pariz... Kerzu 1957

Un eured vreizhat e Pariz. 200 a dud, 40 seurt gwiskamantoù eus pevar c'horn Breizh, kantikoù e brezhoneg. Hag ouzhpenn devosion vras war ar marc'had.

An Aotrou kure o lavarout e soñj krak-ha-berr : " Kement-se holl n'eo nemet Folklorajoù : ho Vretoned ne dint ket kristen zoken. Pa oankure e Sant-Denez e oa 40 % a Vretoned, ha 2 % a dud fidel d'o relijion "

" Feiz, emezon, Aotrou Kure, daoust ha klasket hoc'h eus ur wech bennak o c'hemerout evel Bretoned ? N'eus kudem ebet ase evidoc'h. Alverniz, Marseilhiz, Italiz, Poloniz, Breizhiz vedaet a erru en ho parrez : " Ma ! n'o deus ken d'ober nemet en em lekaet en hevelep moul, en hevelep stern gant ar re all, e-giz en holl. " Setu endeo ar pezh o deus greet, da lavarout eo dre ma renkent enkounac'haet o Breizh, dilazel o spered breizhat, ha dre ma renkent en em lezel da wezañ beuzet en earglec'h pagan Pariz hag ar Bannlev, o deus dilezet o relijion.

N'hoc'h eus ket ar gwir da lavarout, Aotrou Kure, penaos Relijion Breizh ha feiz ar Vretoned a zo tra diwar c'horre ha distar : Pariz en hini a zo pagan, ha digristen, ha Pariz eo a ra pagned gant ar re a zeu d'en em goll en he c'hreiz.

M'ho pijs soñjet, Aotrou Kure, penaos un den n'eo ket greet hepken gant traoù en amzer vremañ, met ivez gent en holl traoù-se eus an amzer dremenet ha ne deo ket permetet o distaurel kuit, marteze ho pejs soñjet nebeutoc'h ober d'ar Vretoned mont er stern diouzh giz Pariz, ha klasket kentoc'h gwelout hag-ef e oa er stern-se met evit en holl pe daoust hag-ef ne vefe ket da leoskaet un tenn gent eon da vreviñ eneoù en dud ?

Dalc'het ez eus bet da gas en-dro gouarnamant ar parrezioù en hevelep giz ha diouzh an hevelep petrom evit an holl, met an eneoù daoust ha dalc'het ez eus bet d'o ren etrezek er O'hrist ?

T.C.

AR PLADENNOU NEVEZ

Gant fin ar bloavezh 1957 ez eus deuet er-maez adarre un toullad pladennoù o tennañ d'en danvez breizhek. Dre vras e c'heller lavarout ez a an enskrivedur war wellaet kalz kement-se a zo gwir dreist-holl evit rumad " MOUEZ BREIZ " Kemper hag a zo bremañ per d'ar re wellañ.

Menegomp ar pladennoù nevez-mañ :

Kanerien Bro-Leon Lendivizio : FOLKLORE GALLIQUE (Kanaouennoù gouezelek) : Ar Rozenn, Son Londonderry, er Barzh Yaouank, Yannig va Mignon ; 45 tro Mouez Breiz N° 4542

Kanerien Bro-Leon Lendivizio : Quatre chorals gallois (Peder ganeouenn a Vro-Gembre evit laz-kanañ) : Bale gwezed Harlec'h, Dalc'h Soñj, an Tri Angelus, A-hed an Noz. 45 tro Voxigrave VX 6701

Madalen hag Yvon Le Marc'hadour : GANTIQUES BRETONS (Gourc'he-mannoù Doue, an Angelus, Jezuz ' levar deomp pediñ, Amañ pell diouzh an trouz, Adoromp holl, Kinnigomp holl) ; 45 tro Mouez Breiz n° 4546

Kelc'h Lannoned " War Rent hon Tadoù " : SONIOU DA GERZET HA DA GOROLL ; div bladenn 45 Mouez Breiz 4543 ha 4544

Evel n'on ket muzikour ne wezan ket peurvuiañ gwell zedennet gant ar c'han e meur a vouezh e doare al lazoc'h-kanañ ha ne ran ket muoc'h a fed gant ur vouezh " reizh " ha divuhez eget gant ur skrivagner hag a skriv difazi, hogen ne oar ket lekaet e zana-vell da vevañ. Kement-se hepken evit lavarout e kevo unan bennak douget war ar sonerezh da abegañ marteze em doare da vam. A-vis-koezh on bet toulllet n'eo ket hepken gant tonioù ar broioù gouezek, met ivez gant diston mouezhioù er marc'had du-hont. Ma ! ar wech-mañ em eus adkavet ur vouezh evel-se er bladenn tonioù iwezhonet kanet gant kanerien Lendivizio ; ar vouezh kear a zo hini M.T Ini - zen hervez golo ar bladenn. Lavaromp ouzhpenn ne deo ket mouget ar generien a-unan gant al laz evel ma vezont elles, siwezh.

Ar bladenned tonioù kembrest (koulskoude e soñje din e oa " Dalc'h Soñj " un ton iwezhonet !) a zo met-tre ivez, an tu gent en Tri Angelus hag A-hed an Noz dreist-holl

(Pladennoù Kanerien Bro-Leon a c'hell bezañ goulnnet digent o rener, an Abjean, Lendivizio)

Met an div bladenn a erbedan start ouzhoc'h eo an div

e zo kenet gent kenerien diardoh Langonned .Pehini eo ar son e blij din er muiañ ? Pe " an New Amzer " pe " Dre ruiou Langonned " ,pe c'hoazh " Wer Vordig an Dour " , pe zoken " wer vélocipède " ? N'oufen keer hel lavarout . M'hoc'h eus c'hoent gouzout pehini eo an hini e blijo deoc'h -c'hwid er muiañ, prenit 'ta an div bledenn -se . Kleouster ne vezot ket skuizh buen ouzh o seleou !

F. K.

L E V R I O Û

Un Destumet Nevez a Geneouennou kozh : Un destumet

Kenacouennou -Pobl destumet gent er c'horonal Alfred Bourgeois etre 1850 ha 1900 a zo da vezañ embennet hep dale gent " Kenvreuriezh Sonerion Pariz " .

Pevar ugent Kenacouenn a zo enezho ,komzou ha sonerezh da heul .An neb a garfe keout al levr a zo pedet da ges e anv hep dale da Herve ar Menn, 3 Ru Fransiz Garnier ,Pariz 17.vet . Ne vo moulet levrion nemet evit er rakprenerion

Yves Mahyeuc ,gent an Aotrou'n Abad Poisson, EBO pajenn,skuedernou niverus .Setu ul levr ouzhpenn difluket diwar bluenn fonnus an Aotrou Poisson ,oberour istor Breizh ha sever buhez an Aotrou Perrot El levr-mañ e komz an istorour diwar-benn an Aotrou Yves Mahyeuc (1462 -1541), eskob Roazhon . Petra bennek n'anavezet ket buhez an eskob-se dre er munud, nag e holl labourion-ebostolerezh ,e c'h ouzomp trawalc'h evelato evit hen heuliañ e degoushion pennañ e vuhez : tad-priol, kofezour an Dukez Anna, eskob Roazhon ,heg e varv santel en e gaubrig vihan eus e vener-eskob en Eruz . E-skeud komz diwar-benn an Eskob santel,e oar an oberour gent e dro-bluenn skeñv hag eus taolennañ dirak hon deouleged sted er Gouredigezh er mare-se, adal bugeliezh an " Dukez vat" betek marv ebred an dug bihan Frañsez Frañsez III.

E gwerzh e ti an oberpur ,22 ru Sent Loeiz, Roazhon -

CHOMLEC'HIOU DA VIROUT : - Ker-Vreizh, 43, Ru Sent Plasid,Pariz VI.

kreizenn ar Vretoned, e Pariz K.Red :Pariz 5356-b3 . Ur c'hannedig miziek e vez embennet e gallez,heg e skritur K.L.T.

KREIZENN -GELACUIN (Reiz ha Breizh) : 23 Ru Etienne Mercel,Pariz pellgonzer GEN : 08-63 . Gent he c'honferañsoù e c'hell ar Greizenn-mañ keout levezon vras evit edevidigezh ar Spered Broadel ha Kristen

MISION BREIZHAT AN IL-e-FRANS : 152 Boulevard ar Ger,Pariz (13^e) Saldegener digor bemdez adal 9 eur betek 22 eur .C'hoerion,levraoueg .Bodedegoc'ho peotred ha merc'hed yaouank ,ar sedorn da noz(21-23,eur 30) hag ar sul goude kreisteiz (15 eur -22 eur) ...

Barzhoneg gent NEVEZ - AMZER Ton gent : "Evnig Penn ar C'hoed" Ao.'n Abad Gwezdous.

displeg frank,hep strizher
Ar mizioù teñ-val a zo tec'het an neñv zo
glas.D'ar yaouan - ki-zou 've-fe pec'hed hirvoudif
c'hoazh :Dis -- tro-et eo ar gwenni - lied diouzh a bell
vro , he keve vet o deus pep a bried dudi a
vo

I
Ar mizioù teñval a zo tec'het
An neñv 'zo glas
D'ar yaouankizou 'vefe pec'hed
Hirvoudif c'hoazh !
Distroet eo ar gwennilied
Diouzh a bell vro
He kavet o deus pep a bried
Dudi a vo

2 skintin
Rak deuet a zo enzer nevez Klev ar c'hleier o teurel
Paotrezig koant ; O c'han santel
Heol Ebrel a strew,dreist ar menez Pegen estlennus eo ar mintin
E vennou drant E Breizh -Izel

Baronegou Roman ar Mouch, ar Mor gent P. Heliaz ? Ha Besson Ur Galon gent Loiz Herrieu ? Hemañ a zo bet embannet gent skoazell E. B. Ha Goutenn ar Werc'hez gent J. Ricou, hag-ef eo bet paset gent an Itron Ricou ? Ne gev ket din koulskoude e ve ul levr evit deskiñ Brezhoneg. Hag ar Roc'h Toull, paset eo bet gent an Tad Kerrien ? Ha Gent red an dour gent R. Broudig ? kentoc'h eo bet embannet hep goulemañ ali ; degaset e voe dezhañ an emprouennoù da reizhañ ha neuze e ouzhas hag e plegas ! Ha Jarl PRIBL e-unan e voe darbet dezhañ bezañ peket er pech, ma rankas kas ul lizher erbedet o tifenn embenn e LÉSTR PEMBRIDGE

°°

Dern all a lever " Skol dre lizher : OEBR " ne c'hell ket bezañ roet dezhi kennebeut arc'hant, dre n'eo ket ur skol wirion, da lavarout eo ur skol dre gomz " ... Setu hag a zo kavet . Ewel-se e c'hell digareziñ bezañ roet bepred evit stoufañ an arc'hant ouz ar se na blijont ket deoc'h . N'eus nemet ur gwalleur en afer-mañ : Roet ez eus bet dija arc'hant da SKOL OEBR gent Englev Breizh . Peneos kompren neuze ?

Peneos en em gompren e seurt luziatez ?

C'hoazh un all . Englev Breizh a lever : votet hon eus 100.000 lur da Skol an Aotrou Kelvez .- E-giz ez eo merket da vihanañ war kasetenn Kendalc'h BREIZ - C'hwil a gev deoc'h en deus reaset an Aotrou Kelvez ar 100.000 lur -se ? Hopala ! An holl e oar koulskoude petra a ra an Aotrou Kelvez , pasetur doare-kelemañ a vez implijet gentañ . An holl a oar ez eo Skol an Aotrou Kelvez an teol-ese gwellañ, goude hini Kerlenn e-pad ar brezel, evit terrañ an erc'h leket war ar Brezhoneg . Marteze ez eus tud e-berzh ar F. C. hag a zo betwe er skol gent Gouarnement Periz e bromet , a ra an neuze da reif , ha na ro netre . Ul lever a zo e Tregar evit an dud-se o deus un dorn da gemer hag un all da skrapet G..

Warlene ivez e oa bet promet gant un den bras eus ar F.C. : lealded, arc'hant hag all. A-raok DEVEZH AR BREZHONEG e oa . Met goude Davezh ar Brezhoneg , ur wech destumet arc'hant ar gant edmu ar promesañ : kit da sutal gent an 200.000 prometet !!!

Hervez klevout e oa bet tud e Bodedeg Englev Breizh e Gwened o klask ensbiñ ouz Skol an Aotrou Kelvez o vezañ ma'z eo ur SKOL DEVEZH . Deoust ha gwir ez eo an dra-se ? Neuze ez eo bepred er memes tre : ar Vretoned galvet da reif da ministerezh ofisiel an Deskadurezh . Met deoust ha n'eo ket tud prevez a ro an arc'hant, tud prevez a zastum an arc'hant, strolledoù prevez, kelc'hiñ Keltiek prevez , bagedoù ha kevrennoù prevez eo a vez o kental ?

°°

Leveric'h all a zo c'hoazh o redek " Labourer a-enep

Breizh hag a-enep ar Brezhoneg ha netra ken, e ra an dud e leke dizurzh o nac'hañ implijout ar reizskrivadur e-berzh Stad ! " Setu aze ! An holl a oar ez eo bet ar Stad C'hall a-viskoazh , a-enep Yezh Vreizh . An holl a oar emañ c'hoazh a-enep , deoust d'ar pezh e vez gwelet gwech ha gwech all war ar c'hazetennoù evel war an Ouest-France nevez'zo . Hag e plijfe da dud'zo holl leket da greid emañ a-du gent ar Brezhoneg pa ro hec'h asant evit ur reizskrivadur ijinat gent Kador Geltiek ar Skol - Veur ? Ar ministr hag en deus roet an asant-se , war ali Dean Skol-Veur Roazhon , a ouie mat , moarvat, e lakfe ar reizskrivadur nevez-ijinet muioc'h c'hoazh e vaskailhez e studi ar Yezh . Gouzout a ra dreist-holl e vefe stoufet gent ar reizskrivadur-se ken disheñvel diouz ar re bet implijet betek -hen, hent al lennegezh wirion bet krouet en hor Bro abaoe 40 vloaz hag ouzhpenn .

N'eus nemet gwelout BRUD, pemedoù-stur ar gelaouenn , evit gouzout ez eo se dreist-holl a glasker : distreif ar re ysoanek diouz hent skrivagnerion vras hor Bro. Pezh a glasker ez eo mirout ouz ar Vretoned a gacut Frankiz ar Spere.

Met eo o darc'hel war bazenn izel ar vrizh-lennegezh . Mer n'eo ket gwir an dra-se , da dud ar F.C. d'hen diskuez . Met ne vimp ket dislavaret diouztu gent ar fedoù .

Reizskrivadur e-berzh-Stad ! Piv a ra ar reizskrivadur e Bro-C'hall . Ministerezh an Deskadurezh pe an Akademiezh , pe an Implija a-viskoazh ? Petra'vefe lavaret gent ar C'hallaoued ma vefe kemmet ar reizskrivadur gent ur ministr bernek ?

Met ni, Bretoned, e zo graet evit sentif

°°

Evit gwir, n'eo ket ur ministr eo en deus roet an urzh evit ar reizskrivadur-se . Mer bije goulemañ digant ministerezh Periz en un doare sklær , e respontfe moarvat e ra foutre-kaer eus an dra-se . Ijinat eo bet gent un den , hag o vezañ ma'z eo an den-se mestr war arnodennoù ar Brezhoneg e Breizh, e ra ar pezh a gar . Al lizher digent ar ministr n'eo bet nemet un doare da implijout galloud Periz evit servijout e c'hallaoud personel .

Bremañ sentif, Bretoned , rak graet eo c'h evit sentif ! ha mer ne sentif ket e vo lavaret diwar ho penn ez eo c'h tud aheurtet , tud a zizurzh , hag e labourit ensp ho Pro .

N'hoc'h eus ket aotre da gacut frankiz , na frankiz da soñjal ar pezh e soñjit, na da reif hoc'h ali . Ha ni, Tregariz, n'hon eus ket ar gwir da soñjal ez eo ar reizskrivadur diwezhañ

gweshañ luziatez a zo bet ijinet bikoazh . He mat e vo dimp degas
emañ testeni un dan a-bouez, a zo bet ur stourmer en e anzer ha
n'hell ket mui en askont d'e garg ha d'e yec'hed kemerout kalz a
berzh en Emsav . Un Tregeriad a ouenn tur ez eo. Goude bezañ res-
wet KBLC'HLIZHR KUZUL AR BREZHONEG e skrive kement-mañ "

Gwechall e rene war en dachenn vrezhonek , en Ao.Vallée, t
ted ar yezh a n'hallfe an den leverout ...eilet gent dacu zen : An
Ao.Perrrot hag en Ao. ar Moal .Gouestlet o doe o-dacu o buhez d'ar
Brezhoneg ,ha rost o deus d'ar yezh un diazez feryv ...Ar roudenn-
se o deus kleuzet a zleje bezañ dalc'het genti . Met piv 'seleac ?
Pep hini en deus e venoz :dam pleset uhel , a fellfe dezho reiñ
d'ar brezhoneg ur reizhskrivadur hag e zispenn tres ar yezh deasket
da gentañ ;darn all a fell dezho kacut ur yezh pur, disemm diouz ar
relijion pe diouz ar politikerezh ... "

o°o

Leveret e vo dimp : " Sentit,emañ ar gouarnement o vont da
reiñ dimp en dre-mañ hag en dre-se .Touellerezh ! Benrion ar
F.C. a oer mat int o-unan ,rak n'int ket geneouision ,n'aus ket kalz
a dre da c'hortoz digent gouarnement Pariz evit hor Yezh . Met pro-
metet o deus int ivez e c'hoarvezfe en dre-mañ hag en dre-se ,ha ne
fell ket dezho leverout o deus c'hwitet wer o zeal.

Sec'het oc'h,tudù keizh, ha ntre ken :ne vo ket aotreet
deoc'h ober hent pelloc'h ,nemet e kemerfec'h un hent all, hini ar
Frankiz gent er re a gar anezhi .Poent eo deoc'h distrei'n.Spi hon
eus e komprenet e koulz hag e kentel .Grit ho labour - hag hemañ a
c'hell bezañ brae,efedus,talvoudus gent na vo ket klasket dispen-
ner re all ,gent na vo harpet kement hini a labour, zoken gent ar-
c'hent KENDALC'H .

Pecour-kezh KENDALC'H ! n'en deus ket komprenet c'hoazh
pebezh korventenn a zo o tansen kousheñ warnañ ,deoust m'eo krog
ar garun da grollad en e greiz dija , e-riskl da skubañ kuit al la-
bour grest gent ar Yaouankizoc'h e-c'houde ar brezel . Rak Yaouanki-
zoc'h Breizh a blij dezho labour reizh ha leal, ha krog ez int da
skizhañ dre forzh bezañ tremenet lost al loue dre o gerdh.

NOTENN A -BOUEZ . - Ur bern lizheri en em gev genimp ,he bec'h e-
welc'h hon eus ouzh vo respont,dreist-holl ebace m'e-
mañ karg KUZUL AR BREZHONEG war hor chouk . Pedif a respont hor c'hen-
skrivarion d'hon digarezif ,ma ne respontomp ket dezho bep tro.
Pedif a respont hor c'henlabourerion ivez d'hon digarezif
ma ne welont o skridoù war BARR-HEOL . Un dibab e respont ober e-
vel just ,peogwir ez eo bihan B.H. Met TALVOUDUS e vez bep tro e-
vidomp kement skrid, pe studiadenp a respont. Bernozh Doue d'an holl

GOBARIET DISPAR EZ BO KUZUL AR BREZHONEG ! N'mkoumac'hait ket
kes ho PROF d'ar Sekretour-Tefizorer: L.Morvézen,6 Bali ar Gar
Kerk-Kemev, K.R. I316.63, An Nacned ! TRUGAREZ !

..... K E L B I E R A - D R E U Z H A G A - H E D

LOURD : OKITANIA E LOURD -E Lourd emañ an holl Yezhoù en
enor (nemet ar Brezhoneg ?)..
Deoust ha n'eo un dre reizh prezeg eme, kensa eno,pedif enc en
Okitaneg, er Yezh a implijas ar Werc'hez da gonz ouzh Bernadeta ?
... " Devezh Okitania an Eñvor hag ar Bedenn " dindan baeoniez
an Aotrou'n Eskob Thez, a zo lakaet d'ar sul 23 a viz Meurzh 58,
d'ar sul nesañ d'ar 25 a viz Meurzh, an deiz ma tisklerias ar
Werc'hez e bigourdan, e oa bet KROUET DINAMM "

Ar sul 23 e viz Meurzh 1958, en oferenn er Vougev ,e
vo prezeget ,e vo kanet ,e vo pedet e Yezh Ok . Werc'hed ar vro
vigourdan a zispako ,lorc'h enno, kapuled Bernadeta, kompagnu-
kaet ma vint evel gent ur boked mil-liv gent koefoù koant Bro-
Okitania a-bezh : ruban Arlez, barbicheg Limoj, serrred Agde,
pailholem Tolosa .-

Goude kreisteiz e vo embannet anvich ar re o devozo
gonezet prizioù en ur Genstrivadeg vras gallek hag okitanek ,
diwar-benn Kantved Biz-he- Bloaz an Diskleriadur Glorius .
(Tennet eus KAZETENN AR VOUGEV I-12-57 ha si-
net : Jozef Salvat)

Deoust ha ne wefe ket un dre vat d'ar Vretoned ,destu-
met holl war un dro e Lourd da viz Mae 1958,kemerout skour war
Okitania ,he kensa,int ivez, dirak Werc'hez Dinamm Massevielha,
prezeg he pedif e Yezh o Bro ,yezh komzet ivez gent Mamm ar
Werc'hez, Santez Anna, d'he mignon santel Nikolazig ?

Meg Mabig EFFLAMM ,Person St Erwan

F A T I M A ! - Dleour omp d'en Itron a Sant Pér eus Sant -
Brieg eus ar c'heloc'h a verkomp emañ hag a zo bet
degemennet dezhi gent un niz dezhi o chouk er Portugal .

" Kouezhet ez eus bet war Petina hag ar Vro tro-war-dro,er
17 a viz Here diwezhañ (1957) e-pad 3 eur, hag an hecl o splen-
neñ skedus e-kreiz un cabl digetar , ur barred plu-erc'h luger-
nus . Ar plu-erc'h-se ,kaer ha brav evel seiz, hag a steuzie

kerkent he ma klesked tapout krog enno, a zo bet gallet koulskoude o luc'hskeudennih .

Maezetennou ar Portugal o deus komzet diwar-benn an darvoud-se ,met difennet ez eo bet e-berzh an Aotronez Eskibion ober displegadenn ebet da heul.

BULIEN - Evel ma ouzer ez eo e Bulien e oa bet kevot da gentañ Uranium e Breizh .Komzet en deus bet BARR-HEOL diwar-benn Uranium Bulien war an niverenn 8, Gwengolo 1956 ,paj. 17-18. Nevez'zo evet, ez eus bet renket ehenañ gent al labour : kouezhet e oa bet ar vengleuzerion war ur stanked-dour he kear o devoa lekaet pompoh (bangounellch) da vont en-dro deziz ha noz ne dishent ket dizec'hañ ar pafis . En tiegezhioù diwar-dro evet, e oa bet disec'het an holl buñsach ,ha dam all e oa koazhet-mat en dour enno . **ESUNTEFON VREDET** Santez Merc'hañid ,un 300 m.bennek diouzh ar vengleuz e seblante an dour bezañ bihanañ emmi ivez , dres pa'z eus anv da lekaet dour en tiez ar bouk.

Pa ne oant ket eta evit donet e-benn eus an dour, o deus mistri ar vengleuz divizet dilazel al labour, daoust ma oa er c'heilh-ureñion un hini gwellañ eus Breizh marteze, dre ar c'hemented e uranium a oa ennañ.

BREIZH HA BRUSSEL : Er bloaz-mañ e tle bezañ o Brussel un Diskouezadeg Etravroadel eus ar bresañ .Ha pep bro o striveñ da zispekia eno ha finvidigezhioù . Diwar-benn an darvoud-se e lennomp an notenn-mañ war ar gazetenn c'hallek " AURORA 25-I.58) ." D'ar mare ma sever e-leizh a steuermou-debour da adreññ buhez d'ar rannvroioù ,ha ma kont ar Gouarnement war an bounstiezh da zstum arc'hant estren , e c'heller bezañ souszhet o walout gent pebezh diseblanted fesus e ra urzhierion Diskouezadeg Vrusel e-keñver rannvroioù ar Frañs.

E-kerzh ur vodedeg e Pariz, poadred-arack en tiez-koñveres bres er rannvroioù hag ar re kerget da Klediañ gent an Douristiezh o deus klemmet abalamour d'al lec'h dister miret da rannvroioù Bro-C'hall, e Pavilhon Bro-C'hall .

Dam eus ar rannvroioù zoken a zo bet dilezet-kremm hag ankouset-mik .BREIZH da skouer he deus renket ober ur goulem da Vro-Velgie ,heg hemañ a lezo genti eus ar 15 d'an 30 a viz Mae , he diskouezva (stand) eus frouezh al labour -douer ...Dre-se, n'enevezo gweladenourion an Diskouezadeg, pinvidigezhioù touristikel heg ekonomikel BREIZH nemet e-pad 15 deziz ha c'hoezh en ur Pavilhon estreañjour "

PREDERIADENNOU WAR AR YEZH

N'eo ket e-walc'h youc'hal e-bouez-penn : ar Yezh et Skol , ar Yezh er Radio, ar Yezh er Bureverezh : en ti-post, e ti ar resevoir-tailhoù .Hep komz zoken eus bolontez Gouarnement ebet ,ez eo arebet ankouezh ne vez ket lekaet ur Yezh en implij,ken ses he leverout chou d'ur yer ! Lekaet a reomp da wir koulskoude penaos : an IMPLIJ hag an EZHOM eo TADOU- MAGER pep Yezh .An EZHOM mparvet da vezañ lekaet da gentañ hag an IMPLIJ da c'houde . Amañ ,e BREIZH ez eo an IMPLIJ eo a zo trec'h d'an EZHOM ,he setu perak ez eo ken diaes labour paotred-ar-brezhoneg ,rak an IMPLIJ a zo tra un dormadig tud deaket ,hep hent ebet da vont d'ar BOBL ! Arebet koulskoude ankouezh kennebeut talvoudgezh an IMPLIJ e-touez un nebeudig-tud e-sell eus an amzer da zont !


Ar re a bled gent ar RADIOig !e Breizh a seblent disoñjel an dre-se .Hep gouzout dezho,e reont geou ouzh RADIO an amzer-da-zont ,rak oc'h ober o zres eus ar RADIO e virent ouzh tud all da zeskiañ ar vicher a zispleger er Radio,ur vicher enezhi hag a zo ezhamm tud doneznet-kaer d'ober enezhi ervat, ur vicher hag a zo ezhamm da zeskiañ ivez evel pep micher. Mar befe lekaet etre hor daouarn ar gerg eus ar Radio e Breizh (e brezhoneg ne petra !) penaos bezañ barrek da bourches eus an eil deziz d'egile : keleier ar vro,keleier etrevroadel, keleier politikel, sbadennou-diduiñ, displegadennou, pezhioù-c'hoeri, Skinwelerezh ! Pelec'h ar feoltr enañ an DEKNIKOURION ???

HOR YEZH (500 lur er bloaz K.R. :G.Etienne ,Maeñ ar Ya, Kastellin, 1162-91 Roazhon)

Setu perak rolloù-gerioù evel ar re aozet gent R.Hemon ha moulet war HOR YEZH a zo da vezañ studiet pizh ,dre ma c'hellont bezañ ur vengleuz e c'herioù evit kement seurt labourerion vrezhonek e zo ! Sur-mat n'emañ ar roll-se da vezañ degemeret en ur bloc'had,ha meur a wech e tichañs da ziskibion VALLES ha MEVEN NORDIERN ma'z omp holl tamm pe damm skrijañ . D'hor menno enañ PEP GER da vezañ studiet evitañ e-unan .Gerioù evel **Bioksidenn** a zo mat da vezañ degemeret evel-se .

Aozet pizh ez eo bet ar gerioù nevez-se hep mar ebet, hag e c'hellan dougen testenñ va-unan war gement-se .Hep kacout etre va daouarn na dinden va deulagad labour R.Hemon an eus sevet un Istor HERR AL LONNEGEZH C'HRISTIANEK (100 pajenn) ha renket an eus meur a wech adkemerout ar gerioù gresianek o-unan : lakaomp EPIGRAM , IDILLENN .Klotañ a re ar gerioù implijet gent reoù R.Hemon alies ... D'hor menno koulskoude ez a re bell R.Hemon ,hogem evel ma lever e-unan : kinnigoù ez int .

BARR HEOL



Directeur: M. LE CLERC, Rect. Buhulien, C-d-N } koumant:
No 15, Juin 1958, Trimestriell, Prix du No: 125 Fr } 500 lur

Rener: M. Le Clerc, Person Bulien, Bro-Dreger
N-enn 15, Mezheven 1958, Trimiziek, Priz an Niv. 125 lur

T A O L E N N

FILOZOFIEZH AN EMSAV KULTUREL (3).....	P. 2
KELENNADUREZH EEUN (Diviz etre ur Grusifi, Skeudenn ar Werc'hez, Ur Pinsin Dour benniget hag Un Ti)...	p.4
Pedenn H.T.S. AR PAB XII evit KANTVED LOURD	p.5
KELENNADUREZH UHEL: Ur Feiz en he ment hag an Divroerezh.....	p.6
UR GONTADENN-BOBL: KAERAN SOEZ.....	p.8
AU SUJET DE L'ORTHOGRAPHE BRETONNE.....	p.17
RAKSKRIDIG	id..... p.18
DALC'H SONJ O BREIZH-IZEL (Lun Fask 1958).....	p.19
PREZEGENN AN AOTROU KLERG.....	p.20
KOMZOU AN AOTROU EZEL.....	p.24
NEVENTIZOU ...KELAOENNCOU.....	p.25
KANTIKOU...LIDOU F BRO-DREGER.....	p.27

pep gwir miret-strizh

E miz Meurzh diwezhañ (1958) ez eus bet embannet ul levrig lieskrivet a-berzh KENDALC'H hag EMGLEO BREIZ, dindan en anv a "Sklerijenn" o teurel, sefset, sklaerder war istor ar Feizhakrivadur peurunvan, da lavarout eo, war istor ar ZH brudet. Grest eo al levrig-se, evit ul lodenn vat, gant lizheroù prevez troc'het ha didroc'het diouzh ezhommù ar gaoc. Ar re n'o deus ket hen lennet, a vo kelz gwelloc'h dezho chom hep hen ober : muioc'h a zroug eget a vad a rafe dezho, evel m'eo risklet d'ober droug d'ar re o deus hen azot, pe hen embannet, ha pelloc'h eget, d'an Emsav a-bezh. Hogen devar ha karg BARR-HEOL a zo klask en dervoud mentrus-se ar gelennadurezh a zo ennañ.

Ne fell ket da VARR-HEOL barn ar surlt doareoù-ober-se hag a daol er blotoù lezennoù al Lealded. N'hell nemet eliañ ar re o de-vezo c'hoant da anout ar wirionez diwar-benn ar ZH hag an emell pe an diemell eus an Alamaned en efer ar skritur, da lenn al levrig- a gomzomp snezhañ pelloc'h - sevet gant Per Denez hag a ziskouez sklaer pebezh istorourion fall ez eo darn eus ar re a glask bezañ sellet evel mellezourion er ouiziegezh e Breizh !

Ne vefe ket mat kennebeut da VARR-HEOL pouezañ war ar skouer fall roet gant tud hag a gave dezho e oa o devar gwerzhañ lizheroù mi-gnoned dezho. Gwir eo, lod eus ar re o deus pleget da ziskuilhañ al lizheroù-se m'en em sentent ket ses-tre en o dilhad moarvet, rak n'o deus ket goulet e vefe merket o anv e-kichen hini ar c'haser, o c'henskriber.

Hogen grevasoc'h a zo c'hozh. Rebechet ez eus bet da dud EMGLEO BREIZ ha KENDALC'H bezañ grest implij eus arc'hant ar Vretoned, eus Aluzen ar Vretoned, eus an aluzen-se grest da gñver DEVEZH AR BREZHZHONEG evit moulañ "Sklerijenn" da esa lebezañ kenvroiz dezho; hag an arbenn a gement-se ez eus tud hag a zo chomet hevlene hep kestal. Sur-mat n'eus ket dispignet kantmillurioù evit moulañ al levrig-se : paper, stensiloù, liv, tredan, labour, frejeb-post. Hogen ne verm, na pa ve koustet ur GWENNEG hepken, ez eo kement-se un di-megeñs e-keñver levrigez ar Vretoned ha mar befe gouezet gant ar bobl pe implij a vez grest azechoù gant o arc'hant....

Decoust ma' z eo ret leverout an holl drec'h-se, e tleomp mont donoc'h en efer-se da virout na c'hoarvezfe kement all en amzer da zont ha da wlaout sklaeroc'h pe hent hon eus da generout evit selviañ

hor Bro, hor Pobl, hor Sevenadur.

Da gentañ : arabat klask adsevel ar Vro dre hent ar gevier hag en dislealded. Ar Vretoned n'int ket gwelloc'h eget ar pobl, all. Ar Vretoned koulz hag ar poblù all, dre forzh keout hag ekeout "gwalc'hadeg-ompennù" a rumm da rumm, e kement stumm 'zo tout: le- vrioù, skolioù, journalioù, radio, kinema, e c'hell donet da gacut mat er pezh a oa dislealded pur ; met n'eus netra e gement a leka muioc'h ur Breizhad d'en em sevel eget sentout pouez en dis- lealded war e chouk, hag en em rentiñ kont eus an dislealded-se. An itrikoù, an troioù-gwidre n'emaint ket diouzh e spered, an etinded ne leveren ket. Setu perak e pennañ BARR-HEOL diwar-benn an dareu- predoù etre ar Blaun-Brug hag ar Feiz e c'houlennep ma vije diskleriet fraezh menozioù pep hini.

D'en eil, ez eus peadre da c'hoarzhin gent an traoù bugalel m'eo an diskleriedurioù a feiz grest da gñver Diskouezadeg al Levrioù brezhonek, e Kemper warlene hag e Roazhon nevez'zo, gant Pennrenerion KENDALC'H hag EMGLEO BREIZ ! Diskleriedurioù hag a zo traoù bugalel a levaromp. Evit piv e levarer "ez omp Frañsizien leal ha Bretoned ken tær all !" : Evit ar Vretoned o-unen ha na lennet ket ar c'hozh- se? Pe evit ar pennañ-dre-usted ? Keer a vezo leverout hag adle- varout kent gwech ha mil gwech ar gerioù-se, decoust ha kement-se a cheñcho doare ar fichennoù a zo e burevioù ar prefedioù, etre daouarn peotred an hollgelouerezh-stad, diwar-benn kement den a ra war-dro an Emsav, hag e "gurriculum vitee ? Peotred ministrerezh an Disberzh" ne dint ket moñs, hep mar ebet, hag a oar o micher.

Setu perak ne oa ket mat skrivañ ar pezh a zo bet skrivet war BREIZ, kezetenn KENDALC'H, ar pezh a zo bet skrivet diwar-benn ar "strolledoù ekstremisted e glesantez gent ar Stad C'hall" (paj.2, N° 14). Dre na oar netra Peotred Kendalc'h diwar-benn kement-se, ha dre n'int ket karget d'ober labour "peotred an hollgelouerezh-stad" ha dre na deo ket gwir tamm ebet Marteze o deus bet c'hoant d'en em wennañ o-unen, marteze o deus bet c'hoant da zisker kenvroiz na bli- jont ket dezho, marteze o deus bet c'hoant da gacut un endorezenn pe un diskuroner evit gellout tostaat dispont ouz tud ar Government hag an dud e-karg. E gwirionez ar gerioù-se ne dint allaz nemet un testeni ouzhpenn eus gwander, eus distervez hon Emsav hag un teol ouzhpenn da zisker, da derriñ linañ en Emsav o-unen.

Ne vo grest netra badus, hep unveniezh ar Vretoned, e pep eounded hag e pep lealded. Ma' z eus ezhomm dietroñ, neuze dietroñ, ma' z eus ezhomm sklaerereat an hent, sklaerereat an hent, ma' z eus ezhomm da c'hoari evel Nevenoc, gw'chall, Ted ar Vro, hag a ouzenn kemerout e amzer kent sevel Rouantelezh ar Vretoned, neuze c'hoari evel Nevenoc, met bepred e pep oestis, gwirionez ha fealded.

K E L E N N A D U R E Z H E R U N

(Bloevzh er Werc'hez ha Koarsiz 1958)

DIVIZ ETRE UR GRUSIFI, SKRUDENN AR WERC'HEZ
UR FINSIN DOUR BENNIGET, HAG UN TI-CHOMAJ

vvvvvvvvvvvvvvvv

(3 eur bennek goude kreisteiz ez eo. En ti e weler balafsinenn aleouret en orolej o vont hag o tont... An eur a son ...)

AR WERC'HEZ (wer un deol vihan e korn an ti) : Sell ! teir eur o son. N'eus den en ti ; er vugale a zo er skol ; en ted hag er vamm a zo er-meez gent o labour, er park pe o wese . Pegen sioul ez eo an ti hiziv ! ... Met pebezh c'hwezht vet en-dro din gent er bokedoù-se lekret e podañ bihan gent er vugale hag o mamm...

AR GRUSIFI (e-us d'an oaled) .- Mamm ! stad e zo ennon o vezañ ma roer kement-se a enoriou deoc'h , he ma tiskouezer en ho keñver kement a gerantez, dreist-holl er bloaz-mañ hag a zo gouestlet pem-debenn deoc'h. C'hwi eo va mamm. C'hwi eo hoc'h eus va douget, va mailhuret, va meget ha desket din bale . Koulskoude n'eo ket abalamour da se heñken ez eo dleet deoc'h bezañ enoret. Met dre ma' z eo bet plijet gent va zad ober deoc'h kemerout perzh em Pasion hag en Silvidigezh ar Bed.

AR WERC'HEZ (umbl ha leun a zoujenn) . E gwirionez, ne veriten ket kement-se a enoriou, rak deoc'h-c'hwi, va Mab, ez eo dleet pep gloer ha pep meuleudi... 3 eur a zo o pevez son . Teir eur goude kreisteiz . Me'm eus soñj , e oac'h du-hont war Verez-Golgota, un tamm evel ma'z oc'h aze, a-us d'an oaled . Eno avat, edoc'h gent ho korf, ar c'horf an bos bet an enor da reiñ deoc'h, e-lec'h bezañ un tamm koad evel ma'z eo ho skeudenn en ti-mañ . Ha Poan deoc'h 'leizh ho Kelon hag hoc'h Ene .

AR GRUSIFI . Yal bev e oen er c'horf ho pos roet din. Yal da deir eur goude kreisteiz, c'hwi, va Mamm, a oa tost din ha setu perak en ti-mañ, ez omp o'hozh kichen-ha-kichen, o vezañ ma oer ar gristenion a zo o chom anef, er priedoù hag o bugale n'heller mui hon dispertieñ en eil diouz egile.... Met va Foanid... o ankouret en eus...

AN TI (gent ur vouezh don ha solanel) : Aotrou Krist, Mestr al lec'h-mañ, ha c'hwi, Gwerc'hez, Mestrez al lec'h-mañ ! Pebezh enor din-me bezañ ouzh ho kweskediñ . N'eus allaz e-skeud va mogeriou nemet ho skeudenoù benniget, hogen keout a ra din ez on ivez d'ez zro evel ur mezellour eus ar Baradoz 'lec'h ma renit leun a vuez hag e c'hloer da virviken

AR GRUSIFI . - Te ivez, Ti-Chomaj, a zo warnout lod eus va meritiou, rak skocet ez eus bet warnout gent er beleg en Dour Santel, en deiz me oes bet benniget. N'out ket ken priziuz marteze ha va iliz e-kreiz er barrez 'lec'h me chom deiz ha noz, en Tebernekl. Ha koulskoude ez out evidon-me evel un Iliz, ur Chapel, dre ma'z out galvet da weskediñ ha da lojñ tud hag a zo warné sbece o Bedeziant merk ha sin ar Groez.

AN TI : - Me, un Iliz ? ur Chapel ?

AR WERC'HEZ : - Klevet ac'h eus va Mab ouzh hen levrout dit. Ha n'eo ket dreist-holl, abalamour m'emañ Krusifi va Mab Jezuz ha va skeudenn-me enoret, met abalamour ma'z eo er Gristenion e zo anef o vevañ, bugale da Zoue ha bugale din-me va-unen.

AR FINSIN DOUR BENNIGET (e-tal ar gwale) : Me va -unen a c'hell dougen testeni war gent-se. Rak en dour benniget a zo ennon-me hag a vez kemeret gent sin ar Groez, gent tud an ti-mañ pe savont ha pa' z eont da gouket, a zeges da soñj dezho eus en Dour Meur ha Santel a reas gento kristenion hag a zeges da soñj dezho beure ha noz, e tleont bevañ dalc'het evel Bugale er Groez ha Bugale ar Werc'hez Vari.

(tennet eus KOUIMIG AR GINDI 23.2.1958)

PBIENN HON TAD SAMTEL AR PAB PIUS XII EVIT KAVTVED
DEIZ-HA-BLOAZ GWALDIGEZHIOU LOURD

Sentus ouzh koulidenn ho mouezh a vamm, o Gwerc'hez C'hlan Lourd, e taredomp d'en em deurl e-harz ho treid, direk ar vougev dilorc'h 'lec'h ma plijas geneoc'h en em ziskouez da verkañ d'ar re zientek hent ar bedenn hag ar binijenn, ha da skuilh war en dud poaniet gresc'h ha burzhudoù ho madelezh hollc'halloudus.

Plijet geneoc'h, o Rouenez trugarezus, degemerout ar meuleudiou hag er pedennoù teer a gas devedoc'h gent fizieñ er bobloù hag ar broioù gwasket gent an tribuilhoù hag an enkenioù.

O gwaledigezh wenn eus ar Baradoz, ergasit eus ar spereoù teñvalijenn ar fals-kredennoù dre sklerienn er Peiz ! O liorz-hoz visterius, kreñvedit gent c'hwezht nevel en Esperañs an enec'h fallgelonet ! O mammenn dihekus a zoureier salvus, lekit ar c'helonioù disoc'het da advevañ gent froudoù er Gerantez divin !

Plijet geneoc'h, pa'z omp-ni ho vugale, hon nerzhañ en hor poanioù, hon diwell en holl riskloù, hon harpañ en hor stourmedoù, en doers m. karimp ha me servi jimp ken met Jezuz, ho Mab benniget, ma veritim keout ar joziou peurbadus, e-tal ho tron, en Neñvod.

Amen.

KELENNADUREZH UHHEL

UR FEIZ EN HE .MENT HAG AN DIVROBBREZH

vvvvvvvvvv

Ken lies bodadeg beleion pe aluzenerion ma vez studiet enni kudenn ar Relijion e-touez an Divroidi, e vezer sur da glevout al lever boutin-mañ " Feiz ar Vretoned a zo ur feiz dre gustumañs ha didelvoud : kerkent ha ma taolont o zroad er-meez eus o bro, e taolont pep tra kristen e-gostez. "

Hag ar veleion nann-breizhiz da bouezañ war gement-se gent o holl nerzh, sonn a-walc'h o c'hribell ha fæsus un tammig, evel pe gevfont un tamm freals mezhek oc'h izelaat ar re all d'o lekaat en hevelap doare reuzeudik hag i o-unan. Divarc'het-neet, ar peourkeezh beleg breton a ya e-du gent an abegerion, ha war-bouez nebeut, evel lusket gent ur chivousted (mesokiezh) diemskiant, e vo prest da washeat en traoù : gouzout a oar ervat ez eus e Breizh komedoù-bro e gever emmo parrezioù-lec'h n'eus ket un tiegezh a gement e venk d'e zeverioù e relijion (deoust e bro Leon, pe Witreg pe Foujere hag all) ; gouzout a oar ivez ez eo trist-meurbet "doare ar "Menez" 'vit pozh a er relijion gristen -, met gent son da vezañ kemeret evel (sell un den 'strizh a spered hag un den diwar-lerc'h, neuze e komzo diwar-diwar-benn an esperañs start'zo e tevio **chenchenant** war vad da heul labour ar strolladoù Obererezh Katolik, er parrezioù-se-lec'h n'eus ket ur paotr en oferenn da sul; ha ne vo ket gwall-down -mar ne vezont ket disprizus zoken - e gomzoù diwar-benn ar c'homoedoù-bro-se e bleustr dre gustumañs, met n'heller mui sellet ar relijion anezho, en deiz e hiziv, evel un dre "dalvoudek".

Pelloc'h eget Breizh e tizh gwarizi ha garventez ar gloer c'hall. Fellout a ra d'ar veleion c'hall krediñ penes mar n'emañ ket ar pep niwerusañ gento, emañ da vihanañ er pep gwellañ. Relijion Spagniz : trouz ha brizhkredemoù ; relijion Kanadaiz : un dre reut hag e chom c'hoazh en e sav dre n'eo bet gwall-he jet biskoezh, met e gouezho en e boull kerkent ha ma c'hwezho warnañ evel ar gommunistiezh; relijion Iwerzhoniz : gizioù strizh miret gent aked gent beleion holl-c'halloudus, met a zo kent vloaz war-lerc'h hag a venn reiñ an ton d'an Iliz ha d'ar Gouarnement.

Remedoù : er C'halloued n'o deus hardison ewalc'h evelto de ginnig anezho, ha gent gwir ebeg ... rek o vont keit-se e tiskouez-fent bezañ diblé-keer ha zoken bajension pe dost. Trewalc'h ez eo gento distreñ er selloù diwar stad reuzeudik er relijion e Bro-C'hall ha klask uhelaat diouz o su skudell er belraoù. Hag ar beleg breizhet a van digor e c'henoù war nev eur, hag a grad ez eo gwall-gleñv e vro hag e ya da gleak remedoù da yec'haat Bro-Spagn,

Bro-Iwerzhon pe Vreizh, hep soñjal penes mar deo kleñv hiziv e genvroiz divroet, dec'h, er vro, ne ont ket evet !

Ur misioner europat o tegouezhout e Gwinea pe el Leoz e zo riaklet-bres da depout, ha buan, an derzhienn baludek. Den ebet, dezhañ un tamm poell en e benn, ne soñjo diakleriañ e tlee bezañ fall yec'hed ar misioner p'en deus kuitet e vro, pe ez eo gwan stad yec'hed Europiz. Ar vro da yec'haat (ha Breuriezh Veur ar Yec'hed evit ar Hed-holl a labour da se) ez eo eergelc'h an trovanoù hag a zo brein gent ar fubu-moui. Ar medisin eus al Leoz pe ar sorsor eus Gwinea hag a leverfe implijañ remedoù da yec'haat Europa, n'en dije evel respont nemet un tenn-c'hoerzh.

Ha marteze evit bihanaat kiriegezh spontus ur vro digris-tenet hag e goll mik en den nevez-degouezhet enni, eo e klask ar veleion anezhi, set nac'het o klask remedoù, tsmall an droug d'ar vro ma teu an divroed diouti.

Yec'hed-ene ul Leonad pe ur Foujerad er gêr a oa ken met ha ken kreñv evel yec'hed-korf an Europad en Europa. Bez'en devoe ur feiz " talvoudek ha deuet d'he ment", - ar pezh ne dalvez ket da leverout e oa barrek da herzel ouzh an holl hedonoù e gleñved hag a varv e gevje war e hent. N'eus korf ebet ken kreñv ha ken nerzus ma c'hell bezañ, e gement ne c'hell ket bezañ tizhet abred pe siw-zhet gent ur vosenn bennek. Ha Doue 'oar pegen koezhet en eo en deiz a hiziv, er feiz e galloud burzhodus ar veksinedegoù :

Ar Vro da yec'haat, ez eo da gentañ ar Vro-lec'h n'emañ an Droug. Kement tra a dalvoudegezh hag a zo bet greet da stoum ouzh kleñvedoù lec'hel ar broioù trovanol, e so bet greet gent medisin eus Europa. Marteze ivez ne vefe ket un dre ken set-se leverout penes " Kloer Bro-C'hall" e c'hellfe keout ur gentel bennek, pe ur stumm-lebour bennek, da gemerout e Breizh, er Spagn, en Iwerzhon pe er C'heneda, e-lec'h riaklet da demañ warno o-unan gouerezh en dud, dre ziskleriañ rok ha belc'h emañ gento alc'hwezioù an emzer-da-zont " Medice... "

Hag ar gloer yec'haat a Vreizh, bepred ken sparlet all gent er soñjeus o bihander, ne soñjent ket ken loba, ne klaskent en em zizober eus an debron e doug anezho da gleak sklerijonn ha buhez ar broioù " amezet dinden skud er Marv ! "

J. C.
(6.5.1958)

AR BRIDENN EVIT AR VRO : Benerzh : Dimezell St Gel de Pons, Itron-
Varia Kerespera, Louzenneg (C-d-M).
Gwellañ kelenner Relijiel Breizh. Goulennit anezhi hag he lennit evit bresañ med ho spered ha bresañ joe ho kelc'h !!

(Kantet gent J.'n Herri, Kerhuéd, Ar C'houero'hed)
vvvvvvvvvv

Bez' e oa ur wech en ur barrez a Vreizh-Izel, daou bried yaouenik .En em gerout e reent, pinvidik e oant, met un dra e venka d'eo efrusted : n'eo doa ket e vugale. Setu ma teuas de soñj d'ar wrag goulema dre berzh Santez Anna, Petronez hor bro, ar c'hres de geout bugale. Prometiñ a reas mont da Santez Anna-Wened war he zroed, gent he friad, ha kas gento daou baour. En em geout e reas a-barzh ar fin keloù met genti. Met dre ma'z se en traoù war-raok, e talc'he-hi de dristest ben-deiz. Ma levreres he friad dezhi : " Petra'zo kaoz dit da vezañ ken trist, ta hag a oa ken seder a-raok; n'eus digerez ebet dit da vezañ trist, dreist-holl bremañ pa'z eus en em gavet ar c'heloù ken mat-se genit. -" " Eiz ! emezi, me am boa prometet mont da Santez Anna-Wened war ve zroed, he te genin he daou baour ouzhpenn, evit m'en em gevje kement-mañ genin. Met bremañ evet, ez on nec'het o soñjel mont, he diegl em boa o reif kement-se da c'houzout dit.

"- Me n'eus nemet se ouz de drubuilhañ, emezañ, n'eo ket kalz e dra. Mont a rin genit, hag e kemerimp daou baour da zont genimp.

°°

Klasket e voe daou baour da vont ganto, ha neuze kerkent ha ma voe prest an traoù ez ejont o-fevar en hent . An deiz kentañ ez eas an traoù ganto eus ar gwellañ ; debrif a reent pe veze ar c'houz dezhio de zebriñ, diskuizhañ a reent pa vezent skuizh. An eil deiz evet, 'benn ' oa erru kreisteiz enezhi, ec'h en em gevas skuizh ar plac'h. Petra'rejont neuze, nemet mont en un ostaleri de zebriñ ha da ziskui - zhañ, hag e chamjont eno betek an deiz war-lerc'h ar beure.

Antronoz vintin e savjont abred a-walc'h evit darc'hel gent o hent. Allez ! 'benn'oa unnek eur enezhi, ne oa ket ar plac'h evit mont ken : "- Me! emezi d'he friad, n'on ket mui evit bile. M'ho pijs va sikouret, em tijs gallet mont betek ar vourc'h a weler ac'hen, hag eno en un ostaleri bennek e c'helljen diskuizhañ ar peurrest eus an deiz, ha warc'hoazh vintin marteze, e vijon barrek da zarc'hel da vont.

Mont a rejont eta betek ar vourc'h hag e c'houlennjont bezañ lojet en un ostaleri. Met an deiz war-lerc'h ar beure, e rankas ar plac'h diskleriañ n'en em sente ket barrek da vont hiroc'h.

"- Beogwir emañ kont ewl-se, eme he friad, ez an da c'houlenn digant an ostizez keout ar vadelezh d'ez mirout emañ, ha d'ez lojñ e-keit ha ma vimp-ni hon-tri, an daou baour ha me o vont da Santez Anna-Wened d'ober ar pezh ec'h eus prometet."

Ma ostizez hag e oa ur vevuez e galon vet, e leveres e oa

e oa kontant de lojñ ar wrag ha d'ober war he zro, e-keit ha ma vijent o-zri oc'h ober o ferc'herinaj.

Ur pennad goude ma oa set ar baotred a-raok, ec'h en em gavas kleñv ar plac'h hag hep dale e varvas en ostaleri 'lac'h m'edo o lojñ. Nec'het-bres e voe an ostizez gent an degouezh fall-se, hag ez eas neuze da geout ar mser hag ar person, ha divizet e voe gortoz ur pennad ken ne vijje distroet he gwez diouz Santez Anna-Wened a-raok hec'h interañ. Met keer 'oa gortoz, ne zeuent ket buan en-dro he ret e voe evel just, a-beñ ar fin, hec'h interañ e bered ar berrez-se.

Goude kreisteiz, deiz an interement, e tistroes an ostizez hag en daou baour war o c'hiz diouz Santez Anna-Wened he degemmet e voe dezhañ ar c'heloù trist-se. Petra'rajs ar peour kaoz den ? Gloc'het-bres e oa evel just, ha mar en dijs gallet e vijje chomet ar barrez-se da vezañ tost da vez e bried, met n'helle ket ober se. Pesañ a reas neuze ar frejoh a oa bet gent e wrag, he goude bezañ leket div pe deir ofereñ ganti ec'h adkemerer hent ar ger, trist he poaniet .

An deiz-se, diouz an aberdeez, ez eas an ostizez d'ar vered da leverout ur bet bennak war bez an hini varv. Decoulinet e oa, pe wales an douer o tarc'hel da fiñval war ar bez : "- Hols! emezi, petra ' zo kaoz d'en douer da fiñval ar stumm-se . N'eo ket gozed moarvat eo a zo oc'h ober kement-se ." Me seblente ket dezhi e oa kement-se ur seblent vet. Hag hi o vont d'ar presbital da geout an Aotrou Person :

"- Aotrou Person, emezi, bremañ on bet o leverout ve feter war bez an hini a zo bet beziet ar beure-mañ, hag a zo bet tremenet he gwez emañ de greisteiz, evel ma ouzoc'h. Spontet on bet o welout an douer o tarc'hel da fiñval war ar bez.

"- N'eo ket gwir ? eme an Aotrou Person . N'eus aze netre dreist-ordinal : gozed an hini eo a leka an douer da fiñval e dre-sur, ha n'eus ket ezhomm da vezañ nec'het gent kement-se.

"- Me leveren ket ewldoc'h, Aotrou Person, emezi, rek ne gaven ket ez eo kement-se un dra naturel.

"- Ac'hanta! eme an Aotrou Person, n'hoc'h eus nemet edvont da bediñ war vez ar plac'h-se, ha peogwir e c'hellan gwelout ar vered eus prenestr va c'hembr, me'chomo e toull ar prenestr ha ma fiñv c'hoazh an douer, e reot sin din, hag e tiskemin de welout."

Hag an ostizez war he c'hiz d'ar vered, war ar bez. Ma fiñve an douer a-raok, bremañ avat, e rae . Hag hi d'ober sin d'an Aotrou Person e hastes buan dont en traoù ha redek betek ar bez : "- A dra sur, emezañ o welout an douer o fiñval, emañ ez eus un dra bennak da leverout. N'eus ket de dortal; ret e vo dizinterañ ar plac'h-se da c'hou-

sout dre sur potra' zo ". Mont e reas neuze da geout er meer de c'houlenn digentañ etre de zigeriñ ar bez.

Digoret e voe ar bez, ha digoret ivez an arched, hag e chomas an dud souezhet o welout en arched ur plac'h vihan bev. He mamm avet, ne oa ket bev sbalemour da se ... Petra'rejont ? Tapout ar plac'h vihan kuit digenti bepred... Gwashañ pezh a oa, ne ouie den ebet eus a belac'h e oa an ted, na dre betore hent e oa set.

"- Me! eme an ostizez, peogwir ez eo mervet he mamm genin du-mañ, me 'zo kontent da sevel an hini vihan, hag e rin dezhi evel d'em bugale all... Met n'eo ket a-walc'h, emezi, ret eo bedezif an hini vihan; me'yelo da veeronéz".

Er berrez-se e oa ur c'hure yeouank hag a asantas mont da baeron. Ha bedezet e voe an hini vihan he roet dezhi evel anv : "Keerañ de Frañsoez" Met diwezhatoc'h e voe berreat an anv-se ha ne veze graet nemet "Keerañ de Soez" pe "Keerañ Soez" anezhi.

An ostizez eta, e savas an hini vihan evel pe vije bet merc'h dezhi, e gwirionez, hag ar berrez a roe un tamm sikour dezhi. Tremañ a ree an anzer ha Keerañ Soez a oa erru en oad a 9 pe 10 vloaz. Mont a ree d'ar skol ha d'ar c'hastekiz ha fur e oa evel un Ael. An ostizez he devoe deou vugel dezhi hec'h-unan, ur proter hag ur plac'h, hag un deiz e savas bikilh etrezo ha Keerañ Soez : "Te bepred, n'out ket ac'han ! Hor mamm n'eo ket mamm dit, ha n'out ket c'hoar dimp-ni. Te'zo genet er vered, ha mervet e oa da vamm, pe oa o vont da bardoneñ de Santez Anna-Wened".

An hini vihan o klevout ar c'homzou-se, a zirollas da c'har-mat, hag a zeuas d'en ti en ur grial. Met kear he devoe an ostizez goulenn digenti petra'oa, ne levere ket Keerañ Soez netra ebet. Kerc'het e voe he faeron evit ober dezhi komz, met ne oa mamm ebet d'ober. Kement ha ken bihan, ken e voe ret mont rustoc'h dezhi, he kemerout er vevh genti : "- Me, emezi, n'om ket ac'han ! Ar re all o deus leveret din e oan bet genet er vered, hag e oa va mamm o vont da bardoneñ de Santez Anna-Wened... Me ne chomin ket emañ pelloc'h. Me'zo o vont da glask va zed !"

"- Petra ? eme an ostizez. Te n'out ket ac'han ? Ne'm eus savet ac'hanout."

"- Ne servij ket deoc'h, eme Keerañ Soez; ret eo din mont war-reak da glask va zed, hag e talc'hin da vado ken n'em bo hen kevot."

"- Ac'hante! eme an ostizez, pe n'houlz ket chom emañ, ez an da reif dit levr-oferenn da vamm hag he chepeled a zo chomet emañ. Ar re-se e oan e-sell d'o reif dit pe vijes bras, met pa'c'h eus c'hoant da vont da glask da ded, ez an d'o reif dit diouzhtu." Ha Keerañ Soez kuit da glask he zed.

Derc'hel e ree da vado, ha dre ma'z eo gent hec'h hent e c'houlenne boued he lojeiz digent an dud. Met yeouank e oa c'hoazh he buen a-walc'h ec'h en em gavas skuizh o vont evel-se... Un deiz, setu ma er-ruas e-kichen ur stank : "Me! emezi, m'am bije kennet ve mouchouer-godell emañ, rak erru eo lous !". Pa ziskennas war bord ar stank e welas e-gwiver eno ur c'hastell e penn un ales vras. Goude bezañ kennet he mouchouer-godell e levers outi hec'h-unan : "Skuzh 'on o vado bendeiz evel-se; ma'z ajen betek ar c'hastell de c'houlenn digenti hag-eh n'o deus ket ezhomm ur vetezh vihan, hag a rajen ur c'hro-gad-labouret." Hag hi da vont.

An antro eno, e welas ur vetezh; hag hi de c'houlenn digenti "- Hag-eh n'eus ket ezhomm ur vetezh vihan emañ ?"

"- Bo! eme eben, met n'hellan ket da gemerout hep goulenn digent an Aotrou de gentañ. Emson o vont da geozel gentañ..." An Aotrou hep dont zoken da welout piv a oa erru a leveras d'ar vetezh : "Ya! ya! kemer anezhi hardizh, rak krog a-walc'h ec'h eus-te emañ de-unan."

Neuze e voe kemeret Keerañ Soez da vetezh e kastell an Aotrou, ha diouzhtu e stegas gent he labour. Ha ma'lever deoc'h ne oa ket didalvez... Un toullad devezhioù goude, e teuas an Aotrou d'ar gegin de c'houlenn dorrec diwar-benn Keerañ Soez :

"- Hag ar vetezh vihan, emezañ d'ar vetezh vras, ha plijout a re dit ?"

"- Ya! sourt-se ! Homezh a zo mat da labourer. Forzh petra din leverout dezhi ober, ober a ra diouzhtu; ne vez ket pell oc'h ober. Rikouret-nemet an genti ... Plijout a re din."

"- Me! eme an Aotrou, lever dezhi dont emañ, ma c'hellan he gwelout, rak n'em eus ket he gwelout abao m'eo erru emañ."

Hag ar vetezh da hopal : "- Keerañ Soez ! degas'te ur fagodenn-geuneud d'en ti 'te ". Ha Keerañ Soez d'an ti kercent gent he fagodenn-geuneud. Met kercent setu hi er-maez adarre.

"- Me! eme an Aotrou, n'em eus ket bet anzer d'he gwelout. Lever dezhi dont emañ d'ober ul labour bennak m'am bo anzer da sellout outi."

"- Keerañ Soez ! eme neuze ar vetezh, deus d'en ti de sikour troc'hañ soub, rak emañ e ver foulet war ar fichañ-lein..." Ha Keerañ Soez d'an ti he stagañ de droc'hañ soub ouz an deol eno.

Derc'hel a ree an Aotrou de sellout ouz an hini vihan gent plijedur. Plijout a ree ar vetezh vihan dezañ, he sentout a ree e galon evel o tommañ outi : "- Decust petra'zo keoz, emezañ outañ e-unan, d'ober efed din evel-hen, evel hemañ..." Mont a reas kuit koude hep leverout netra. Ha Keerañ Soez a chome bepred d'ober he labour evel e-reak, dre ma levere eben dezhi ober.

Kontañ a reas an Aotrou d'he Itron dorrec ar vetezh vihan. "- N'ouzon ket, emezañ, petra'zo keoz din de santout ve c'halon evel

o tommañ outi." Ne blijas ket nemeur er c'honzoù-se d'an Itron hag homañ a sentes un tamm gwarizi o sevel en he c'halon. An Itron-se a oa eil gwreg an Aotrou, rak an Aotrou a oa bet dimezet dija ha pa oa en em gavet intañv e oa bet addimezet da homañ. Hag hi un deiz bennak o lavarout d'he fried ouzh tsol :

"- 'M eus ean e vo ret kas ar vatezh vihan kuit, rak homañ ne ra nemet dero'hel da zevañ gouloù. N'ouzon ket oc'h ober petre e vez en he c'hambur pa'z a da goussket, met chom e ra gouloù ganti diwezhat en noz."

"- Ma! eme an Aotrou. N'ay ket ac'han er stumm-se. Ret e vo din da gentañ gouzout petre'zo keoz dezhi da zevañ kement-se e c'houlou."

Pen erruas an noz, ha pa oa set Keerañ Soez d'he c'hambur, ez eas an Aotrou war he lerc'h. Gouloù a oa ganti en he c'hambur, met al c'houbezet e oa an nor ha n'helle ket an Aotrou mont e-barzh er gambr. Hag eñ da skeiñ war an nor : "- Keerañ Soez, emezañ, digor an nor din 'ta, mar plij.

"- ' Rin ket, eme Keerañ Soez. Ne zigoren ket an nor pa vezan set em c'hambur. Ne zigorin ket deoc'h !". Hag e rankas an Aotrou mont da goussket en noz-se, hep gouzout perak e chome Keerañ Soez ken diwezhat-se o teviñ gouloù.

"- Ma! emezañ. Werc'hozh me! ouvezo "... Hag eñ an deiz war-lerc'h, pa ne oa ket Keerañ Soez en he c'hambur o vont d'ober un toull-talar en nor hag o lekast ul lejen toull, evit ne vije ket anavezat.

Diouzh an noz, pa oa set Keerañ Soez d'he c'hambur, e sevas an Aotrou da doull an nor, hag e sellas dre an toull-talar. Gwelout a reas ar vatezh vihan o lavarout he c'hafeled, ha p'he devoe fin gent he c'hafeled e tapas krog en he levr-ofereñn da lenn e-barzh.

"- Daman din ! eme an Aotrou. Eus a belec'h he deus homañ er c'hafeled -se hag al levr-ofereñn-se ? Ar re-seoù eo c'hafeled ha levr-ofereñn ve fried kentañ. " Anavezat en devoe an Aotrou an treoù-se. " Keerañ Soez ! emezañ, digor din !

"- Ne rin ket, emezi. Me pa vezan set em c'hambur, ne zigoren ket en nor da zen ebet.

"- Digor, mar kerez, eme an Aotrou, peotramant ez en da skeiñ an nor er gambr."

"- Neuze, eme Keerañ Soez, koulz eo din digerifi deoc'h ". Met e-raok mont da zigerifi, e klenkas e c'hafeled hag he levr-ofereñn.

Pen entreas an Aotrou er gambr, e levras dezhi "- Pelec'h emañ al levr-ofereñn hag ar c'hafeled e oa genit bremañ ?

"- Me, emezi, ne oa levr-ofereñn ebet genin, na c'hafeledoù.

"- Boe ! emezañ, p'am eus gwel. " Hag eñ da zigouez an toull-talar en doe graet en nor. " N'hellez ket nac'h, emezañ ... Met eus a belec'h ac'h eus bet al levr-ofereñn-se hag ar c'hafeled-se ?

"- Ah, emezi, ar re-seoù e oa levr-ofereñn ve men hag he c'hafeled.

Va mamm a oa mervet o vont da Sentez Anna-Wened, ha me a zo bet genet en ur vered. Met deuet e oa da soñj din mont da glask va zad, ha me en hent neuze. Met o vezañ me oan en em gavet skuizh o terc'hel da vale evel-se bendeiz, an boa soñjet mont da vatezh ur c'hroged.

"- Ma! eme an Aotrou, ar re-seoù eo levr-ofereñn ve fried hag he c'hafeled. Neuze ez on-me tad dit... Betek vremañ e oas matezh emañ, met bremañ ne vi ket ken. Te'vo ewel ar vugale all ac'han"... Rak an Aotrou en devoe bet div pe deir blac'h eus e eil gwreg.

N'em eus ket ezhomm da lavarout pebezh stad vras a oa en Aotrou o vezañ anavezat e verc'h, na pegement a eurusted a oa e kalon Keerañ Soez o vezañ kavet he zad. Adalek neuze e voe sellet Keerañ Soez evel unan eus bugale an ti, evel just, he graet dezhi evel d'ar merc'hed all. Aet e oa Keerañ Soez er-aez a vatezh, met lezet e voe he c'hambur ganti.

Se n'eo ket nemeur d'al lezveum a gemeras droug ouzh Keerañ Soez. Bemmañ, p'en em gave an Aotrou er gêr eus a c'hafeled, pe o vale ma veze bet, kentañ tra a reas e oa mont da welout Keerañ Soez en he c'hambur. Kement-se ne blijas tamm ebet d'he wreg :- " Ma! emezi, un devezh, hemañ ne zalc'ho ket da vezañ ken sot-se gent Keerañ Soez "

En ti e oa ur c'hi bihan fidel hag a blijas d'an Aotrou. Hag an Itron he lazhañ ar c'hi bihan. P'en em gavas an Aotrou er gêr, ez eas kerent da welout Keerañ Soez d'he c'hambur; met pa zistroas d'an ti, e levras e bried dezhañ :- " N'ouzon ket petre'zo keoz dit da vezañ ken sot-se gent Keerañ Soez. Homez, pa oas set er-maez eus ar gêr, a zo diskennet eus he c'hambur he lazhet da gi bihan fidel.

"- N'eo ket posubl, eme an Aotrou. Met pe voe diskouezet dezhañ ar c'hi lazhet, e voe ret dezhañ krediñ. Hag eñ kerent da gambr Keerañ Soez adarre :

"- Keerañ Soez ! emezañ, perak ez out-te diskennet d'an treoù, pe ne oan ket er gêr, da lazhañ va c'hi bihan fidel.

"- Me ? emezi. Grit din ar boan a gerot, met n'on ket bet o lazhañ ho ki bihan.

"- Evit kelou ul loen, eme an Aotrou, n'in ket d'ober poan dit, met ne vanke ket dit bezañ lazhet va c'hi ewel-se. "... Tremenet e oa an treoù evel-se gent an Aotrou.

Deust da gement-se, e talc'he bepred an Aotrou da vont bendeiz da welout Keerañ Soez, kerent ha n'en em gave er gêr. Unan eus ar merc'hed yeouank all avat, en em gavas kelou fall ganti; met an Itron a zeuas a-benn da gush an treoù ouzh he fried, ha pe voe kresket an dud e hestas benn mont da gas ar bugel war gwela Keerañ Soez pe oa koussket homañ ... Pen erruas an Aotrou er gêr, e levras an Itron dezhañ rektal :- Ne goumprens ket perak e rez kement a stad eus Keerañ Soez. Kae'te d'he c'hambur da welout petre'zo en em gavet ganti. Pe wlas ar bugel war gwela Keerañ Soez, ha hi koussket-mat, e tibunas

enezhi : " Keerañ Soez, emezañ, da biv eo ar bugel-mañ ? ". Ha Keerañ Soez o tihanif. Met 'dal ma welas ar bugelig bihan war he gwale, e kouezhas fetiket. Pe zeuas omni hec'h-unan, e lavaras d'he zad : "Grit er boan e grot din, met ar bugel-se n'eo ket din-me.

-Nann, sur e-walc'h, eme he zad. N'on ket evit kredif ez pijs greeet un teol evel-se, ha te ker fur evel ma'z out... " Un tamm disfizias a sevas en Aotrou, ha donot a reas da soñjal e renke bezañ unan bennek o c'hoari ar c'hontrol ouz Keerañ Soez. Met lazel a reas an traoc'h evel-se. Gwir eo n'en devoe ket amzer da glask hiroc'h, rek un nebeut deizioù goude, e tichasas d'ar brezel digerif, hag o vezas ma oa en Aotrou mestr-arme, e voe ret dezhañ mont war-reak e-touez er re gentañ. Met kent mont eus ar gêr e lavaras d'e bried : " Arabet deoc'h ober poan da Gaerañ Soez. Bezit mat eviti; ha war bez bolantez Doue e tistrojen d'er gêr, e ouezin penaos ho pezo greeet dezhi. Kenevo ! "

Met ne oa ket tri devezh ma oa set en Aotrou d'ar brezel, ma soñjas al lezvam e oa deuet ar c'houlz d'en em zizober eus Keerañ Soez. Kaout e reas deou zen hag a asantas, wir-bouez bezañ paeet-met, ober al labour e oa bet goulennet diganto : " mont d'ar c'hoed da lezhañ Keerañ Soez ; ha da ziskouez o devoe greeet ervet o labour, e vije ret dezho degas en-dro he dilhad hag he c'helon "...Met pen errujont er c'hoed gent Keerañ Soez, ne grede hini ebet anezho touch ouz Keerañ Soez nag he lezhañ. Ha setu ma weljont ur c'hi bihan hag a zal-c'he da droidallet eno, hag hep chou da dortal e lezhjont ar c'hi e-vit tennañ o galon, ha neuze goude bezañ diwisket Keerañ Soez e tisk-mjont anezhi en ur puñs don ha sec'h a oa eno o-kreiz ar c'hoed, hag e tegesjont gento da ziskouez d'al lezvam dilhad Keerañ Soez ha kelon ar c'hi...

Un dro bennek avat, ec'h echuas ar brezel hag e teuas en Aotrou d'er gêr, ha kontañ tra a c'houlennas oc'h erruout er gêr e voe doaroc'h Keerañ Soez "- Keerañ Soez ? eme an Itron. Honnagh n'emañ ket emañ pell'zo. 'Dal ma oas set eus ar gêr, e oa-hi tec'hout kuit ec'han de vont Doue hepken e oar, da belec'h hag evit petre ! Gallout a reas ober stad anezhi, e dres sur ! Talvezout a ra er boan ! "

Glac'harst e voe en Aotrou evel just, met ne grede ket e oa gwir ar pezh e lavare e wrag dezhañ; met ne oa ket evit klevout hiroc'h.

o°

Un deiz m'edo en Aotrou er gegin o komz gent er vatezh, setu ma welas ur c'hi bihan oc'h antren en ti hag ouz en em lakeet da fuketañ e kement kouign a oa, da glask un tamm bruzhun-bere : "-Eus e belec'h, emezañ, eo ar c'hi bihan-mañ ? "- Me, eme ar vatezh, n'ouzon dre, met abaoe m'eo set Keerañ Soez ec'han, e teu bendeiz-bendeiz dre emañ da fuketañ 'barzh ar gegin, ha pe gev un dra bennek, e kerzh gentañ er-meez n'ouzon ket da belec'h. N'ouzon ket petre'sinifi ar c'hi

bihan-se. " " Hala! eme en Aotrou, ma'trenko gouzout petre'sinifi ar c'hi bihan-se. Warc'hoazh n'ho po nemet reiñ un tamm met a vara dezhañ, ha pe'tyelo war e lerc'h da welout pelec'h ez a. "

An deiz warlerc'h, d'er memes eur, etre unnek eur he kreiz-teiz, edo en Aotrou er gegin p'en em gevas ar c'hi. Ur pezh tamm bara a voe roet dezhañ hag ar c'hi kerkent er-meez gent an Aotrou war e lerc'h. Ar c'hi avat, e garzhe buan, ha poan en devoe en Aotrou e vont d'e heul, ha c'hoazh e krave tud war e hent hag e renke chou da gezeal gento. 'Benn ar fin en devoe kollet ar c'hi hag en Aotrou a voe set dezhañ dont war e giz, hep gouzout etrezek pelec'h e oa set ar c'hi : "- Me! emezañ d'er vatezh, kollet em eus ar c'hi. Ret e vo deoc'h reiñ ur pezh met a vara hag e gig dezhañ warc'hoazh, ha me a yelo betek lec'h 'on bet hiziv, da welout etrezek pelec'h ez a. "

An deiz war-lerc'h e reas ar vatezh d'er c'hi ur pezh met a vara hag e gig. An Aotrou en doe kemeret e leñs hag set d'al lec'h m'en doe bet kollet ar c'hi en deiz e-reak. Hag eñ o welout ar c'hi o tont gent e vara hag e gig, ha ken bras e oa an tamm ma renke ar c'hi ker-c'het anezho a bepeil. Met tud e errue gent en Aotrou hag e voe dilec'h'het gento. A-benn ar fin koulskoude ec'h en em gevas war bord ar c'hoed, met eno e oa kouneud he drez ha traoc'h a bep seurt. Ar c'hi a yae dre zinden an traoc'h, met ne oa ket en Aotrou evit mont war e lerc'h : "- Ala! bon ! emezañ. Doust etrezek pelec'h ez e ar c'hi gent en traoc'h-se ? Me'trenko gouzout ! "... An deiz warlerc'h e komeres tud da droc'hañ kement seurt 'oa tout e-barzh ar c'hoed evit ma c'hellje gwelout dre belec'h ez eo ar c'hi-se gent e draoc'h. "- Belec'h da reiñ boued bepred d'er c'hi, emezañ d'er vatezh, e-pad ma vo en dud o troc'han en traoc'h. "

M'en deveze ar c'hi bruzhun-bere e-reak, bremañ avat, en deveze pezhioù tammou... Un dro bennek e voe echu o labour gent er re a oa o tich'harzhañ; hag en Aotrou da gichen ar skalier, kuit da vezañ abuzet gent en dud... Hag eñ o welout ar c'hi oc'h erruout gent ur pezh tamm bara hag ur pezh tamm kig, hag o vont gent e gig hag e vara a bep eil. Hag eñ ouz hen gwelout o tere'hav e draoù 'barzh ur puñs te dunn bara er puñs hag ar c'hi goude, hag ar c'hi war e lerc'h 'barzh ar puñs. Tostet a reas en Aotrou da selaou ha da c'houzout hag eñ e welje un dra bennek pe a glevje un dra bennek. Hag e klevas unan bennek o kezeal e fons ar puñs : "- Hala! va loen bihan, e lavare er vouzhañ, hiziv ec'han eus kevot traoc'h. Kement e draoc'h a zegassez din en deizioù-mañ, ma n'on ket evit o debriñ holl. "

:"- Unan bennek a zo er puñs, eme en Aotrou outañ e-unan, n'eus ket da lavarout ! ". Hag eñ d'er gêr war e giz...

o°

Peogwir e oa mestr-arme, ez oas da c'houlenn ur gouarnunegh soudarded digent ar c'horonnl, da zont gentañ da welout piv hi petre e oa er puñs. Asentif a reas ar c'horonnl hag e reas dezhañ ur gouarnunegh soudarded da sikour hen diskenn er puñs en ur penton.

Ur c'hwec'h-ugent bennek a souderded a oa bet roet dezhañ .Lakaet a rejont an Aotrou en ur penton evit hen disken gant un traouilh, hag e kroec'h e oa bet lakaet ur c'hloc'h bihan, ha ma sonje hennezh e vije edeschet kroec'h war e giz. Met keer a oa diskenn enezhañ, e talc'he da vont hep son ar c'hloc'h, ken n'en em geves e fons ar puñs. P'erruas eno hag eñ o welout Keerañ Soez :- Te an hini 'zo emañ, Keerañ Soez ?

- Yel emezi, ma an hini eo .

- Hag ez out chomet bev ?

- Yel emezi, er c'hi bihan a zegas boud din abaoe ez on deuet eus ar gêr.

- Sell 'ta, eme he zad neuze. Petra a zo en em gavet genit ?

Hag hi neuze da gentañ dezhañ penn-de-benn ar pezh a oa en em gavet ganti :- " Ve lezvam, emezi, he devoa peset daou baotr d'an lazhañ. Met ne gredent ket touch ouzhin, na ve lazhañ. Setu m'o doa lazhet ur c'hi hag a oa o troidellet en-dro dimp, he goude bezañ tennet va dilhad diwenn, evel ma oa bet levet dezho, e tiskennjont ac'hanon er puñs.

- Yel eme he zad, met ne chomi ket emañ. Ret eo dit dont er-maez eus ar puñs-mañ esamblez genin.

- O! emezi, ne din ket. N'on ket barrek da vont aze e-touez an dud,rak en nozh emeon .

- Gortoz'tal eme he zad dezhi. Ez an da reiñ dit va livitem hag evel-se e c'helli dont kroec'h "

P'en em gavjont e-kroec'h, e chomas souezhet an holl o welout ar plac'h ysouenk-se, met kerent e voe gwelst daou eus ar souderded o kouszhañ d'an douer :- An daou-se, eme Geerañ Soez, eo ar re a oa bet ouzh ve deges emañ ! Met n'it ket d'ober droug dezho, rak un tamm resped o devoa bet evidon, ha n'o devoa ket goulnnet va lazhañ o-unan, daoust m'o devoa ve diskennet en-bev er puñs da vervel"... An daou souderd a oa semplet eno, rak ne reent ket o c'hant e oa bev bepred Keerañ Soez.

" N'eo ket a-walc'h, eme an Aotrou. Bremañ e teul genin d'ar gêr, ha ret e vo d'az lezvam peññ evit an torfed he deus gret ez keñver.Greet e vo dezhi ar boan e gari.

" Me, eme Geerañ Soez, n'houlan ket e ve gret poen ebet dezhi, rak n'eo ket ken fell ve c'helion hag hec'h hini...Me, va zad, ne fell ket din chom er c'hastell da vevañ. Ur wech on bet tennet eus bez va mamm dre vadelezh Santez Anna, hag ar wech-mañ ivez c'hoezh; hag ez en bremañ d'ar gouent da vezañ levez ... Un dra koulskoude a c'houlennin digent va lezvam : ret e vo dezhi ennav de biv e oa ar bugel a oa bet lakaet war va gwel, rak biskoerzh n'em eus gret netra enep d'am enor va-unan, ha ne fell ket din e ve temallet din ha n'am eus gret biskoerzh !"

Renkout e eure al lezvam ennav da biv e oa ar bugel a oa bet lakaet war gwel Keerañ Soez e-keit ha ma oa kousket, ha dambrest goude e kuites Keerañ Soez kastell he zad evit mont da lezez.

(Wriet gant Jobig'n Herri, 4.12.1955)

AN SUJET DE L'ORTHOGRAPHE BRETONNE (Aide-Mémoire rédigé par Per De-nez) - embannet gant KUZUL AR BREZHONEG (1958) : 500 lur, 400 lur dre ar Post : Abad Le Clerc, person Bulien, C.C.P. 91764.

Evel ma oar kement hini e bled tamm pe damm gant ar Yezh, ez eus bet taolst a bep seurt temallou enep ar skritur anvet skritur ZH. Tud hag a oa seiset koulskoude da anavezout ervat an traou o deus lakaet da redek ar vrud diskient e oa ar Skritur -se ur Skritur savet dinden stiz an Alamand . KALBROU AR BERUN-BRUG (N-enn 5 kentañ trimizid 1958) en deus embannet ur pennad sinet gant an Aotrou Falc'hun, ennañ komzou garv evel n'eur ket kustum da lenn na da glevout, lec'h ma lenner traou evel-hen ez eo ar Skritur Nevez e ZH ur sin e sklavetzh !!!

Ul levrig all embannet gant KENDALC'H hag EMGLEO BREIZ hag hon eus gret meneg enezhañ en hor pennad-talbenn en deus klasket gant tammou lizherou diskouez e oa ar ZH un dra alaman, hep mui na maez.

Dre forzh glevout hag adklevout an hevelep disken e oa tud hag e oa krog da gredif ar siklezouñ-se . Un digerez ez eo bet eta da KUZUL AR BREZHONEG dre zorn PER DENEZ d'ober an istor gwirion eus ar Reizhskrivadur Peurunvan . An oberennig-se a ziskouezo ur wech ouzhpenn e vez maget alies dizunvaniezh etre ar Vretoned, dre vrizh-leverioù he trouzredannoù diziezez . Ne vo selvet ar Vro nemet pe ouezo ar Vretoned gwelout an traou gant o deoulegad o-unan ha bern an darvoudoù gant o spred o-unan ha diwr destenioù asur, hep bezañ prest da gloukañ poulc'hod evel bugeligoù.

Un disamm d'o spred e vo eta levrig KUZUL AR BREZHONEG evit kalz e Vretoned, rak ennañ e kevint ar pep brassañ eus an testenioù o verkañ penaos ez eo bet kont e gwirionez. Fiziñs a c'heller maez eta e tigor deoulegad ar glaskerion -skleri-jenn.

Ar Skritur Peurunvan implijet gant ar pep gwellañ eus ar skrivegnerion vrezhonek en amzer e ren, e zle ivez kout droed da vezañ implijet en arnodennou. Ar 7 e viz Meurzh diwezhañ (1958) ez eus bet kaset ul lizher-kelc'h e-berzh Akademiezh Roazhon d'an Encellerion - Akademiezh o tiskleriañ e c'helled degemerout en Arnodennou 4 seurt skritur : K.L.T. (giz Vallée ha Gwelarn gozh), pouze ar skritur ijinat nevez'zo hag anvet hep digersz ebet : SKRITUR AR Skol-Veur, neuze ar skritur gwenedek (hini Dihunamb lakaomp), hag an hini nevez. Ar skritur peurunvan hag eñ nemetañ, da leverout ar skritur ZH n'eo ket anavezet e wirioù !!! Gant ur gavadenn dispar c'hoerzh el lizher-kelc'h -se : Skritur ar Skol-Veur (!!!!!) n'eo nemet skritur Vallée reizhet un tammig da glotañ gant Yezh Wened .Fiziñs hon eus svet, na vo ket "lak" a-walc'h ar Vretoned evit lonkañ ar flugez-se, dre ma ouzont ez eo ar REIZHSKRIVADUR PEURUNVAN an teol-ese diwezhañ da selviañ ar Yezh, hag ur Gurmenn- Aour war lebourioù hor yezhorion welleñ.

enorif ar re a savomp " ar Verzherion " ? Re splenn ez eo an abegoù evit ma talvezje ar boan respont.

Met ar pezh a zo sur, ez eo e sikour ar seurt difenn d'c'hel e-touez ar Bobl trouzkradennoù diwar-benn an Aotrou Perrot hag ar re a fell dezho hen enorif ha dougen bri he respad d'e anv, d'e vez ha d'e labour. Setu amañ ur skouer a gement-se hag a zo 7 den barrek da vezañ test' war se.

7 e oamp en hor c'harr-tan, hag en ur vont da chapel Koad-Kev hor bos faziet war an hent. En ur vro evel Skrignag, frankiz dindani forzh pegement hag hentoù kroaz-digroaz ez eo diées e-walc'h d'un diavazour en em zibab. Derc'hel a raomp da vont eta he pe ne wloamp chapel ebet na gwetur all ebet ouzh hon heul, setu ma c'houlennis digent kentañ den a gevjomp : " Hemañ eo hent Koad-Kev, war plij " Hag an den, 35 bloaz bennak dezhañ de sellout ouzhimp dinden e dao, d'ober ur c'hruz d'e zivskoaz he da deurel sec'h ha die'hraes " Se n'eo ket me efer ! ", hag efi d'an ti. Ur veoez yeouank, gwreg an den-se moarvat, un seridigezh vet dezhi, a dostaes neuze hag e ris an hevelep goulenn outi : " N'ouzon ket, emezi " ha kerkent gent un ton a sklesas ar re a os ganin er wetur hag e roes dezho teurel un " O " diwar o fromadenn " Qu'est-ce que vous allez fout' à Koad-Kev ! " (Petra an deont ez it-hu d'ober da Goad-Kev !). Kement-se lavaret gent un taol-mouezh brezhonek galloudus ma vevve kasoni, komar, dispri emañ.

Izeloc'h e oa karr-tan ur marc'hadour ispisiri o stoufañ an hent strizh ouzhimp. Ur beleg all hag a os ganin a ziskennas da c'houlenn digent ar marc'hadour kaout ar vadelezh da dec'hout e gerr diwar hon hent he da leverout hag-efñ e oamp war hent Chapel Koad-Kev. Hag ar marc'hadour sioul-sioul, evel p'en devije son da vezañ klevet da respont ". " M eus son 'oc'h war an hent met ". Tri c'hant metr pelloc'h, souchet e pleg ar menez edo Chapel Koad-Kev hag ar Bez-Meur.

Pep hini a denno ar pezh a gero eus an darvoudig-se. Het eo leverout koulskoude ez eo diées e-walc'h Petra'sofj en dud en o c'hreiz, rek ar veoez yeouank e voe gwlet da c'houde o troieta en-dro d'ar chapel : deuet e os da welout an traoù moarvat.

Ne vern peneos e tiskouez an dra-se n'eo ket libr an dud e Breizh, e stumm ebet ; na libr de soñjal na libr d'ober ar pezh a re-fent ma c'hellfent gouzout ar wirionez. Kement-se a ziskouez c'hoazh ez eo bet graet en un doare disper e Breizh hag e talc'her d'ober, si-wezh !, " ar walc'hadeg-empennou ! ". Setu ar pezh ne zle ket tud an Em-sev ankouac'haet enez gwelout o labour oc'h ober chat !

P R R Z E G E N N A N A O T R O U K L E R G , e-tal ar GROAZ RUZ.

" Pign war-du ennon war ar Menez, hag e roin dit an teolennou-main,

Al Lezenn hag an Urzhioù an eus skrivet evit o c'helennadurezh". Ar gerioù-se eus ar Skritur Sakr e gaver e levr an Emmeziadeg, er pennad XXIV(12) eo ar re a lavaras an Aotrou Doue d'e servijer Moizez, d'hen pediñ da sevel war Venez-Sinai, hag e kev din e tere ervet ar gerioù-se ouzh an deiz-mañ ma'z omp pedet ivez da sevel war ar Menez-mañ, pedet gent Doue ha gent an hini a zo hag a chomo Skouer Uhel ha Patron glen kement Breizhad a zo hag a vezo en amzer-da-zont : an Aotrou Perrot : " Pign war-du ennon hag e roin dit an Teolennou-Main, al Lezenn hag an Urzhioù an eus skrivet evit kelennadurezh ar Vretoned ".
°°

" Pign war-du ennon war ar Menez " Setu kouvidenn an Aotrou Doue d'an holl dud ha dreist-holl dimp-ni, Breizhiz hag a glask dispenn roudoù ar Mezher e enoromp hiziv . " Pign war ar Menez da heul Moizez " Deuet e os Israeliz er-meez eus Bro-Ejipt, renet gent brec'h nerzhus Doue a skuilhes burzhudoù e-leiz evit temañ e bobl e-zinden sklevelezh Faraon hag Ejiptiz. Met ma os bet Israeliz temet e-zinden ur seurt sklevelezh vezhus e c'hellent c'hoazh bezañ sklavet en ur stumm all : sklavet dinden gizioù pegen ar broadoù, hag ezhom o devoe da vezañ kelennet evit anevout gwelloc'h Doue hag hen servijef hervez e youl santel ; ha dre-se e fellas da Zoue reiñ d'an dud dre Voizez e urzhioù, e Lezenn skrivet war deolennou-main, da Voizez d'o deñkiñ d'ar bobl da c'houde.

" Pign war-du ennon war ar Menez " Met eo da bep den pignet war ar Menez da welout he klotañ a ra ervet e vuhez, e stumm-bevañ, e oberioù gent al Lezennou Santel diskleriet gent Doue d'an dud. Lezennou ha gouc'hemennou Doue ne dint ket evel lezennou ha gouc'hemennou en dud traoù e-zievez, met an Urzh naturel, an Urzh vet o klotañ e-grenn gent natur en den, gent e ezhomou reizh he gwirion, gent e eustrusted, gent al lealdad, gent ar peoc'h hag an intent vet etre an dud. Lezennou ha Gouc'hemennou Doue eo yec'hed ar spered evit pep den, yec'hed hag urzh vet evit pep tiegezh, yec'hed ha peoc'h evit pep pobl ha pep kevredigezh. Lezennou hag Urzhioù hag e zlebe bezañ diées pep buhez-den, pep tiegezh, pep pobl, pep kevredigezh. Mab-den, allas, a zo tchet da gemerout lec'h ha kerg an Aotrou Doue er bed-mañ, war zigerez n'eo deuet e-skeud ar Skiantoù da erout, da vestroniñ sekredou an natur he d'ober e-unan traoù keer-meurbet, hep kompren ec'h en em leke evel-se war hent an Dizurzh hag ar Merv.

Ha ni Breizhiz, e kross-hent bres ar Bed Modern, deuit he n'eus ket an hon touez tud hag e soñj gent e vo addiezeet Breizh, edleket en he sev, adreñt dezhi he renk e-touez ar pobloù, hep na vefe ezhom ebet a Relijion, a Lezenn Doue ? Ac'hanta, e selegomp mouezh an Aotrou Perrot " Pign war-du ennon war ar Menez, hag e roin dit al Lezenn ! " Hag al Lezenn-se, va breudeur he ve c'hoeresead kristen, eo hemañ ! " PEIZ HA BREIZH ! ", an eil atag ouzh eben, evit na vo yec'h Breizh en he c'horf, en he spered, en hec'h ene, en holl stummoù he buhez !

" Pign war-du emnon war ar Menez ! " Ar Groez-mañ hag e zo o peouez bezañ benniget ha leket sonn en he sav war gribenn ar Menez gent he gwisk liv ruz e lever dimp d'he zro " Pign war-du emnon, war ar Menez, war Vreiz-Golgota, ma roin dit va lezenn ! ".

Ur jestr kristen eo a reomp o sonnañ ar Groez war gribenn Menez-Arre dre ma kredomp ar Groez, e galloud ha vertuz ar Groez hag e galloud ha vertuz an Hini e zo bet staget outi war Vreiz-Golgota: Mab-Doue. Dre ma kredent ar C'hrist eo o deus savet ar Vretoned e pep kroez-hent, koulz levarout, Kroezioù-koed pe Groezioù-mein, dre ma kredent an tiegezhioù kristen ar C'hrist, e vez staget ar Groez er plas a enor e pep ti. Dre ma kredent ar C'hrist eo e lakeas ar Skulterion Vreizhet gweladigezh o ens, kerantez o c'hallon, feiz o spered, hag ijin o dorn del dremen er vein, evit ma teuje an danvez divuhez da vezañ bev, evit ma teuje er vein gaset da vezañ taser ha kizidik evel pe vent korf Mab-Doue e-unen.

Ha peseurt lezenn ez omp daout de glevout hiziv digent ar GROAZ ? Sklaer ez eo : dre ar GROAZ ez eo bet selvet ar Bed, dre ar Boan, dre an Anken, dre ar Gwad. Dre ar Boan, dre an Anken ha dre ar Gwad e vez selvet ivez ar Broioù ha mar deo livet ar GROAZ-MAN e ruz, e liv ar Gwad, ez eo abalamour ma welomp dre hor soñj GWAD OUTI Gwad Mab-Doue ha Gwad er re a anvomp HOR MERZHERION hag ar GROAZ-MAN hiviziken e vo graet anezhi "KROAZ AR VERZHERION".

Ne sparchant ouzh den ebet er bed-mañ barn Youl Doue ha levarout ez eo marv kruz un den un despren pe ur c'hestiz evit e beo'he-dou, e deoliou-treuz, e deoliou-berboellik. Merv pep den a zo kastiz e-welc'h drezañ e-unen, hag en den hag e ro e vuhez hag e wed evit ar pezh a gav ar gwellañ, en deus ar gwir da geout pep doujehs he pep enor a-berzh an holl zoken e enebourin, ha Doue a ouezo a-welc'h tennañ danvez despren he pardon eus ar merv-se.

Ha setu emañ ar gelemedurezh a ro dimp ar GROAZ -mañ, c'hoezh Prezeg a re dimp Kerantez Doue ha Kerantez ar Vro, kerantez Mab Doue en hor c'heñver ha kerantez hon Tud Veur evit ar Vro e zo bet roet d'ar Vretoned da ziwell, da zifenn, da georast, da sentelañ, da zerc'hel bev betek fin an amzerioù !

°°

" Pign war-du emnon war ar Menez hag e roin dit va lezenn "...

Un 30 vloez bennek'zo, e klevas ur beleg ar galy-se a-berzh Doue, dre vouezh e eskob. Hag e teuas ar beleg-se, tomm e galon, tomm e gouz, sklaer e selloù ha sklaer e venozioù etrezek ar MENEZ-mañ. Hag e skuilhet eour e galon ha pinvidigezh e ens, hag e fuilhas ar madelezhioù e c'hell bezañ destumet e -dieberzh ur beleg sentel, hag en dud e chomas yon he mit en-dro dezhañ. Chozet e oa bet dezhañ brugier ar MENEZ he yender kelonù en dud... Neuz e komponas peseurt lezenn a oa merket dezhañ

: ar BOAN. Nebout e frealzidigezh d'e galon en tu-hont d'ar jos a vez oc'h ober ar vad, en tu-hont d'ar frealzidigezh e blij gent an Aotrou Doue skuilhet eveloc'h e kelonù e Sent dre c'hraoù e-zibeb, hag ivez d'ar frealzidigezh e-berzh mignoned feal.

" Pign war-du emnon war ar Menez ! " .Ha ne glevit-hu ket fistilh ur bugelig deuzek vloez hag un den kozh, kozhet e gorf a-reok en oad petra bennek ma'z eo chomet yaouankiz ha buhez he tumder en en zeouleged hag en e ens. In Aotrou Perrot en deus renket evel e-bred evit mont betek Chapel Sant Kaourintin da levarout an oferenn da 7 a dud hag ar gwad sac'het en e zivc'har gwriet e wazhied gros en deus c'hozh pomereet e vale. Met a-unen gent ar C'hrist, ez eo savet dre Aberzh Santel an Oferenn war Vreiz-Golgota ha berrek ez eo da zougen e Groez penn-da-benn, daoust ma c'hozh gwashoc'h war e spered disablent en dud eget alen sklaset an evel-c'hoefh war e zremm hag e zeouern, en 12 a viz Kerzu 1943.

" Pign war ar Golgota ! " Un tenn, dacu denn. Biken mui ne zigoro ar beleg e zeouleged don he madelezhus nemet pe savo an dud a verv da vev da fin ar bed. Biken mui ne zigoro ar muezilioù e strinke komzoù e sklerijenn diwrno newt da lezel huenedoù ha klema-darnoù betek seizh eur: ar sulvezh-se d'aberdeez. Hag en dacuana-e-kropet gent gloaz ar merv o tonet a zalc'h da skrebet en douer-se en deus keret kement : Douar Breizh !

Ha mi, va broudeur ha va c'hoezh kristen, mar kerfemp skralat an douer un tenn e kavfemp c'hozh roudoù ruz ar gwad a ru-zies an dechenn-mañ.

°°

Ni, hiziv, hon eus klevet ha seleket galy an Aotrou Doue ha galy an Aotrou Perrot ha galy hor Merzherion all " Pign war-du emnon war ar Menez hag e roin dit an Taolenn-Mein, al Lezenn hag an Urzhioù an eus skrivet evit o c'helemedurezh ".

Ar Menez-mañ a chomo en Istor Breizh e-bed er c'hentvedoù evel ar Menez Neur ma troio ar Vretoned o deouleged war-du emañ da geout sklerijenn, da geout nerzh-kalon, da geout fiañs e ple-menn o Bro. Ar Menez-mañ Ruz pa vez ar Bleun-Brug an o splender, Ruz gent gwad an Aotrou Perrot, Ruz gent ar Groez Ruz-mañ war e lein emañ emañ memm ar Silvidigezh evit Breizh gent kentel an Aotrou Perrot : FEIZ ! Lebourat evit ma vo miret Breizh sentel pe adret d'ar Feiz. FEIZ. Ha setu perak hon eus c'hozh ur gentel de glevout hiziv kentel ar PARDON. Daoust ma'z eo direz pardonñ, daoust ma vez prest an den da skignal e sent direk an dialleded, direk an torfed, direk ar gwad dinann skuilhet, daoust ma'z eo dever pep den herzel muiet ma c'hell ouzh an disurzh emañ ar Groez-mañ, evel ar beleg Santel ma oa an Aotrou Perrot o c'houlen digenimp Pardonñ : e padñ zoken evit an dorfedourien, dre ne ouient ket petra'rent.

na ve peurgaset da benn al labour divreizhaast e ra e reuz e Bro-Dreger, evel e lec'h all siwezh ! mar bez degaset estrenien hag estrenyezhourion e-lec'h implijañ tud eus ar vro. N'eus forzh penaos ez eo risklet bras ar Yezh da gaout ur vezhad nevez, gant an diouer a c'herioù-micher diwer-benn al labour a vo d'ober.

KUZUL AR BREZHONEG.- Krog ez eo AR C'HUZUL gent e labour.Brudañ ha Difenn. Meur a gelaouenn hag o deus bet skrivet treoù enep difennerien ar Skritur Feurunvan o deus renket tevel gent son de secheñ ar c'harr war o chouk. SKOL PLOUEG AR MOR ha deus bet 100.000 lur digent EMGLEO BREIZ, abalsmour d'ar ro-mañ d'en em wenneñ direk ar Bobl. Ar pezh a ziskouez n'eo ket leel-keer en abegou roet gent EMGLEO BREIZ evit nac'h pep skozell ouzh peotred ar ZH peogwir e vez implijet ar ZH e Ploueg-er-Mor.

AR VRO.- De vrudeñ labour ar C'HUZUL ha labour tud al LIAMM e welomp gent plijedar evit AR VRO, ur gazetenn douviziek hag a ziskouez pegen bras ez eo al labour gret gent al LIAMM abaoe dibenn ar brezel hag al labour emaint e-sell d'ober . 3.000.000. e lurien (Ya! 3 million, tudou grezh !) a gousto embenn war e had GERRIADUR ISTORHEL R. HEMON . Kasit ho komanant d'ar VRO: 250 lur J.Lemoine K.R.P 294-26 Roazhon.

KELAOENN OÙ HA LEVRI OÙ

L'AVENIR: 500 lur .B.P.89 Brest, K.R.P. II.32 86 Roazhon : politikel hag ekonomikel. A-du gent ar Federaliezh hag an Digreizennañ. Obstantout a ra ar rennerion enezhi bezañ nac'het gent an dizunveniezh e zo etre ar Vretoned en amzer a ren, rak na gred ket komz nemeur eus an aferioù sevenadurel, peotremant o deus son ne zeufe an Emsev evit ar Sevenadur de zonobañ ha de leouriañ pep lusked yac'h ha nerzhus ha de virout ouzh al labour efedus. Sur-mat n'eo ket mat d'an holl reoù yeouank bezañ sparlet evel m'emsint en o C'hale'chioù hag o Bagedoù decust d'al labour gser e c'hellont ober war an dechennig permatet de zho.Hep ul Lusked nevez yac'h ha kreñv war dechenn ar politikerezh ez eo tonket ar Vro da varvel diremed. HARPIE BTA L'AVENIR

DISPAC'H (G. Toublanc 88 Avenue des Termes Paris (XVIII°). Ar gelaouenn-mañ ha deus c'hoant da doullañ un hent nevez, e-giz ma tere ouzh ar yeouankiz na wel ket an tresoù o vont buan a-walc'h en-dro.Gras da ZISPAC'H da zonet da vezañ ur gelaouenn yres 'lec'h ma vo kevot mennedoù taer ar yeouankizoù breizhet. E-giz⁸⁸ e teuint a-benn de zispezañ ervet o menozioù hag en ur ziwall diouzh tezennoù berrboellik e c'hellont ober ul labour gser o studieñ kelenndurezh en Iliz diwer-benn ar Gevredigezh hag o tennañ eus ar gelaouedurezh-se ar pezh a vefe diouzh kudennoù Breizh. Beze vefent evel-se war unan eus tachennoù divreizhekañ e zo : ar vicherouriezh hag e toullfent hent marteze

d'en Abostolerezh kristen gent ur spred breizhet e-touez en dud a boan.

KNR-VREIZ. Kennedig' ar Vretoned eus Pariz. Kelaier o sellout ouzh buhez sevenadurel ar Vretoned divroet de Beriz.Skrivañ da Ger-Vreizh 43, Ru St Plasil, Pariz VI° K.R.5356-83.

STURIER BLEIKOR(Komanant-Bloez 500 lur) Monique Le GLAZ ,26 Ru Boulevard, Pariz, XIV° K.R.P. 14.373-73.

AL LIAMM (komanant-bloez 1000 lur).P. Le Bihan, 6 Donsins des Hocquettes, Suresnes, Seine, K.R.P. 5349-06 Paris.

SKOL (Abad Kalvez, Ploueg-er-Mor K.R.P. 1911-06 Roazhon.

EAR YEZH :- Dr.G.Etienne, Maen ar Ye, Kestellin,K.R.P.16-093-73 Pariz. **PREDER** : id. komanant-bloez 700 lur.

AR ERD KELTIEK :Abad Dubourg, Penker, Ar C'houero'hed(Vx-Marché)-gent ar stegadenn evit ar yeouankiz DALC'HOUP- Abad Dubourg K.R.P. 1831-74 Roazhon

N'ANKOUNAC'HAIT KET PARAN HO KOMANANT DA VARE-HECL. HOMAN NO RIL NIVERENN AR BLOAZ 1958 , HAG R KROG HEP KOMANANT ADAL DROU AR BLOAZ BEZIT SONJ BTA, DILERC'HERRION VAC, DA ZRAG HO TAMM SKOAZHIL DA ZERCHHEL BARR-HECL YAC'H HA SERZH.... TRUGARRZ !!

KANTIKOÙ....LIDOÙ.... E BRO-DREGER.

1- A-c'houde pell amzer e klemm ar veleion war ar c'hantikou savet KANTIKOU PAOTR-Julien (P.J Sklison,person kozh Sorvel). War e gev dezho na dint ket "kanspi". E gwirionez, ez eus tredh tredh displeiz er C'HANTIKOU-se,met kela nebeutoc'h eget na leverer hag ur feni war eo bet ober penn-kozh oute evel m'eo deus gret beleien Bro-Dreger ha Kornev-Uhel. Ha bremañ pa'z eo diviet pe de vihanañ dire-tro keout al levr-kantikou kozh emaint o c'houlsma na vo gret un dibet e-touez ar 'c'hantikou kozh' hag adembannet evel ma ont gachall Martez e vefe fur sentañ ouzh o sli,mat marteze ivez e vefe gwall ober gent ar pezh a zo : da leverout eo implijañ KANTIKOU P.JULIEN

2. Mui-ouzh-mui e klesker lekast ar Bobl da heuliañ ha de gasprun al lidoù. Bez'ez eus ur benveg nevez hag e ra strillañ e-touez an dud e-iliz : ar magnetofon . Gwasañ pezh a zo ez eo troet kenñ-kenñ ar eurt benveg (anvet ivez sakrist elektrik!) war ar galleg.

Beg'ez eus beleien hag e vont ar yezh-pobl suiañ ar c'hellont en ofisoù . E-kerzh ur Pardon e Bro-Dreger ar bloaz-mañ 1958, gser er Pardoner e-kerzh ar Salud o kenñ an holl cressoù e... galleg. Beo o. prouez ober ur brezegenn er yezh-se dije. Ha estu ur plec'h yeouank

BARR HEOL



Directeur: M. Le Clerc, Rect. Buhulien, C-d-N
N^o 16, Septembre, 1958, Trimestriel, Prix No: 150 fr } koumanant:
500 lur

Rener: M. Le Clerc, Person Bulien, Bro-Dreger
Niverenn 16, Gwengolo 1958, Trimiziek, Priz an Niv. 150 lur

T A O L E N N

AR C'HROAZ-HENT.....	p. 2
L'ANNUON DEC'H, HIZIV, WARC'HOAZH.....	p. 4...19
PEDENN H.T.S. AR PAB EVIT AN ILIZ VUT.....	p. 20
FRANCOIS-MARIE-AUGUST BOCHER	p. 20--23
AU SUJET DE L'ORTHOGRAPHE (testeniou nevez)..	p. 23--24
GWELTAZ FUR (taolennoù war vuhez St Weltaz)..	p. 24--32

KUZUL AR BREZHONEG (kreizenn ar stourm evit ar Yezh): kas ar
profou d'an Teñzorier: L. Morvezen, 6 Bali ar Gar, Konk-Kernev,
K.P.R. 1316-63 An Naoned

SKOL.. Lemit war niverenn 3 SKOL rentañ-kont ar bloavezh labour
e skol divyezhek PLOUEG-ar-MOR (koumanant: 800 lur. K.R. 1911-06
Roazon, Abad Kalvez, Rundavid, Ploueg-ar-Mor)

pep gwir miret-strizh

AR C'HROAZ-HENT

A-c'houde ar brezel diwezhañ, 1939-45, pa ne oa tu ebet d'ober gwell, ez eo en em daolet ar yaouankizoù d'ar pezh a anver Folklor. Er stad ma oa ar traoù ne oa tu ebet d'ober estreget "folklorajoù". Ne oa ket permetet, ne vije ket bet permetet traoù all ha ne vije ket bet kredet ober traoù all. Hag un dra gaer ez eo bet hag ez eo bepred evit bezañ reizh- ar folklorajoù -se. Renkout a reer dichipot reññ meuleudioù d'ar yaouankizoù ha d'o ambrougerion evit al labour o deus graet .

Un digarez ivez ez eo ar bleuniadur folklorajoù-se da veuliñ an doulleriion-hent: an Itron Galbrun gant he labour hag he le-vrioù war an dañsoù breizhat, an Aotrou Gwilcher gant e enklaskoù war an dañsoù-pobl, an Aotrou Kreston gant e studioù war an dilhadoù o deus dellezet enor hag anaoudegezh vat a-berzh ar Vretoned. Dorig ar Voier, Herve ar Menn, Paolig Montjarret hag ar re niverus o deus dispennet o roudoù a verit kenkouls all anaoudegezh ar Vro. Holl o deus kemeret o lec'h en Istor Breizh eus an XX-et kantved. Ha kement kevredigezh a zo e Breizh, hag er-maez eus a Vreizh betek ar broioù pellañ, n'eus forzh pegen dister ha diwar-c'horre ez eo bet o vberiantiz a zo dleet dezho bezañ lodek e grad-vat ar Vretoned. Ar re a studio hag a skrivo Istor Breizh en amzer-da-zont a gompreno kalz gwelloc'h egedomp-ni ez eo bet ar yaouankizoù hag ar breuriezhoù-se ar skoum etre amzer-dremenet Breizh hag hec'h amzer-da-zont.

°°

Bet ez eus bet skrivet a-wechoù pennadoù gary ha trenk enep ar folklorajoù. Pennadoù-skrid 'zo, o deus hadet disfiziañs ha droukrañs e kalonoù tud hag a labour e-yeul-gaer, en o stumm evit ar Vro... Pennadoù hag a c'helle bezañ gwir diwar-benn lod eus poadred ar folklorajoù, met ne oant ket evit an holl... Pennadoù hag a vo gwir-mat evit an amzer-da-zont, ma ne zeu ket a-benn ar rummadoù bodet dindan kement anv a zo, kouls lavarout, d'ober labour efedus ha padus war dachenn ar C'hultur, an Arboellerezh, ar Genwerzh, al Labour, ar Vroadelezh. Ma tisonjont eta ez int da gentañ-penn e dibun istor Breizh : ar Skoum .Tremenet ez eo ar mare ma kréde ar Gouarnamant teurel er prizon kement hini a blede gant traoù Breizh, ober prosez dezhe, o fuzuilhañ diouzh ret ; n'eo ket ret diimp kredañ a vez ar gaou gant kement hini a vez taolet er prizon, pe gondaonet, pe doullbolodet, hag o dianzav ha dinac'h o labour. Katoliked e-leizh, hag en o zouez pennoù-iliz, kollet pep frankiz gante hag o holl vadoù a ziskouez splann dirak fas ar bed n'eo ket al Iezenn, nag ar Gouarnamant, nag an darvoudoù

eo a ra reizhder ur gaoc bennak. Daoust pegen souezhus ez eo, e teu anstoc'h -anatañ bemdeiz e fell d'ar Gouarnamant ha d'ar Skol-Veur a Vro-C'hall merkañ petra a zo mat ha petra a zo fall er Folklor, da lavarout eo, petra a zo hervez mad hag interest ar Gouarnamant. Niverenn 7 KAEROU AR BLEUN-BRUG dindan bluenn ur c'helenner Skol-Veur, e-skeud esa barn ar Barzhaz Breizh en anv ar Quiziagezh, a laka sklaer e renko abred pe ziweshat bezañ lakaet "timbr ar Gouarnamant" war ar "Folklor" e-unan evit ma vo direbech ha diabegus ar folklorajoù .

Eno emañ ar riskl a zo o klask bremañ an Emsav Folklorel. Tamm ha tamm, hag hep gouzout dezhe marteze zoken, emañ poadred ar folklorajoù o kemerout hent an ereoù o dalc'ho dindan bav ar Gouarnamant. An nebeutañ ar gwellañ ma vo tud-e-karg evit pezh a sell ouzh an Emsav Folklorek. Seul vrasoc'h niver kargidi ar Gouarnamant er C'hevredigezhioù Folklorel, seul nebeutoc'h a frankiz o devezo ar C'hevredigezhioù-se.

°°

Fal an Emsav a zlefe bezañ bremañ : poanial evit ma vo anavezet Breizh evel ur Vroadelezh ha roet dezhi ar gwirioù a zere ouzh ur Vroadelezh. D'ar mare m'emañ an deputeed du eus Broioù Afrika o kabaliñ evit kacout da vihanañ ar stad a federaliezh gant ar Vro-benn, evit o Broioù hag a oa ur boultremadeg meuriadoù amseven bez'ez eus 100 vloaz, ez eo un druez gwelout pegen diseblant e chom an darnvuiañ eus ar Vretoned a gav o gwalc'h a zudi, a lavarfed, o heulieñ avañturiou poadred an "Tour-de-Frañs" pe an "Tourdelouest", hag ar gouelioù folklorel, hag oc'h ankouac'haat ez int izili eus ur Vro gozh .

Koulskoude Yaouankizoù ar Folklorajoù, hag a hañval bezañ troet hepken da gorollañ, da ganañ, da bourmen, d'en em ziskouez dindan gwiskamentoù kaeroc'h an eil eget egile, a zo e gwirionez en o c'hreiz un hiraezh don d'ur Vreizh kaer, d'ur Vreizh laouen, d'ur Vreizh pinvidik, d'ur Vreizh leun a glod, d'ur Vreizh lec'h ma c'helle pep tad-a-familh sellout dispart ouzh an amzer-da-zont, pep mamm-a-familh gwelout leun a eürusted he bugale o vleuniañ war he zro, ha pep poadr yaouank ha pep plac'h yaouank esperout ur blanedenn vat dindan blegioù ar barniel breizhat.

Hennezh eo an abeg moarvat a zoug renerion Gwredigezhioù Folklorel da bediñ tud akuit war ar c'hudennoù ekonomikel d'ober kaezeadermoù d'o zud yaouank, o vezañ n'eo ket a-walc'h gant ar re-mañ an traoù kulturel evit dic'hoantañ o c'halonoù, ha pa'zint nec'het en o c'hreizon gant kudenn ar Bara hag ar Vro. Alo'ta ! En ur c'hroaz-hent emañ ar Yaouankizoù : daou hent a zo

evel ma lavar kantik brudet an Taolennou : Hent ar marv, hent ar vuhez, da dud ar Folklorajou da zibab.

Dont a ra da goun dimp eus taolenn Janed Malivel, livet ganti evit sal Patronaj Loudieg : Adam hag Eva argaset eus Baradoz an Douar, hag an Ankoù o vale en o raok en ur c'hoari ar sac'h - binioù. An daolenn-se, hep mar ebet, he deus awenet ar barzh Maodez Glanndour, en e GOMZOÛ BEV, pajenn 107. hag a bedomp hol lennerion d'adlenn. Mar ne vez netra eus an "diabarzh" o souten tud ar Breuriezhoù Folkorel, da lavarout traoù eus ar galon, eus ar spered, eus an ene, en ur ger, ar Garantez-Vro hag ar Spered Broadel, e steuzio o Emsav e poull an Ankoù, ha ne chomo netra eus o labour a-benn ur rummad pe zaou ac'han. Hennezh eo hent ar Marv.

Daoust hag an hent-se eo a fell d'hor yaouankizoù bagol kemerout? EVELKENT ! Hent ar vuhez, hent ar stourm, hent ar riskl, hent an avañtur na pe ve sellet evel un avañtur dibocell gant peotred kozh hanter-impop, setu endeo ar pezh a glaskont, ar pezh a hufvireont ennañ. Hent ar Vuhez vroadel setu an hini a zibabint dre ma lako o c'halonou da dridal ha ma tegaso yec'hed, silvidigezh da Vreizh. Hag ar Folkorajou e-lec'h bezañ hepken evel ur maezou : eus an amzer dremenet, a vezo advuhezekaet dre an diabarzh, ha dindre doareoù ha stummoù o terc'hel da nevesaat e-giz ma tere ouzh ar Vuhez, e tiskouezint ene Breizh en ur bed modern.

~~~~~

Per Bourdellez

LANNOUN DE C'H, HIZIV HA WARCHHOAZH

Prezegenn c'hraet dirak Kendalc'h BREURIEZH BREIZH

5 a viz Gouere 1958

Aotronez, Itronezed,

Istor Lannoun a zo bet hag a vez bepred studiet gant istorourion ampart. Bep sizhun e lennomp pennadoù en "Echo de Lannion" gant an Ao. Briand, el "Lannionnais" gant an Ao. Dubreuil. An Ao. Darsel en deus skrivet warlene istor ar porzh. Mojennoù kaezañ ar c'horn-bro a zo bet studiet gant an Ao. de la Haye (Ar Roue Arzhur) ha gant an Ao. Massignon (Ar Seizh Sant).

Met douaroniezh Bro-Lannoun n'eo ket bet studiet, ha kement-

-se a zo un diouer bras e-kreiz "Foar an arigrap" hag an "ew-gann evit ar vuhez", er bed a-vremañ. Seul laouennoc'h en o tegemenn deoc'h, hag o vrudañ hiziv evit ar wech kentañ, emañ douaroniourion rannvro Lannoun o sevel ur vreuriezh-studi douaroniezh, peeroniet gant douaroniourion vrudet, evit lakat anat a belec'h e teu ar rouez a zo o ren war an dud hag an traoù.

Ar vreuriezh-se, a-boan dezhi bezañ ganet he deus a-vremañ c'hwec'h ezel. Kentañ labour savet ganti, ur studia-denn war barrez-Prad, a zo bet kinniget er sizhun-mañ da Guzul ar barrez gant an Aotrou Per Brizaut, ijincour Studioù-Uhel war al Labour-Douar. E-sell emañ da gas al labour war-raok buanañ ma c'hellimp

Ma vije bet Kendalc'h Breuriezh Breizh e Lannoun ur bloavezh diwezhatoc'h, ez eo eta war ur stobad kartennoù ha sifroù en dije gallet ar prezegez diazezañ e daolennadur. Hiziv n'hellan nemet difraostañ.

Ha koulskoude e komzin dichek, rak war deo izel c'hoazh ma bern sifradurioù ha linennadurioù, n'eus rec'h ebet (siwazh!) war a tu m'emañ an traoù o treiñ. An esklassoù kentañ a zo bet graet gant ar "Groupe d'Etudes Economiques et Sociales de Lannion", krouet gant an Ao. Gautier, apotiker, ha renet gant an Ao. Kelleg, eil-vaer Kêr. Anez ar bodadegoù-studi ez en bet pedet da gemer perzh eunn, n'em bije moarvat netra asur da ziskleriañ dirazoc'h. Ma anaoudegezh vat a lavaran dezho.

Lannoun a zo, dreist pep tra, ur greizenn-gerwerzh. Lannoun ne vev ket eta, drezañ e-unan. N'heller ket komz eus buhez Lannoun hep he stagañ ouzh ar maezioù tro-war-dro, a zeu da breñañ ha da werzhañ da Lannoun.

Pelloc'h zoken e renkomp teurel hor selloù. Uman eus embannadurioù an INSEE (Burev ar Niveradurioù, e Roazhon), a lavar kement-mañ : "N'eus ket a gudennoù dre departamant, kudennoù breizhat int". Ret eo lannat dreist harzoù re strizh an departamant evit klask un diskoulm breizhat da gudennoù hag a zo ken ledan ha Breizh. Sklaer eo ivez neuze n'eus ket a "gudennoù evit Lannoun hepken". Ar re-se ivez a zo ken ledan ha Breizh, ha setu perak, Ao. Ao., ez oc'h-hu deredet emañ eus ar pepar avel evit dougen testeni e kemerit lod en hon anken. Evel-se ivez, bremañ 'z eus 15 deiz, e Bleun-Brug Forwenan, d'ar c'houlz ma ce kouzhat priz a askol-debriñ, e tomas kalonoù ar bobl o welout "Kevrenn

Kastell-Paol o sevel war al leurenn, rak hevelep nec'hamant a unane Perwenan ha Kastell-Paol o welout o eostoù o koll.

Hogen n'eo ket a-walc'h sellout ouzh Breizh : an droug a zo ouzh hor c'hriant a zo o krignat Frañs a-bezh lakaet dindan dreid Pariz : " Paris & le désert français "- Pariz leun ha Frañs goullo. Pariz gant re-gorfad, ha Frañs gant kof-moan.

Evit gouzout avat, ar pezh a zo bet graet e broioù all'zo evit pareañ hevelep dizurzh, e vije ret mont betek ar Stadoù Unanet ( Traoñienn an Tennessee ), an URSS ( Geoteier ar gevred ), Bro-Holland, Sikilia, Bro-Israel. Rak, bras pe vihan, broioù all o deus graet ar pezh ne fell ket da Frañs ober.

Ledan eo an dachenn. N'hellan ket displegañ ar gudenn hag an diskoulm anezhi deoc'h war o hed. Ne rin nemet diskleriañ dirazoc'h ar peder gwirionez-mañ :

- 1) Lannuon a zo bet ur greizenn virvidik en amzer dremenet ha dreist-holl en XIX-et kantved.
- 2) Abaoe 1919 pe war-dro, eo kroget an diskar. Abaoe 1944 emañ Bro-Lannuon o kouezhañ en he foull.
- 3) Un nebeut mizioù'zo avat, tud a youl a zo krog da boaniañ evit an adsav... Dises e vo, rak diwezhat e kroger.
- 4) Evit addegas buhez yac'h ha gonidegezh fonnus er c'horn-bro hag e kêr, e vo ret labourat war bep tachenn, ha dreist-holl, ober gant ar re yaouank :

tud awart war o micher  
ha tomn o c'halon ouzh Breizh.

&

L A N N U O N     D E C ' H

Lannuon a zo eta, dreist-holl, ur greizenn-gerwerzh. Al Leger, gant al lanv o sevel div wech bemdez, a zo bet e-pad pell amzer un hent digor etrezek Bro-Holland, Breizh-Veur, an Havr-Mevrez, Jerze, porzhioù-mor Breizh, Bourdel ha Bro-Spagn.

A-geñver Lannuon, an aber, deut strishoc'h, basoc'h, - 7 kard-lev diouzh ar mor - a voe treuzet gant hentoù (war bont Kervaria hag hini Santez Anna) hag e veze ret tremen dre Lannuon da vont eus bro binvidik Landreger da borzhioù Montroulez pe Vrest ( Dizurzhioù an Digpac'h a grogas e Lannuon gant " Skrapadeg" ur charreadeg ed a oa bet Brestiz o kerc'hat eus Landreger.

A drugarez d'ar ster-se, d'an hentoù-se, ha d'ar c'has-tell-kreñv a voe savet d'o diwall, Lannuon a oa ur c'hroaz-hent etre an douar hag ar mor. Krouet e voe ur marc'had sizhuniek ha foarioù brudet ouzh troad mogerioù kêr, war ar Marc'hallac'h hag ar Forlac'h ( Marc'had-lec'h, ha Foar-lec'h ), hep kontañ marc'had an neud, war bavez kêr.

Brasañ prener ha gwerzher er marc'hadou-se a oa al labourer-douar. Bro strujus Landreger, hag ar re all, treutoc'h ar peuriñ ganto ( bro ar greunvaen 'ned an aod, re Blistin ha Plouared ) a zegase e kêr o gwinizh, o lin hag o c'hanab, o neud hag o lien, o bouteier-koad, o saout hag o c'hezeg, o yer, o vich o hag o amenn.... Ar baotred-aod a zegase o fesked, o bezhin, o zraezh glas da zibuta ar parkoier. Hag al listri teir-gwern a ziskargo koad, gwin, glaou.

E kêr ha war-dro, pep micher en he straed, e labourer ar wiaderlon, ar boderion, an dogerion, ar gordamerion, ar givijerion, hag ar vilinerion zoken ( e penn pont Santez Anna ez eus bet ur vilin-vor e-pad pell amzer )

Er c'hantved tremenet, hag e penn kentañ ar c'hantved-mañ e roas Lannuoniz bec'h d'al labour gwashoc'h eget biskoazh. Fraoñvedeg ar manej-kezeg o tornañ e ti ar C'hozaned e Hengoaz a zivorgouskas an holl. An douaroù put a voe dizouret ha razet; lanneier a voe marret, pineier a voe plantet. An toernioù a voe lakaet dindan vein-glas e-lec'h soul... E Lannuon daou zen, " daou baotr a-raok" a gemeras penn ar gwellaennol.

An Aotrou Bonniag, beleg ha kelemer, e Skolaj St Jozeb - hag a voe unan eus ho prezegerion e-pad ho Kendalc'h 1929, e Lannuon -, a grous ur skol labour-douar, sindikadoù. Prezegemoù a reas war ar maezioù. Ur wech ar bloaz e vodas ar re varrekañ e Lannuon en ur "Sizhunvezh-studi war al Labour-Douar". Drezañ e splanne ar gelennadurezh hag an nevezintioù tro-war-dro da ger-lannuon.

E keit-se, an Aotrou Morvan, marc'hadour, a alias labourerion ar c'horn-bro da lakaat avaloù-douar abred, evel ma rae Pempoull ha Landreger, hag a reas e-unan diouzh o c'has hag o gwerzhañ e Breizh-Veur - ur gonid bras evit ar vro.

Ar micherioù ivez a oa savet mall warno: ar milinoù-lin, ar c'hivijerioù, ar Gov gant e arrebauri, ar Merrer gant e stal- skulterezh koad, Hermod, e penn 80 ha betek 100 a vicherourion, a savas e Breizh, e Bro-C'hall hag e Broioù an Hanternoz,



Kalvarioù, beziou, aoterioù-mein, a gantadoù.

Neuze ivez e teredas an douristed kentañ, darn brudet, darn fentus, a Bariz hag a Vro-Saoz - evel ar Saoz a bigne war e droadig-kamm, skalier Berlawene, ha c'hoazh e rae ul lamm (war e droadig-kamm bepred !) dreist ar gloued a oa en amzer-se er penn-krec'h anezhi.

Dreun Kér a voe merket gant an nevezentioù :

1) Ar porzh a voe adaozet : war al lec'hid, e voe ledanaet hag hiraet ar c'haeoù gant atredoù ar Forn-Raz. 'Us d'ar ster, e voe ledanaet ar pontoù. Pleg an Aod-Uhel a voe troc'het : e-lec'h ma tremene listri bremañ 'z eus IIO vloaz, emañ bremañ ar pentoniou aezhenn-deviñ.

2) Hentoù nevez, en ur gaouigellat, a reas tro ar graviou e-lec'h pignat sonn evel an hentoù kozh - rak ar charreoù a oa muioc'h anezho bremañ ha brasoc'h karg e pep karr.

- etrezek Perroz, e voe dilezet grav Kerwennoù  
- etrezek Plistin ha Montroulez, e-lec'h grav Beg-al-Lann e voe graet un hent all hag a dremene dre liozrh Pifanig, hervez ma kont dimp Charlez ar Govig.  
- Hent Plouber a zo tostoc'h d'an he t-houarn eget hent kozh Keraz.  
- Hent Gwengamp a bellaas diouzh Sant-Elived.

- Jogiviiz, ha 'hellent dont e ker betek neuze nemet sav-diskenn dre Gein-ar-Wiz, a zeuas d'ar marc'had war ar plaen ur wech troc'het pleg an Aod-Uhel; hag en tu all, dre al leuveenn nevez, ar plac'hed-aod gant o boutegad pesked war o fenn, herr warno, a dremene ar vartoloded o stilejañ o lestr a-bouez ur gorden.

3) Neuze ivez eo e teuas an hent-houarn da Lannuon. E-pad m'edo an Eskob ouzh he bernigañ, ur grennardenn eus Beg-Leger, deut c'hoant st...añ dezhi, a renkas ober en he dilhad gant ar bobl-tud a oa... Hi hec'h-unan he deus lavaret din.

Tamall a reer da Lannuoniz bezañ nac'het degemer al linenn-vas. N'ouzon ket piv en deus ijinet an teodad-se : un den sur-mat ha na ouie na penaos e tiazerez an hent-houarn, na pegen dilu e oa Lannuoniz en amzer-se.

4) Ar straedoù en em gavas re strizh, plas-kêr re enk. Gwazh a se d'an tiez kozh ! Gwazh a se d'an Aoditorig koant ! E ruioù'zo e voe diakaret ur c'hostez penn-da-benn evit gellout ledanaet. Bec'h d'an Aoditor ha d'e fasadenn e giz an XVIII-et kantved ! Un ti-kêr nevez, fasadennoù nevez a voe savet. ( Ret eo d'an den bremañ sevel e fri evit gwelout pegen pinvidik e oant, rak an traoñ

anezho a zo bet lode-met etre div pe deir stal). Kresket e voe an Iliz; Klauvdi Santez Anna ivez. Hotel a voe savet...

...Hag en amzer Combes, pa voe taolet er-maez Kloerdi bihar Landreger, e klaskas hemañ repu e Lannuon, hag e krouas emañ ur Skolañ Bras hag ur Skol Labour-Douar.

Frealzus eo an daolenn... Ha koulskoude en dibenn an amzervezh-se, e weler, da heul taolennoù frealzus al labour hag ar pinvidikaat, taolennoù all hag a zo glac'harus :

- da gentañ, enganoù diskiant ar politikerezh digristen a penn ar c'hantved-mañ. D'ar c'houlz m'edo ar bed a-bezh (Bro-Japon, zoken) oc'h adstummañ doare o labour hag o bevañs, ha war 'hadourezhioù eus pevar c'horn ar bed o tont da zistrodañ hor re betek e hor bro, da lazhañ hor micherioù, da ziskargañ gwinih ar C'hanada betek an hor milinoù -, an dud a oa er penn ne glaskent nemet gloazañ ene ha seatriñ enor hor pobl.

- Goude-se, dre ziv wech, e 1914 ha 1939, ar Marc'h Du a gasas gentañ hon tadoù da gentañ, hor breudeur ha ni goude, etrezek tachennoù al laghadeg. Kalz, kalz a Vreizhis n'int ket bet distroet ac'hane, hag ar re a zo distroet a zo deut d'ar gêr dinerzhet a gorf hag a ene.


&&  
LANNUON  
HIZIV & WARC'HOAZH

Ur pennadig 'oa n'ae ket ken mat an traoù evel ma seblante. Niveradur ha linennadur ar boblañs, evel n'emaint emañ dirazoc'h, a zouge testeni a gement-se.

Setu kresk ha koazh ar boblañs abaoe 1801. E Frañs eo kresket a gant da gant unan hag hanter-kant (100-151). En Aodou an Hanternoz eo bet kresket betek 126 e 1866, met abaoe eo adkouezhet, ha setu ni e 99. An darnvuiañ eus broioù ar bed, e keit-se, o deus kresket o foblañs div, teir, hag alies peder gwech.

Dirak un istorour pe un douaroniour eo un enor bras evit Breurizh Breizh bezañ bet savet adalek an amzer gentañ

m'eo bet dispartiet kresk-poblañs Breizh diouzh kresk-poblans Frañs. Adalek 1842 Krouerion ho Preuriez-h-daoust n'eo deus ket diazezet o lavarou war niverennoù ( ne oa ket ar c'hiz neuze ), o deus graet kement ha lavarout : " Ni, ne fell ket dimp e vefe Breizh ur vag distur o vont d'an argoll. Breizh he deus madou-korf ha madou-spered ha n'hell bevañ nemet ma vezont miret ha lakaet da dalvezout. Ni, ne fell ket dimp e troje dalc'hmet ha bep gwech unaniez ar vro, e Frañs, diwar goust Breizh ! ". Kement-se hoc'h eus c'hwi embannet, netra nemet dre m'eo bet krouet ho Preuriez-h d'ar c'houlz-se, a-rack hini all ebet.



En 1866 emañ poblañs an departamant en hec'h uhelañ. Abaoe, ne ra al linenn nemet diskenn dibaouez : buanoc'h e-pad ar brezel I<sup>4</sup>; gorrekoc'h e-pad ar brezel 39. Abaoe ar brezel diwezhañ avat, e-pad ar boblañs e Frañs, emañ Breizh o tiboblañ spontus

Gwelomp war an eil taolenn<sup>o</sup> kêr Lannuon, ar c'hanton hag an arondisamant. Poblañs kêr avat, a oa krog da greskiñ a-rack ar bloaz 14, hag a adrogas adarre d'hen ober goude ( deut oa ar c'hiz da vont da chom e kêr ). Abaoe 1946 avat, e tigrask buanoc'h eget n'he doa kresket biskoazh. Pelec'h ne rafe ket ? En Iliz Lannuon ez eus bet 130 eured warlene : 30 tiegezh nevez hepken a zo chomet...

<sup>o</sup> Hol lennerion d'hon digareziñ, n'hon eus ket gallet lakaet an daolenn-se war Varr-Reol. Met sklaer-tre ez eo an destenn.

Emaoomp, 'm eus aon bras, o vont da welout hon holl yaouankiz o tivroañ. Dec'h diwezhañ, em eus goulenet digant ur pried nevez petra a oa e-sell d'ober ? -" Mont da Bariz, emañ, evel ar re all "

Ya, evel ar re all... Setu emañ piramidenn<sup>o</sup> an oadvezhiou e parrez Prad ( kanton ar Roc'h ) : hini 1872 hag hini 1954.

200 bugel bihan ( a izeloc'h eget 5 bloaz ) a oa ebeutoc'h e Prad e 1954 eget e 1872 ( 99 paotrig, 101 plac'hig )

371 bugel ( izeloc'h eget 10 vloaz ) nebeutoc'h

569 ..... ( izeloc'h eget 15 vloaz ) nebeutoc'h !

A-us da 60 vloaz avat, ez eus 25 muic'h e 1954, a drugarez d'ar medisinerezh en deus astennet buhez an den bremañ, hag a drugarez da Napoleon kozh en doa roet gwechall da baotred Prad un tammig konje paet evit mont da welout petore liv a vez war a arc'h e Rusia. - 25 tad-kozh ha mamm-gozh muic'h, 726 mab bihan ha merc'h nebeutoc'h .... Un dra vat eo, a gredan, emañ Ker-Lannuon o kreskiñ ospital ar re gozh !

Pariz leun-chouk, ha Frañs goull ! Setu ni Breizhiz o kouezhañ d'hon tro ken izel hag ar C'hreisteiz. Ret eo lavarout avat, eo deut ar C'hreisteiz da vezañ ur vered, dre ma ne c'hane ket a vugale. Emañ n'eo ket kont evel-se : bugale a zo bet ganet keit ha ma chome tiegezhioù yaouank er vro.


Petore amzer da zont a zo eta e gor, ma ne zihumomp ket ? Ar glac'har hag an diskar.

An holl a oar e taougenno en ur ober 20 vloaz niver Algeriz vuzulman, dre n'eo deus kalz a vugale. Rak-se 'ta e vo beuzet " Frañs kozh " gant Afrika ( rous pe zu ), ma talc'her da beurlou-gañ galloudoù ekonomikel ha denel ar yac'hañ, ar c'halonekañ hag an enorusañ broadoù a zo e Frañs ! Krog eo an taol : gwin Algeria a zo trec'h war win ar C'hreisteiz; o avaloù-douar abred, bloavezhioù ' vez, a drec'h ivez war hor re. Pinvidion Afrika an Hanternoz a bren inizi ha koadoù e Breizh. Hag an arc'hant a oa bet prometet da sevel chaoser ar Rañs a zo bet dibromet, ha kaset da sevel unan en Afrika Zu.


Chomomp tostoc'h ouzh ar gêr avat, da welout ar pezh a zo c'hoarvezet emañ, e keit-se, goude ur c'hantvloavezhad divroadeg tud yaouank.

<sup>o</sup> Sellout ouzh ar bajenn 12.

# PRAD (Kanton ar Roc'h)



## BLOAVEZHIOÙ



- Hervez an Aotrou Brizaut, ijinour Studioù-Uhel war al Labour-Dou

## I.- ADAOZIDIGEZH AL LABOUR-DOUAR A ZO MANET BERR.

N'eo ket dre m'eo kan diaes-se d'ober : reiñ raz d'an douaroù put - adkoata - digleuziañ - digeriñ Pradoù a c'hiz nevez.. Met ret eo gouzout, karout hag esperout ! Dec'h e kavis un itron gozh lorc'h enni : feurmet he doa er bloaz-mañ lannier hag a oa manet difeurm meur a vloaz'zo, d'ul labourer-douar yaouank desket war e vicher, hag e deus graet ganto Pradoù druz !

Ne fell ket din mont re bell war an dachenn-mañ. Hini an Aotrou Miguel eo, hag a dle komz war va lerc'h. Diskouezet en deus e tachenn-skouer Logivi-Plougraz, e c'hell ecotoù hon douaroù bezañ daougementet, tri pe beveragementet, gant ma vo lakast TUD desket war ar vicher da gentiliañ al labourerion-douar.

II.- N'EOUS KET KIASKET GWERZH D'HON EOSTOÙ :- Ha perak produiñ ma n'heller ket gwerzhañ ? Kudem ar gwerzhañ a zo bet studiet nevez'zo en ul levrig savet gant an Aotrou Gwibriant hag embannet gant ar CELIB. Setu amañ a gavomp e-barzh da skouer .

Lezennoù Frañs a zo graet avit harpañ al labouradegoù, en ur ober d'al labourer-douar prenañ ker ( pajem 2, evit ar bloaz 1952 )

|                           | Danmark     | Frañs  |
|---------------------------|-------------|--------|
| 200 lur-bouez a azot      | 27 dollar   | 50, 8  |
| Stlejer(traktor)          |             |        |
| 20-25 a gezeg             | 1373 dollar | 2.857. |
| 100 litr? eol-deviñ ....  | 5,9         | 17,3   |
| 100 litr. eoul-Diezel.... | 4,2         | 13     |

Ober d'al labourer-douar prenañ ker ha gwerzhañ waro'had-wat : war uhela priz ar vioù pe an amann, e vo kerco'het vioù hag amann eus Bro-Holland.- Met ne gerc'her na kirri-tan na traktorien a-ziaevaz-bro, evit herzel ouzh prizioù al labouradegoù da uhelaat.

Setu aze e petore degouezhioù - hep kentañ ar re all - e tle hol labour-douar kemer perzh e Kenvarc'had Europa !

III.- E-kreiz kement all a zilerco'h, a leziregezh, a ziouiziegezh war draoù Breizh, PETRA EO DEUT AL LABOURADIGOÙ DA VEZAN ? Setu ar pezh a lavar an Ac. Philipponneau diwar-benn re Lannuon



" Al labouradegoù kozh a zo kousezhet en o foull a bep eil : Kivijirioù, nezaedegoù, nozaedeg krev-konikled, labouradeg-kouevr, gwriadeg-rochedoù... N'eus deut da vat nemet un ti livañ ha nastaat danvezioù ". Distenn an Anaon-se a vefe da astenn bremañ, pa 'mañ ar milinoù-lin diwezhañ o vervel.

Pa gomzer eus labouradegoù, an darnvuiañ eus an dud ne welont dre o huñvre nemet mangleuzioù-glaou pe houarn, uhelfornioù o tivogediñ, siminalioù hir gwintet e aer... ankounac'haet gante ez eus ivez labouradegoù-peuraozañ, hag er re -mañ an danvez ne gont ket nemeur e-kichen ijin hag int'andu an ijinour, hag ampartiz ar micherour.

Marteze hoc'h eus klevet komz eus ar CNET ? (Centre National d'Etudes des Télécommunications). Ar "pell" a zo war e gont " a lavare ur farser : ar pellgomzer, ar pellskriver, ar pellweler, hag ar binvioù hentet a-bell. E penn ar CNET emañ an Ao. Marzin eus Lannou. Ar CNET kentañ a zo e Issy-les-Moulineaux. Dre m'emañ Pariz e riskl bras da vezañ distrujet raktal pa grogo ar brezel, an Ao. Marzin ( n'eus bet nemetañ e-touez ar pemoù bras o vezañ graet kement all ) en deus asantet " digreizennañ ". En em glevet eo gant an Aotronez Pleven, Bourdellez, Hainguerlot ha maered ar c'horn-bro evit ma vo savet atelieroù-studi ( laboratoueroù-imbour-c'herezh ) an eil CNET war aerborzh Lannou-Ferrôs. Evit krogiñ e vo er CNET 80 a ijinourion, ha goude-se 500 den implijet. Diwezhatoc'h, dre ma teu purliesañ al labouradegoù prevez da gichen al laboratoueroù-imboure'herezh, e kraeder e savo, tro-war-dro, labouradegoù en darempred gant ar CNET, milieroù a vicherourion enne.

N'em eus ezhomm ebet da lavarout deoc'h pebez esperañs a zo ganet en tiegezhioù diwar ar c'heloù-se : gwelout o bugale o chom tost d'ar gêr. N'em eus ezhomm ebet kennebeut da lavarout deoc'h pebez samm eo evit ar parrezioù pourvezñ lojeriz d'an ijinourion ha d'ar vicherourion.

Gwellañ 'zo gant ar CNET, a gavan-me, eo e tiskouez anat d'an holl e c'heller krouiñ labouradegoù e Breizh, pa vez c'hoant d'hen ober.

#### KALONENN AR GUDENN

Labour-douar, kenwerzh, labouradegoù, setu graet tro an Ekonomiezh ganimp. Ha koulskoude omp chomet war an diwarbenn: n'omp ket aet betek ar galonenn. Ganet ha savet en ur geriadenn vreizhek ha buhezek e 1907, em eus he heuliet dre hent ar glac'har, kammed

ha kammed, betek pal ar marv e-lec'h m'emañ bremañ. Er skol on bet enni da gentañ edomp 52 a vugale. Bremañ n'eus ket 10.... N'eus ken a beskesterion. Ar re yaouank a zo e-maez ar vro. Ur vaouez ha deus lavaret din warlene: " Ne dalv ken a boan kaout bugale, ni ' varvo en ospital evel ar re n'o deus ket a vugale. " Darn eus ar mereurioù a zo bet dilezet. Er re all, tadoù ha mammoù aet o bugale digante a zoug ur galon bonner en o c'hreiz, hag a gil bloaz ha bloaz dirak al lann hag ar c'honikled, o tilezel a eil park war-lerc'h egile.

Hag an testeni a zoug dirazoc'h eo hemañ : " Pa kouezhomp ken izel, eo hor c'halon a zo faezh. Ar parkeier a zo dilezet, ar skolioù hag an ilizoù a zo ha ter-c'houll, ar c'ha-naouennoù a zo mouget, ar gwinn ruz a zo o veuziñ ar vro, ar re yaouank a ya kuit dre ezhomm pe hep ezhomm. Testeni a zoug eo hor c'halon a zo klañv : ar boued-spered hag ar boued-kalon a zo bet roet dimp ne oa ket diouzhip, ha setu perak omp dinerzh, dizalc'h, ha stlabezet gant an avel foll.

Ret eo din pouezañ war gement-mañ, rak gouzout a ran ne vo ket an douaronourion a c'hiz kozh a-du ganin. Maoris Al Lannou er "Monds" ( 30-vet a Vezheven ) a ra eus an douaroniezh-se, hag a fell dezhi dispartiañ an Ekonomiezh diouzh kalon an den : " Ur fals-deskadurezh savet bremañ 'z eus 50 vloaz gant klaskerion atravet ha brid-mouchet ". An douaroniezh-se a fell dezhi diluziañ kudennoù mab-den gant hentoù bras, kirri -dre-dan, kammerzed-tredan... " Eo ket diaesoc'h eget se, emezo ! " Eo !, diaesoc'h eo ! Servijit da Vreizhiz hentoù goudronet, dour en ti, tachennoù-ebatal, salioù-c'hoari... Daoust hag e kred deoc'h e vo sparlet an divroadeg ? " °°

Marteze ne lakaot ket un den yaouank hepken da chom er vro. Ar goudron a lufro dezho hent Pariz. Ar radio a gomzo dezho eus Pariz, hag an TV (Skinwel) a ziskouezo dezho "pegen kaer eo Pariz er sinema " evel ma lavare ur vatezh vihan c'hoant dezhi da vont du-hont ivez. Nag an eil nag egile ne harzo ouzh an " dristidigezh " a zo o yudal dre an avel e Prad, eme an Ao. Bri-zaut, nag ouzh an anken a zo o waskañ war ar c'halonoù em c'hêriadenn ( Va aotreit da zistreiñ war ar pezh a zo bet lavaret gant ar prezezer kentañ diwar-benn ar chapelioù dirapar : n'eo ket o lezel da gouezhañ e-touez an drez hag ar spenn, ar chapel o deus karet ha doujet dreist pep tra er bed-mañ, e vo adroet da kalon da dud ur gêriadenn ).

°°. Sellit ouzh ar bajenn I6 an daolenn eus ur vourc'h 'lec'h ma kaver an holl aederoù a c'hiz nevez.

Park  
ar  
Sportoù

SKOL  
al  
Leane  
zed

KENTEL

Ur vourc'h pinvidik war " C'houriz  
alaouret Breizh " ennañ :

29 ti nevez pe adkompennet  
e 6 ti n'eus nemet un den  
e 5 ti " " 2 zen  
e 7 ti hepken ez eus bugale.


Ha koulskqude ez eus :

Skol Gristen ha Skol ar Gouarnamant.  
Ur Park-Sportoù kaer

Un "Oaled" dispar

Dour en ti hag all...  
Petra eta a ra diouer d'ar re yaouank ?  
Bezañ desket karout o Bro hag o broiz.

GWELLOC'H KARANTEZ 'LEIZH AN DORN ....



Kartenn savet gant an Actrou Ollivro, kelennerez  
e Lise Gwengamp.

Ma rafen ur sell c'hoazh war Vro-Lannuon, bremañ 'z eus  
50 pe 100 vloaz avat, e vefe dishañvel an daolemm :

Mrs Conrad, gwreg ar skrivagner saoz, o tegouezhout eus  
Londrez da dremen c'hwec'h miz war-dro da Lannuon, a skriv  
kement-mañ : " Kalz a Vreizhiz hon eus gwelet. Kalz, kalz a  
verc'hed yaouank a oa koant-meurbet, war o dremm vuhezek e pare  
o ene, hag em eus kavet kement-se souezhus-bras en ur boblad koue-  
rion."

Eus ar re gozh e komz ivez : " O dremmoù moan a oa heñvel  
ouzh dremmoù aotronez, uhel, meurdezus ha seven."

Ampartiz an dud-se war o labour a deus diskouezet dre  
ar pezh o deus graet. Petore kêr, bihan ha bras, en XIX-et kant-  
ved, he deus kizellet koad pe venet mein, evel ma rae Hernod ha  
Merrer ? Ma o dije bevet an dacu-mañ hag o micherourion er XV-et  
pe er XVI-et kantved e-lec'h bevañ en XIX-et, o dije gonezet da  
Lannuon ken kaer brud evel m'o deus gonezet kêrioù an Itali e-  
kerzh an Azginivelezh, ha distroadet Montroulez.

Talvoudegezh ha pinvidigezh o lennegezh ? peadra da reñf  
labour d'an Uhel da sevel levrioù, ha d'ar voulerion Mauger ha  
Govig da zuiñ paper bep sizhun.

Talvoudegezh ha pinvidigezh o sonerezh ? Gant an Actrou  
Floc'h emberr e klevot. (°)

Bebez soudarded kolonek e cant, a zo bet merket gant  
o gwad war dachennoù ar brezel, ha gant ar gizell war ar beziou-  
neur er beredoù.

Ur bobl evel-se ne vije ket bet kouezhet ma ne vije ket  
bet diskaret gant leziregezh darn ha fallagriezhe darn all.

War destenioù an amzer dremenet ha war va anaoudegezh  
ha va c'harantez evit va fobl e tiasezan ar pezh a lavaran bre-  
mañ : Evit ma chomo Breizhiz yaouank en o bro ez eo ret :

- 1) E c'hellfent chom
- 2) O dije c'hoant da chom

(°) Diouz an noz, en deiz-se, e reas an Actrou Floc'h ur gaozeadenn  
heverk-kenañ war sonerezh Breizh, e sal an Ti-Kêr e Lannuon

I- Ret eo e C'hellfent Chom : e c'hellfent gonit o bara.

Ret eo aczañ pe adazañ : labour-douar, kañwerzh, labouradegoù, hen lavaret em eus. Met ret eo ivez e teskfent o micher, e vefe savet skolioù-micher; skolioù labour-douar da gentañ ha dreist pep tra. Rak, bezet souezhet eb a garo, an hini a oa e Lannuon a zo marvet pa oa kement ezhomm anezhi ! En departamant, n'eus skol labour-douar ofisiel ebet ! Unan gristen a zo, met pell ac'han emañ : e Quessoy.

Skolioù-micher emeur o c'houlenn hag o c'hortoz pell'zo. A drugarez Doue emañ kêr-Lannuon o vont da sevel unan.

II. Ret eo ivez O Dije C'hoant ar re Yaouank Da Chom.

Hag evit-se ez eo ret ober Breizhiz ganto. Ar peurrest ne vo nemet koll arc'hant ha fichañ huñvreoù kaer, keit ha ne vo ket komprenet hag anzavet ar wirionez kentañ-mañ. Setu war gement-se ar pezh a soñj ma mignoned eus ar GEES ( Strollad ar Studioù Ekonomikel ha Kevredigezhel Lannuon ) : " Ar G E E S a c'houlenn start ma vo kelennet mat ar re yaouank war o micher, ha ma vo krouet ur Greizenn-Studi war al Labour-Douar. Goulenn a ra, en tu-hont, ma vo dedennet ar re yaouank davet ar Vro dre studi ha douaroniezh, hec'h istor, hec'h arz, he yezh hag he lennegezh-pobl "

Un draig a zo bet graet .Kalc'hioù Keltiek a zo e Ferroz, e Plistin, ha zoken nevez'zo, e Lannuon. Ar strolladoù-se o deus muioc'h a dalvoudegezh eget ma kred ar speredoù diaes. N'eus nemete e-touez ar re yaouank, a vefe gallet diskleriañ diraze stad Breizh ha pere eo diazezoù an Adsav - n'eus nemete a vefe gallet o aspediñ da virout bev en o c'halon, e kreiz safar ar vuhez, un tamm karantez evit pobl Vreizh.

Un dra all c'hoazh a zo bet graet e Lannuon er bloaz-mañ: Skol-Daïs ar " Joinvillaise", emañ an Dimezell de Sagazan er penn anezhi, he deus klasket skeudenniñ dre zañsoù ur son-bobl eus an XVIII-et kantved. O kuñtuhl evel-se un hadarn e teñzor ar bobl, dezhi da greskiñ ha da vleuniañ en heol hon amzer, o deus roet ur skouer dalvoudus, a gredan.

Un draig bennak a reer eta... nebeudig, nebeudig, p'eo ken bras an ezhomm, an anken ! Pegit omp manet war-lerc'h Bro-Bempoull, e-lec'h ma 'z eus digoret ur Skol Divyezhek e Ploueg-ar-Mor ! Na pell emañ hor skolioù diouz kelenn " douaroniezh, istor, arz, yezh ha lennegezh ar bobl ! " Ha pegen poent hen ober koulskoude.

o o

KLOZADUR

Evit klozañ, e renkan eta adlavarout deoc'h - daoust m'eo danguzhet ar wirionez-se gant tiz nevez ar "retrosted", ez eo Bro-Lannuon ur vro gwall-gleñv :kouezhet izel al labouradegoù, dilerc'hiet al labour-douar, degouezhet niver, nerzh ha youl an dud, fallgalonet hag o tivroañ.

Ha koulskoude e kemerer bec'h, bremañ, er c'horn-bro, da glask adsevel. An tachenoù-skouer, ar CNET, skol-vicher Lannuon, ar C'halc'hioù Keltiek, eo ar testenioù sklaerañ. Ar parrezioù, ha Kêr dreist-holl, eo pommer o dispignoù tur Skolaj nevez hag ur Skol-Vicher Nevez emeur o sevel pe o vont da sevel; un ospital tud kozh evit ar re a zo aet o bugale digante, lojeriz evit ijinourion ha micherourion ar C N E T... Hentoù nevez.... Ar re a zo er penn a ziskouez ne fell ket dezhe chom da gousket p'eo krog an tan en ti.

Daoust hag e vo a-walc'h gant kement-se ? NE VO K E T, S U R - M A T, ma ne weler o sevel tud a galon hag a garo Breizhiz gant holl dan o c'halon, hag a vo lorc'h enne o c'houzañv evit Breizhiz hag o labourat gante.

Daoust hag e c'hell ar maezioù, - didud, dinerzh, di-esper- magañ c'hoazh ar wazed-se : paotred ar Skouer, ar Fealded; paotred Servij ar Bobl hag ar Sakrifis; diazeourion Amzer-da-Zont Breizh ? - Daoust hag e c'hell c'hoazh hor maezioù hen ober ?

Ha c'hwi, Aotronez hag Itronezed Breizhiz Vreizh ? Den ebet ne raio goap ac'hanoc'h-c'hwi, mar goulennit digant ar Skol deskij brezhoneg d'ho pugañ. Ne gavot nemet anaoudegezh vat ha doujañs a bep tu, mar pledit gant hon nec'hamant. Ar bobl kaezh-mañ - a lignez ken uhel, daoust d'ar re o deus desket dezhañ ober fae warnañ e-unan-, a roio e galon d'an hini a gemero poan evitan.

C'hwi, Aotronez, ha c'hwi hepken marteze, a c'hell ad-dihuniñ lorc'h ar Breizhad, ha lakaat ten an esperañs da adkrogiñ e-touez ludu yen an caledoù ha ne zeu ken davete Breizhiz vihan da doumañ.

An Ac. Beleg P. Bourdellès  
Kelennar Istor ha Douaroniezh.

vvvvvvvv





20 -EBREL 1944.

Ar yaou 20 a viz Ebrel. Gwelloc'h ez ae ma zad. Brav 'oa an amzer... Er jardin e oa ma zad, diouzh ar beure : " Brav eo an amzer, a lavaras mamm. Oc'h ober petra 'out ? " - " O ! emezañ, o kempenn an tamm douar-mañ evit saladerm pe traoù all, ma vezan bev d'o debrif. Mont a ra fall an traoù ". Trist e oa; e vrec'h a oa en ul loer gozh.

Goude kreisteiz e teuas un den, eus ur gêriadenn all da c'houlenn gantañ un troc'h gouzel er c'hoad. Henezh a lavaras goude " August n'en deus ket paouezet da sellet en-dro dezhañ ( Henezh avat, n'am eus ket gallet gouzout d'ober petra e oa deust du-mañ an deiz-se.) Setu goude bezañ evet ar c'hafe, graet tammouh traoù, an amzer a dremene, eur ar marv a dostae ivez. Goude bezañ kaset ar c'hezeg er-maez, ha bezañ graet en-dro dezhe, e oa tro c'hwec'h eur hanter. Mamm a oa e ti un amezegez. Ma zad a lavaras din : " Lak un tamm boued c'hoazh d'ar c'hezeg, ha goude-se degas anezhe d'ar mar-chosi." Ha me neuze o vont da zrek ar c'hrañch vras : " Da belec'h ' ez ? " a c'houlennis digant ma zad

"- Betek krec'h ar c'hoad da welout petra o deus graet an Alamened." - Gortoz un tamm, me'zo 'vont ganit ." - Nann, iann! Chom aze, da vamm a zo e ti Ambrosine ha n'eus den er gêr."

Koulskoude am boa graet buan-ha-buan; me c'houlennet ket hen leuskel e-unan. Evit ober buanoc'h da zegas ar c'hezeg d'ar gêr, ha me o vont d'an ti da dapout ur banerad kerc'h... Pa oa ma dorn war an nor d'he digerif, e klevan un tem, daou, tri ( distaget ) ha kerkeret goude temou hep dihan en-pad ur reuziad. Me spontet o vont en ur redek da welout mamm en ti all : " Tata 'zo lazhet." Gwelout a ran anezhi c'hoazh. Netra n'he doa laret, met an dour a ruilhe eus he daoulagad.

Goude, me o vont war ma c'hiz da glask anezhañ. Erru en alez-derv tost d'ar stank e klevan an amprevaned o vont kuit. Spontet e teuan war ma c'hiz, gortoz un tamm ha mont adarre.. (Pa oan tostaet ar wech kentañ e oa bet ma soñj mont uheloc'h evit ar stank e-lec'h ma oa kuzhet ur bistolenn ha temou en un toull. Unan bennak am bije bet ).

A-us d'ar roc'h : ar Merc'hez; war ar wenedem e welen un tamm eus e chupenn. Pa oan erru en e gichen e oa war e gain, digor e zaoulagad. Un toull en e benn, unan all en e choù, treuzet e dog, e zivrec'h a oa torret, e zaouarn ivez, e gorf a oa drailhet, toullet e kement lec'h...

Kentañ tra 'm boa graet ? Laret ur bedenn evit e ene. Kalet, euzhus eo kavout un tad lazhet war un hent, ha kalet eo, pa vez ret lavarout " Marv eo ma zad. N'am eus tad 'bet ken, jemez n'am bo. Seitak vloaz am boa ."

Neuze hen tapis evit hen degas d'ar gêr. Siwazh, re bonner e

oa evidon. Goude bezañ hen sammet war ma chouk, e oa ret din adlakaat anezhañ war an douar, pe gentoc'h pe lavarinn mat, e oa kouezhet diganin... Tro un eur goude, e oa degaset d'ar gêr.

Goude, me'm eus klevet lavaret e oa ur plac'h yaouank hag he devoa klevet ma zad o lavarout p'he devoa hen gwelet " O, ma bugale baour !"

... Setu skrivet gant kalz a faziouh marv ma zad ha penaos e oa bet tizhet... Alies am eus bet soñjet : " daoust ha ne oa ket bet roet dezhañ da zibab etre bezañ lazhet er gêr, pe e lec'h all ? " N'eus ket c'hoazh respont ebet. Den n'en deus goulennet lavarout petra a oa na piv a oa. Koulskoude kalz a dud a ouis e oa da vezañ lazhet.

Kalz a draoù am eus c'hoazh da lavarout diwar-benn marv ma zad, met skrivan fall a ran ha n'on ket evit displegañ mat an traoù-se. Kas a rin deoc'h memes tra, marv ma eotr Emil ar 24 a viz Ebrel.

Erwan Bocher

Graet en Sfaks 9/ Foenn/ 1958

~~~~~

AU SUJET DE L'ORTHOGRAPHE BRETONNE (Per Denez) : Testenñoù Nevez

Abaoe m'eo bet embannet gant KUZUL AR BREZHONEG al levrig diwar-benn an doare-skrivañ, en deus Per Denez resevet an disklariadur-mañ digant Iangleiz

Roazhon 28.V.58

Diskleriañ a ran, ez leal hag ez resis war un dro, n'am eus ket sinet Englev an Doaro-Skrivañ peurunvan, e 1941, evit ober plijadur da zen pe zen, pe dre zoujañs rak urzh ebet.

Roet em eus va sinadur d'am Englev-se e pep frankiz, evit lakaat da dalvezout al lezernoù a oa bet azzet en Oriant, e 1938, tri bloaz a-raok, rak ma kaven fur-tre al lezernoù-se e-keñver amzer da zont ar yezh, ha NETRA KEN...

Iangleiz

(sinet) X de Iangleis.

A-hend-all en deus bet Per Denez al lizher-mañ digant an Ao. Chaloni Mary :

+ Keranna d'en 3 a viz Mé 1958

Eutru ha kenvroad ker,

El oh me garhé ma vehé unañnet er stumm da

skriv er Brehoneg. Siouaz ! Diés bras é d'er Vreiziz en em gleuét étrézé !

A pen dé bet savet en emgleù n'em boé ket gellit mont de Roazon, mes reit em boé aotréadur d'ur henvreur boèhiein aveidon ; hag el er réral, ne glaskan tamm erbet bout a du get en Alamened na plégein dirakté. Me chonjen meit é brasan mad er vro, hag én amzér da zonèt.

Me garehé guélèt en Ao. Falc'hun ha Roparz Hémon... hag en en oll doh um gleuét. Pebez nerz nezé, ha pebez leuñé !

Genoh a galon.

~~~~~

P. Bourdellez GWELTAZ FUR (taolennoù war Vuhez St Weltaz)  
(Evit Bleun-Brug  
Ferwanan, 22.6.58) C'HOARIERION : Gweltaz, Pesketerion, Bugale, 4 Roue  
Trifina, Soudarded, Menec'h, Eskibion  
3 Diaoul.

TAOLENNOU : 1. Donedigezh Weltaz, 2. De Excidio Britanniae  
3. Incepato in reges 4. Dimeziñ Trifina  
5. Manatioù ha Skolioù Nevez 6. An 3 Diaoul gwisket  
7. Torfed Konomor 8. Marv Gweltaz.

Ar c'hoarierion (nemet Sant Weltaz) a zo stlabezet e-touez ar selaouerion. Mat e vefe e vefent danguzhet (mantelloù). Ken e vo poent dezhe bezañ gwelet, hag e savfent neuze war un daol (e-touez ar selaouerion) da c'hortoz mont war ar podium.

#### I. DONEDIGEZH WELTAZ :

(Trouz gwagennoù, skreved. Trouz botoù-koad war ar reier. Ur pesketaer a ra un nebeut hammedoù a-douez renkadoù kentañ ar selaouerion hag a sav war ar podium dre an tu kleiz. E zaouarn a laka en-dro d'e c'henoù war-du ar selaouerion. ( ° )

BITOUZ :- O O Brikon !...

BRİKON : ( o sevel a-douez an dud ) O...O...

BITOUZ :- Lenv 'ra ! Poent eo mont da Lenn-ar-C'hoad !

BRİKON :- Mat eo ! O vont 'on ! Ar vag 'zo du-hont !

( Brikon a gerzh war-du ar podium, Bitouz a dreuz ar podium evit mont etrezek ar vag )

Un taol kloc'h ponner .- Ar manac'h istorour hag a oa asezet, o furchal e levrioù kozh, a sav da lenn d'an dud :

" E levrioù Manati Ruiz, e Bro-Wened, emañ skrivet e oa Gweltaz 45 bloaz, pa zouaras e kruisteiz Bro-Arvor e-tal Stank " Lenn-ar-C'hoad )

( ° ) An holl ziskleriadurioù a zo e galleg er skrid hag ivez komzoù ar Manac'h Istorour. O lakaet hon eus e yezh BARR-HEOL

Mat e oa d'ur roue a Vreizh-Veur. Desket-tre, savet en doa skolioù ha manatioù en tu all d'ar mor. Doujet-neurbet, prezet en devoa d'an holl ar vertuz, ar garantez hag an unvaniezh.

Met neuze e kouezhas Enez-Vreizh etre krananoù ar Saizon tud pagan ha kriz, hag ar Vretoned na voent ket lazhet a glaskan repu en tu all d'ar mor, betek en hor Bro-Arvor.

Rannet e galon gant ar glac'har o welout e vammvro dis-mantret hag e bobl gwasket-euzhus, Gweltaz an den fur, Gweltaz an den gouiziek o tilezel ar skolioù bras hag ar manatioù brudet, a dreuz ar mor d'e dro, hag en em denn e toull ur roc'hell da bediñ ha da skrivañ ul levr diwar-benn dismantr glac'harus Breizh.

( Kloc'hig er pellder. Saflik an dour, trouz rofoù-Kloc'hig- Eus a-drok ar garreg ec'h en em ziskouez Gweltaz en e vag. Arvestañ a ra ar vro ( Sonerezh dous ) sevel a ra e zivrec'h hag e bed. ( Ar sonerezh o kreffant ) ... Sioulder.. Pignat a ra e-touez ar c'herreg. Sin ar Groaz. Skrivañ a ra

An eil pesketaer a dreuz ar podium en ur vont etrezek ar vag. Teurel a ra pled da Weltaz hag a ra d'e gamalad teurel evezh.

BRİKON : St Weltaz ! Gweltaz Fur. Mab Roue Breizh Veur a zo emañ. Ar manac'h desket, an hini en deus savet skolioù ha manatioù e kement korn ma'z eus Bretoned.

BITOUZ :- Gweltaz ivez en deus traouzet ar mor? Ma vano Breton ebet ken en tu all !

BRİKON ( o youc'hal etrezek ar bobl ). Bodsour, Gwrieg, Tangi ! St Weltaz a zo erru er vro ! St-Weltaz ! Deut 'ta, hastit buan ! E Lenn-ar-C'hoad emañ ! ( mont a reont o-daou etrezek St Weltaz )

BITOUZ :- Aotroù St-Weltaz venniget ( ar Sant a lez e bluenn hag a sell oute ) Aotroù St-Weltaz, ni'zo Bretoned ivez... tec'het evel-doc'h dirak ar Saizon kriz, ha deut da glask repu emañ. Kalz a ra all a zo e Ferwanan, er Porzh-Gwenn ha war-dro, met n'eus na beleg na manac'h ganimp da vadeziñ ar vugale, da zeskiñ d'an holl lezenn Doue hag ar Furnez, ha da frealziñ an dud e poan pe e kleved.

#### 2. DE EXCIDIO BRITANNIAE

St Weltaz a sav en e sav (Kloc'hig)ur pezh levr gantañ :

" Dek vloaz 'zo e oa war va spered skrivañ al levr-vañ "

AR MANAC'H ISTOROUR a sav en e sav : Un taol kloc'h ponner :

" Skrivet en deus Gweltaz ul levr diwar-benn dismantr Breizh, ul levr gmaet gant daeroù. Neket da veuliñ karded ar vrezelourion vrezhon met da ouelañ war o drouziwezh mantrus. Neket kennebeut dre zispriñ evit ar re gablus, met evel ur gentel veur a emzwall, gant e galon rannet dirak taolenn druzus ar reuzioù, hag an te-chou fall o deus dinerzhet e vro : rendaloù ha gwarizi hag o deus digoret an nor d'an alouberion estren.



KLOC'HIG .St Weltaz a sav e levr. Dre ma komz e teu raskataerion all ha bugale, a bep eil. Darn a azez, darn a chom en o sav war ar podium du-kan du-kont : "- Al levr-mañ a zo skrivet gant gourdrourz ha daerc'h mesk-ha-mesk. N'it ket da grodiñ em eus hen skrivet dre ma ran fae war ar re all. N'on bet douget d'hen skrivañ nemet gant ma glac'har dirak disantrouz ma Bro, hag al levnezh a vije em c'halon ma weljen ma Bro oc'h adsevel... Deut eo an estrañjourion da vezañ mistri war ma Bro. Ha war ar pezhioù-moneiz n'eo ket pennoù Breton a weler ken, met pennoù estrañjour... Deut eo ar Saozn war o listri hir. C'hwezhet o deus an tan adalek mor ar Sav-heol-, an Enezenn a-bezh a zo bet lipet gan teod ruz ar flamm betek traezhenoù ar C'huzh-Heol. Kristenion ha beleion, ar bobl a-bezh a zo bet falc'het evel ur pradad foenn. War blasenoù ar c'hêrioù e oa megerioù kouezhet, aoterioù torret, korfoù gwadek, bern war vern. Ar re eus ar Vrezhoned ha n'int ket bet lazhet o deus treuzet ar mor, hag a zo bet stlabezet dre ar bed. Ma Doue! ma Doue! setu m'emaint evel deñved etre daouarn ar c'higer !

### III. INCREPATIO IN REGES

Ar MANAC'H ISTOROUR o stagañ raktal. Taol-kloc'h. Ar Manac'h a sav : Ha koulskoude Breizh he deus he roused hag he barrierion. Met ne dint kriz nemet evit an dud a feson, ne ziwallont nemet an dud fall hag al laeron-ne reont brezel nemet da dud ar bobl !

Kloc'hig: Gweltaz a gemer e dor-sbad, e zloc'hig ha dont war ziaroed ar podium, dirak ar bobl, da c'hourdrouz arc roused. Stagañ a ra dre un tu, tremen d'an tu all, hag ehanañ er c'hreiz. Ar roused hag o ar brougerion a savo a bep eil a-douez an dud pe vint galvat hag an ziskouez a-wel d'an holl. Chom a raint en o flas betek fin an "Incratio in reges" TROMPILHADEG. Konstantin a sav a-douez ar bobl asamblez gant Gweltaz

GWELTAZ : Roue Konstantin, touet az poa dirak Doue hag ar Sent na rajes droug ebet da dud da vro. Neb oa ket ur bloavezh tremenet, az poa lazhet da nizien en iliz, ha lienañ an aoter a voe tarchet gant o gwad. Selaou, bourv ! Mar selaouez e vi pardonet gant Jezuz  
( KURUN o strakal a-bell ) TROMPILH: KONAN a sav e-touez ar bobl

Ha te, Konan! ne blije dit nemet gwad ha lazhadeg! Setu te bremañ da-unan, evel ur wezenn sec'h e-kreiz ur blaenenn didud. Da dad ha da vredeur a zo marv. Daoust hag e soñj dit e vev keit ha Matuzalem ? Diwall pe e vi malet ; bouzellou an ifern.  
( TARZH-KURUN ) TROMPILH VORTIPOR a sav

Ha te Vortipor, mab fall un tad mat, azezet war un tron marellet kroc'h-traoñ gant tarchadennoù da dorfedoù. Ma ne bedez ket Doue, ar preñv a zo ouzh da grignat ne varvo ket, hag an tan a zo krog ennout ne vo ket mouget.

( KURUN ... KRENV ) TROMPILH ( KRENV ) Maglokm a sav

Ha te, te bremañ, Dragon Enez Vreizh. Perak 'ta e ruilhez-te evel un den trelatet, e-mesk da dorfedoù du ? Peogwir'out an uhelañ, e tlejes

ivez bezañ ar gwellañ. Selaou ar roll eus da dorfedoù : Pa eas yaou-ank ec'h eus lazhet da eotr.

Goude-se ec'h eus graet pinienn dirak Doue, an aolez hag an dud. A! pebezh levnezh en Iliz ! pebezh eürusted er Vro... Met skuizhet out buan o kanañ kantikoù. N'eo ket meuleudi Doue e selaouez bremañ, met ar veuleudi roet dit gant hailhoned ha balbouzerion ! Lazhet ac'h eus da vreg, lazhet ac'h eus da niz, evit dimezñ gant da nizer.

( KURUN GWASHOC'H EGET BSKOAZH. Ar roused a guita an dachenn holl asamblez )

GWELTAZ ( daouarn jantret ) : O ma Doue, gouzout a ran e tle ur c'hristen paeañ d'ho justis evit ar pec'her, hag e tle ur beleg o-ber pinienn evit pec'hedoù ar bobl.

( e zaouarn war e zremm ) : O ma Doue, evit m'ho pe truez ouzh ar Vre-toned, lakait em daoulagad ur puñs a zaeroù, din da ouelañ deiz ha noz !

### IV DIMEZIN TRIFINA ( Roll ar manac'h a lezomp a-gostez dre ziouer a blas )

Komz a ra eus Konomor bet dimezet teir gwech, ha c'hoant dezhañ dimeziñ gant Trifina hag e-skeud-se astenn e veli war Greisteiz an Arvor )

TROMPILHADEG : 2 Ambrougadeg roused ( Kezeg, ha Trifina en ur c'harr kinklet ) o tegouezhout eus foñs an dachenn ( Gwarog da gentañ, Konomor da c'houde ). Kompagnunezh Konomor a dle bezañ spontus da welout .... Ambrougadeg Gwarog a zo muioc'h a zigoroù ganti, gant leter Trifina ivez. Gwarog a c'hortoz... Muzik adarre, ha setu ambrougadeg Konomor .An 2 roue war ar podium : unan a bep tu. Gorrek -gorrek e valeont an eil war-du agile. )

KONOMOR - Ne eo ar Roue Konomor, Roue Kernav, Roue Leon, Treger ha Sent-Brieg. Galloudusañ Roue a zo e Breizh. Met e palez Karaez, n'eus rouanez ebet. Setu perak e c'houlennan digant bremañ Gwarog, Roue Gwened, reiñ da verc'h Trifina da bried.

GWAROG :- N'eus rouanez ebet e palez Karaez. Gwir a lavarez, Konomor, Gwir a lavarez ! Teir rouanez a zo bet, hag a bep eil ec'h eus o lazhet kant m'o doa lakaet o c'hrouadur er bed.

KONOMOR :- Bremañ, Gwarog, e c'houlennan da verc'h Trifina da bried.  
GWAROG :- Ne roin ket un mer'h d'ur c'higer.

Konomor :- Neuze e vo brezel !

TUD KONOMOR : -Eured pe vrezel !

TUD WAROG : Brezel !

GWELTAZ / SALLH ETREZE : Peoc'h ! Peoc'h en anv Doue etre ar Vretoned, ha mallozh Gweltaz d'ar Breton a raio brezel d'ur Breton all !...

Togstait, Priñsez Trifina ! Lezenn Jezuz eo e tle an oan dibec'h gouzañv pinienn evit pec'hedoù an dud fall. Dever an dud uhel eo ivez gouzañv evit o fobl. C'hwil, Priñsez yaouank ha santel eo a lakaio an englev hag ar peoc'h da ren

Digant Doue, Roue Konomor, eo e resevit ar pried-mañ. Selalcuit mat :  
 'leo ket diganin-me, n'eo ket digant he zad, met digant Doue! N'eo  
 ket evel merc'h un den. Selsouit ha puezit ma c'homzoù, roue Konomor:  
 met evel merc'h ha bugel Doue.  
 (TROMPILHADEG : An div gompagnunezh a ya kuit pep hini d'he za. Leter  
 Trifina, pa dremen dirak ar podium a cheñch ambrouadeg. Gweltaz a  
 chom e-unan e-kreiz al leurenn-c'hoari)

#### V. MANATIOÛ HA SKOLIOÛ ( taol-kloc'h. Manac'h istorour ) :

Breizh nevez he deus ezhomm skolioù ha kouennoù. Ret eo adsevel an  
 traoù: krouñ, sevel tiez. E Ruiz da gentañ, ha neuze, e-pad meur  
 a vloavezh, un tamm a bep tu.

( Kanadeg Psalmoù, Yudadeg vleizi )

Er c'hoadoù 'lec'h ma yud ar bleizi e savo e-kreiz an noz mouezhioù  
 ar venec'h o kanañ matinezoù.

( Gweltaz a sav war e garreg, a denn e dog-abad hag a Gazul.  
 Derc'hel a ra mat d'e vazh-abad, hag e chom en e sav )

Manac'h Istorour: E-pad 3 eur, kent mont da gousket, e vez ar venec'h  
 o pediñ.

Gweltaz: Hon Tad pehini'zo en Neñv. Mouezhioù: Hon Tad pehini ...  
 Gweltaz: Me ho salud, Mari.... Mouezhioù: Me ho salud, Mari

( Kloc'h. Manac'h Istorour ) :

Mirout a ra ar venec'h o dilhad gante evit kousket war un dornad foenn  
 .Met sevel a reont da ganañ Matinezoù kerkent ha kan ar c'hilhog.

( Gweltaz a ya en e goarez, harp e benn war e zorn, menel a ra  
 kousket... Bleizi o yudal... Ar C'hilhog a gan : Gweltaz a sav en  
 ul lamm )

Domine, labia mea aperies. MOUEZHIOU. Et os meum annuntiabit laudem tuam  
 (Prosesion menec'h : Deus in adiutorium... Domine ad adjuvandum...)

Derc'hel a ra ar venec'h da dremen ha da zistremen ar psalmoù pe im-  
 noù a zalc'her da glevout dousik.)

GWELTAZ (kloc'hig): Eürus ar re baour, n'eo ket avat ar paour a sko  
 nag ar paour trenket e galon

(Taol-kloc'h) Manac'h Istorour: Eürus ar beorien a zo kañv, ar re a  
 ouel war o fec'hedoù o-unan ha pec'hedoù ar re all.

Gweltaz-(kloc'hig) Ar manac'h a labouro adalek ma savo an deiz  
 (Taol-kloc'h) Manac'h Ist.: Kent mont ouz taol, e taole ar manac'h  
 boued d'al loened ha da laboused an neñv.

Gweltaz(kloc'hig): Ar manac'h en devoa pec'het a raio pinijern e-pad  
 3 bloaz, o yun diwar vara ha laezh, hag un tamm amann d'ar sul.

(Taol-kloc'h) Manac'h Ist: Na argasit ket ar pec'her, rak Jezuz hag eñ  
 dibec'h, a zo bet mervet evit ar pec'her.

( Kerkent ha tremenet prosesion ar venec'h, setu o tont gorrek ha devot  
 ur prosesion bugale, gwisket e gwenn, o kanañ ur c'hantik hag o  
 treuziñ ar podium en tu kontrol d'ar venec'h ) : Muzik, Kanadeg Evned.

#### VI. - AN 3 DIAOUL GWISKET

3 Diaoul ruz a zeu eus ar vag. War o daoublegoù e treuzont ar podium  
 ur bakadenn war gein pep hini anezhe. Pa zegouezhont en tu all, e  
 savont en o sav hag e wiskont an dilhad-manac'h a oa er bakadenn  
 ( Muzik kriz ha skiltrus ) Kuzhet en o sae varac'h ( gwelout a reer o  
 c'hermiel ) ez eont etrezek Sant Weltaz.

AR MANAC'H IST. (e-pad ar c'heit-se) kloc'h. : Hogen ar rucsed hag an dud  
 uhel o deus dalc'het greunenn ouz Gweltaz, hag a gasas enep dezhañ, 3  
 den faos ha drouk o c'halon, 3 diaoul gwisket e menec'h, d'e vevañ.  
 An dorfedourion-se a c'halvas ar Sant ouz hen pediñ da vont da welout  
 e vignon bras St Filbar a oa gwall-glañv, a lavarent... Met Gweltaz a  
 voe saveteet dre ur burzhud a-berzh Doue.

AN 3 DIAOUL (gant mouezhioù raoullet): St Weltaz, hon Tad mat !  
 2) St Weltaz kaezh ! St Filbar a zo klanv fall 3) St Weltaz enoret!  
 homignon St Filbar a zo klanv bras ! Deuit diouzhtu da reiñ dezhañ Sa-  
 kramant an Nouenn

I- Sakramant an Nouenn, diouzhtu 2- Sakramant an Nouenn diouzhtu  
 ( Sant Weltaz a sav hag a ziskenn, da zont etrezek ar vag, un diaoul  
 a bep tu dezhañ, an trede o fansas! drek e gein. Pa zegouezh e-tal ar  
 vag, e klevet ar c'hloc'h o son )  
 Gweltaz: Me breudeur, kloc'h ar Gousperoù a zo o son. Kanomp Gousperoù  
 da gentañ

AN DIAOULION (en ur lamm hag en ur sailhat): 1) Gousperoù ebet,  
 2) Peoc'h gant ho Kousperoù 3) Ar Gousperoù a zo un torr-penn.

GWELTAZ: Peoc'h, ma breudeur ( kanañ a ra : Deus in adiutorium meum  
 intende)... ( Muzik dirollet )

( An 3 diaoul a ya sot hag a sko ar sant er mor en ur c'hoarzhin.  
 Neuze e teuent da greiz al leurenn da zansal, hag ez eont kuit d'ar red )

#### VII. TORFED KONOMOR

Kloc'h-Manac'h Istorour: Met an diaoul a zo set e kalon Konomor: fellout  
 a ra dezhañ lazañ Trifina hag he bugel. Ar rouanez yaouank a dec'h kuit  
 eus ar palez e kreiz an noz, eus Karaez... Bala a reas e-pad teir nozvezh  
 ouz en em guzh war an deiz... Konomor aet war he lerc'h he c'halvas  
 en ur c'head-tailh ... ( Trifina, he dilhad e pilhoù, he mabig war he  
 brec'h e redek kuit, o klask kuzh: en em gluchañ a ra 'drek ar vag.  
 Trouz taboulin, soudarded gorrek ha pomar hag a-greiz-holl Konomor a  
 sailh war Trifina, a grog enni a-bouez he blev gant e zorn kleiz, a  
 ra dezhi sovel, a sav e gleze ( ur youc'hadenn a spont ). Pa gouezh ar  
 c'hleze e kouezh ivez Trifina.

KONOMOR (war ziadreñv ar podium): Klev amañ, Roue Gwarog! Da werc'h ivez  
 am eus lazhet hag he bugel! N'eo ket komzoù ur manac'h a lako Konomor a  
 spontañ ! Ha ma ven lazhet ma gant unan eus va mibion, n'eo ket gant da  
 vab-bihan e vo ! A ! A ! ( Mont a ra kuit, ar soudarded ivez-taboulin )

Kloc'h-Manac'h Ist' Gweltaz! Gweltaz! a youc'has ar Roue Gwarog. Root  
 ac'h eus va c'houlm d'ar skoul. Gweltaz re din va bugel en-dro !  
 Neuze pedemoù Gweltaz ha re ar bobl a-bezh a rentas ar vubas d'ar  
 Briñsez Trifina ha d'he bugel.

(°) lann Filbarz.

GWAROG HA GWELTAZ a zegouezh dre an diadrenñv. Pesketaerion dre an 2 du.

Gwarog : O glac'har ! Ar Bobl : O glac'har  
Gwarog : Gweltaz ! Gweltaz ! pelec'h emañ ar goulm ac'h eus laket etre skilfoù ar sparfell ?... Pelec'h emañ ma bugel ?

Gweltaz : ( o tont davet Trifina, a ra ur sell outi ha goude ) : Pobl kristen, pedit Doue ganin... O Tad hollc'halloudek, c'hwi hag hoc'h eus krouet ar vuhez er pri... O Jezuz, Mab Doue, c'hwi hag a savas a varv da vev da veure Sul Fask... Ho pet truez ouzh ar Vamm hag he bugel ! Trifina ! En anv Doue, Mestr ar vuhez hag ar marv, savit en ho sav, ha lavarit din pelec'h 'oc'h bet ! ( MUZIK A ZIWAN, tamm ha tamm. TRIFINA A SAV GORREK )

TRIFINA : An Aelez a oa deut d'am c'herc'hat d'am c'has gant ar verzhierion e-kichen tron Jezuz. Met pa en deus klevet mouezh Gweltaz, ma ene a zo distroet d'am c'horf.

GWELTAZ ( a grog en he dorn hag he c'has d'he zad ) : Setu emañ, Roue Gwarog, en teñzor az poa fiziet ennon. Da verc'h eo, hag he mab a zo da vab bihan. Diwall anezhe ha sav ar bugelig ez palez.

TRIFINA ( da Weltaz ) : Tad Santel, aon am eus ! Ganeoc'h e chomin !

GWELTAZ : Na merc'h, n'eo ket deraat e vefe ur veure da heul ur manac'h. Chomit e ti ho tad da sevel ho pugel. Pa vo savet, ho kasin d'ur gouent leanezed.

KLOC'H - Manac'h Istorour - ( St Weltaz a zeu war ziaraog ar podium dirak ar bobl. An Eskibion a zeu d'en em renkañ a bep tu dezhañ, gant piledoù bras war elum en o dorn. Krozadeg gant ar bobl ) : Gweltaz evit reiñ un digoll eus e daol dievezhted, a embannas hag a damallas dirak an holl taol euzhas an torfedour ( krozadeg ). Ar bobl a c'hrozmol, hag an Eskibion en em vod war Venez-Bre, eus pevar c'horn Breizh. Konomor a zo diskleriet kablus gant an Eskibion hag ar bobl a-bezh. Kondaonet da goll e holl vadob-korf hag e vadob-ene."

ST WELTAZ : Pobl kristen, Eskibion Vreizh ! Ar Roue Konomor a zo ur mantrer.

HOLL : Ur mantrer

St WELTAZ : Sakramentoù an Iliz a vo nac'het outañ

Holl : Nac'het outañ

St WELTAZ : Dor an Ilizoù a vo serret outañ. - HOLL : Serret outañ !

St WELTAZ : Kristen ebet ne sento outañ. HOLL : Ne sento outañ !

St WELTAZ : Hag e holl vadob a vo lamet digantañ. HOLL : Lamet digantañ !

St WELTAZ : Ar Feiz hag ar Garantez a zo marv en e ene evel m'emañ o vont da vervel gouloù ar c'houlacouenn-mañ

HOLL : O vont da vervel gouloù ar c'houlacouenn-mañ !

St WELTAZ : - Roue Konomor, nemet e rajes pinijern galet...

Holl : Pinijern galet ...

ST WELTAZ : Pep esperañs a zo marv evidout er bed-mañ hag er bed all, evel m'eo marv gouloù ar c'houlacouenn-mañ ( AVEL HA KURUN . Sevel a ra an Eskibion o goulacouenn en aer, hag o stlepel d'an traon. Hag ez a an holl kuit, an Eskibion da gentañ, hep ur ger. )

## 8. MARV SAINT - WELTAZ

( Kloc'h, Manac'h Istorour ) : 76 vloaz edo Gweltaz. Leun e oa e ene a fiziañs o welout ur Vreizh nevez o c'henele en-dro dezhañ. O vezañ ma ouie edo war-nes mervel, e c'halvas d'e gaout e holl ziskibion a gement lec'h ma oant, eus an holl vanatioù, eus an holl skolioù savet gantañ er Vro Nevez. ( Gweltaz kozh, harzet war ur manac'h. Daou vana-nac'h a zegas ur gwele war ziaraog ar podium. Gweltaz en em astenn warnañ kant poan. Daou brosesion menec'h a zeu, unan a bep tu hag a chom en o sav e daou benn d'ar gwele. Ur prosesion bugale gwisket e gwenn a zeu da zaoulinañ war ziaraog ar podium )

GWELTAZ ( gorrek ) : Start eo bet al labour. Met kaer eo an eost. Ur Vro nevez o sevel... Ur Vreizh Nevez... Breizh i... Jezuz en deus paet evidomp. An Oan a dle pasañ evit ar bleiz. Ar Goulm evit ar sparfell.

TAOL KLOC'H. MANAC'H ISTOROUR : - Neuze e savas rendael vras etre ar venec'h : pe vanati eus reoù Wened, pe reoù Gernev, a virfe teñzor e gorf enoret. St-Weltaz a roas urzh dezhe da lakaat e gorf marv en ur vag a vefe laosket da vont gant ar mor, e bolontez Doue ...

( An daou Abad a gomz izelik da gentañ. Met tamm ha tamm e uhela o mouezh, evel daou gog. Ar venec'h a grog an eil e kolier esile )

ABAD-KER EV : Dimp-ni e vo e gorf.

ABAD-GWENED : Dimp-ni !

Abad-Ker ev : Dimp-ni ! Abad-Gwened : Dimp-ni !

Abad-Kernev : Ni eo ke' tañ abati bet savet gantañ !

Abad-Gwened : Ni eo ar manati diwezhañ savet gantañ !

( Gweltaz gant kalz a boan a dap krog en e vadh-abad, hag e gloc'h, hag e hej hemañ un tammig ) : - Ma bugale vihan, arabat eo e vefe trouz etrezoc'h abalamour d'am c'horf paour. Pa vo set va ene davet Doue, lakait ma c'horf en ur vag, ha lezit ar vag da vont lec'h ma plijo gant Doue. An Doue a beoc'h hag a garantez ra vo ganeoc'h da viken.

HOLL : AMEN

( Ar c'hloc'h a son glaz. Ar venec'h a zoug ar c'horf d'ar vag ( drek ar podium ). Ar vugale a va kuit ) :


MANAC'H ISTOROUR : Fellaat a eure ar vag diouzh an aod, ha diskenn da oueled ar mor. Menec'h Kernev neuze a gollas pep esper hag a zistroas d'o manati. Met menec'h Gwened, war-lerc'h tri devezh pe-dennoh ha yun a voe diskuliet dezhe a-berzh an Meñv e oa bet lakaat Korf o Zad gant Doue e pleg-mor ar c'hroasti.

( Goude bezañ boutet war ar vas, e teu ar venec'h un tammig war a-dreñv, a bep tu d'al laouron, troet bepred etrezek an diadrenñv. Trouz ar mor hag evred mor-aval o c'hwezhañ )





# BARR HEOL



Directeur: M. Le Clerc, Rect. Buhulien C-d-N } koumanant  
N<sup>o</sup> 17 Décembre, 1958, Trimestriel, Prix N<sup>o</sup>: 150Fr) 500 lur

Rener : M. Le Clerc, Person Bulien, Bro-Dreger  
Niverenn 17, Kerzu 1958, Trimiziek, Priz an Niverenn: 150 lur

## T A O L E N N

|                                                     |              |
|-----------------------------------------------------|--------------|
| AR FREUZHADENN-VOGER .....                          | p.2          |
| if Croix 2.X.58                                     | p.5-7        |
| AMZER AN ANKEN (Emil Bocher) .....                  | p.7-8-9      |
| AR PAB HAG AR VRETONEZ .....                        | p.9          |
| Pius XII .....                                      | p.9, II, -13 |
| Yann XXIII .....                                    | p.13-14      |
| KELC'HLIZHER COMBES (29.IX.1902) .....              | p.15-24      |
| KELAOUENNOU HA MOULADURIOU .....                    | p.25         |
| BERNIOU BUGALE ER SKOLIOU .....                     | p.26,27,30   |
| DOUJANS DA VREIZH (Kuzul ar Brezhoneg) .....        | p.30         |
| (dielloù) lizher da Gaieroù ar Bleun.Brug.          | p.30         |
| Lizher d'ar gazetenn Breiz                          | p.31         |
| Lizher da Renour an R.T.F.                          | p.31-32      |
| KELEIER DA GLOZAN: Jarl Priel, An Aotroù Koupel.... |              |



Evit donet a-benn da gemerout ur ger-vrezel, ur c'hreñvlec'h, ur c'hastell bennak ez eus bet a-viskoazh meur a stumm. Iakaat ar seziz warno, o gronnañ ha lakaat an dud da blegañ dre an nacnegezh, pe c'hoazh mont dezho a-stourm gant holl nerzh ar armead, ha koll ur bern soudarded a-raok tizhout lakaat troad war lein ar mogerioù ha diskar ar perzhier, rak ne veze ket brav tostaat d'ar mogerioù gant ar vein, ar pag berv, an dour hag an eoul berv o kouezhañ war an er-sailherion. Ar gwellañ-holl e veze klask toullañ ar mogerioù, ober ur freuzhadenn enno ha lakaat neuze holl nerzh an armead da touezañ eno. Aesoc'h evel just, e oa ober ar freuzh-se p'eo deuet ar c'hanc'hioù da sikour an dud-a-vrezel... Met kement-se a zo un afer all.

°°°

Ar freuzhadenn er voger ! Setu petra ez eo evidon ar Skol-Heñchañ nevez "Skol Sant Erwan" digoret abaoe ur bloaz'zo e Ploueg-ar-Mor. Tamm-ha-tamm ez eo bet dilerc'hennet ar Vretoned eus o madoù broadel, eus o gwirioù broadel, eus o c'hultur broadel, eus o yezh zoken pa'z eus bet savet dre holl skolioù ha n'o deus karg ebet nemet brudañ ha ledañ menozioù Skol-Veur Bro-C'hall hag ar sevenadurezh difennet ganti : Kastell-Kreñv ar Spered Gall, e Breizh.

Evit teurel d'an traoù mogerioù ar C'hastell-Kreñv-se, ez eus bet-hag ez eus bepred Bretoned vat-hag a soñje ganto e oa trawalc'h adober en ur stumm bennak jestr brudet Yosua en-dro da vogerioù Yeric'ho (Yosua, VI). E-pad c'hwec'h devezh e reas bugale Israel tro Ker-Yeric'ho war-lerc'h Arc'h-an-Englev, hag ar seizhvet devezh e savjont beure mat ha goude graet seizh gwech an dro da gêr, e laoskjont youc'hadennoù a-nerzh o fenn, tra ma sere ar voleion o zrompilhoù, hag ar mogerioù a gouezhas en o foull. Met dorn Doue a oa a-du gant Israeliz hag an dorn-se, ha nket ar youc'hadeg pe ar sonadeg, eo en devoa taolet ar mogerioù d'an diaz. Un dra bennak heñvel ez eo ar goulennoù hag ar gweladennoù a bep seurt graet d'an 3<sup>e</sup> ha 4<sup>e</sup> Republik (da c'hortoz petra'ray ar 5<sup>e</sup>-et), mat ar mogerioù a zo chomet en o sav-sonn, ha ken bleunius all ez eo bepred ar C'hastell-Kreñv.

A-us d'an dachenn-emgann evit Buhez ar Spered Breizhat, setu ur youc'hadenn o sevel war ar mogerioù. Erru eo an emgannerion-araok war ar voger, toulllet, freuzhet ez eo ar voger hag ur bagadig o deus gwintet ar banniel breizhat war lein ar voger.

°°°

Ne seblant ket ar Vretoned bezañ komprenet c'hoazh petra a zo c'hoarvezet. N'eus nemet lenn ar pennadig klouar-klouar bet moulet war bajenn diwezhañ "BREIZ" (Here 1958) evit her merzout splann.

Dre ma fell da VARR-HEOL bezañ kazetenn an testiñ, atalamour da Vretoned an amzer -da-zont da intent gwell a se pelec'h e oa ha pelec'h ne oa ket penn Bretoned ar Bloavezhioù-mañ (war-dro 1958), ha gant ar fiziañs ne vo mui gwell traoù evel-se e verkomp awañ an darvoud c'hoarvezet en hañv tremenet. Goulennet en devoa Aotrou Rener Skol Divyezhek Ploueg-ar-Mor, eotre da vont da werzhañ e gelaouenn-SKOL - da Noal-Pondi, da geñver generion Bleun-Brug. Mac'het e voe e c'houlenn outañ gant generion Bleun-Brug Gwend, ne lavaran ket nac'het krak-ha-berr, rak tu a zo gant doareoù ha troioù-levar seven da ziazarbenn goulennoù an dud, hag ar re speredet a vez dibean-kaer. Gallout a reomp krediñ avat, ez eo en abeg d'an doare - skrivañ "ZH" implijet gant rener ar gelaouenn ez eo bet ne-c'het outañ an autre goulennet. Ne c'hellomp ket kompren avat, perak neuze ec'h en em stag ar Bleun-Brug ouz un doare-sirri-vañ diwrizienn-mik; met doare-skrivañ pe get, pa vez boulc'het mogerioù ur ger-vrezel bennak ne chom ket ar vrezelourion da vare'hata : kreskiñ ar boulc'h, gwasheat ar freuzhadenn re lavaran ket. Kreizennañ eno, war ar poent-se, holl louez an emgann, ha setu !

Rak a-benn ar fin petra a glasker e Skol Sant Erwan, e Ploueg-ar-Mor ? Diazezañ ar gelaouenn-divyezhek. Ne lavaranomp ket, ne skrivomp ket ez eo ar Gelaouenn-divyezhek eo a savetaio Yezh ha Kultur Breizh. Marteze e ray, Marteze ne ray ket. Marteze e vo trawalc'h ganti, Marteze ne vo ket. An amzer-da-zont a zispako ar mister-se, hag ivez evel just, skouer ar Broioù all, act pell-kaer dija war an hent-se a-benn bremañ. Pa vo bet diazezet start ar seurt skoliata, neuze e vo poent barn an efedusted anezhañ. Hogen en amzer a ren ez eo ar manez-se eo a zo da vrudañ e pep lec'h, e pep stumm, ha da zi-fenn.

E-touez ar re a labour a-du gant ar yezh ez eus ur skolaer-stad: an Aotrou Merser, -un Tregeriad, na petra !- hag a zo oc'h ober skol e Kernev-Uhel, e Gronvel. Goude bezañ bet evel an holl Laotred a-raok, a-du gant ar Skritur Kozh gwellaet d'an 8 a viz Gouere 1941, en deus kavet gwell dispenn roudoù tud hag a zo (war-bouez un hanter-zouezenn bennak !) 100 lev diouz ar Brezhoneg Bev ha gwirion, war zigarez houllañ ar roudenn ofisiel. E gazetenn hag a ro tu un tamm da varn e zoa-re-labourat : "LE BOUDED GRONVEL" a ziskouez n'emañ ket c'hoazh war dachenn an DIVYEZHEGEZH KLOK, ha neuze war zigarez lezel ar vugale da labourat drezo o-unan koulz lavarout, e laosk pezhioù fazioù enep ar Yezhadur da dremen, evel da skouer war niverenn HERE 1958, respont "Nann" ar lugel d'e vamm (AR PLEOC'H GOUEZ), ha div wech "Leusk ac'hanon MONT e-barzh" e-lec'h "DA VONT" e-barzh, er Gontadenn en "TEIR YRIG." Ar seurt fazioù a zo da c'hwennat didruoz eus labourioù-skol.





labourer mat, an Aotrou Pierre Limagne: " Quel que soit le Statut, vaincre la misère". Komz a fell din eus deroù ar skrid hepken lec'h ma weler meneget un tamm bihan mesk-ha-mesk FERHAT ABBAS, Bro-Brovañs ha BREIZH.

N'em eus netra da lavarout evit difenn ar peotr-araok Algeriat, Ferhat Abbas, hogen anavez a ran e komprenan ervat an tamelloù e ra hag e glemmoù war zigarez n'en deus ket gallet mont tre betek kalonenn ar sevenadur arabiat, o vezañ ma ne oa nemet skolioù gallek digor dezhañ. O reiñ re a bouez d'e arguzadur e teufe an Aotrou Limagne da lavarout traoù hag a zo, hep mer ebet, gwel-bell diouzh e soñj. " Kammed, e Kevrenn an Apotikerezh, eme ho kenlabourer, ne voe graet ouzh an Aotrou Ferhat Abbas evel ouzh un den a eil-renk. " Daoust ha n'eo ket aze, war un dachenn all, daelennoù **er re a zo** a-du gant ar Skol Unik hag Hollvestroni ar Gouarnamant war ar Skolioù : " An holl dud war ar memes troad hag er memes skolioù ! " ?.. Dleet ez eo d'ar Stad doujañ personelezh pep hini eus he sujidi, e-keñver Relijion evel e-keñver Deskamant : honnezh eo, war ne fazian ket, kelennadurezh an Iliz.

Evit pezh a sell ouzh ar Brovañs hag he c'hultur e lezan gant izili "Burev an Escola Occitana" ar garg da ziskleriañ o santimant.

E-keñver Breizh avat, e fell din sevel va mouezh enep politikerezh ar peurbhevelaat difennet gant an Aotrou Limagne. Er bloaz 1947, dileuridi eus Bro-Gembre kouviet gant Gouarnamant ar Frañs a zeuas da Vreizh d'ober un enklask diwar-benn ar gwallgaserezh a lavared, o devoa gouzañvet ar Vretoned da heul an Dieubidigezh, hag an Dileuridi-se a embannas ar rentañ-kont eus o bizit e kembraeg hag e galleg; hag e c'heller lenn er bajenn 12 (testenn gembraek) hag er bajenn 32 (testenn c'hallek) eus al levrig diskleriadur sebedennus an Aotrou Nagelen, ministr d'ar c'houlz-se : " Labour ar skolaerion er c'hornadoù brezhonek evel hini ar skolaerion en Algeria eo peurbhevelaat ar boblañs, koustet a gousto. " An testeni-se (a-douez kalz a reoù all) a lakaas an Dileuridi da chom mantret ha droukskoueriet, pe ne oant ket evit intent ur seurt emzalc'h hag a zeu da zistrujañ peadra sevenadurel ur Vroad : " Un eostad dreist-priz ha kaer-meurbet savet ha bleuniet, a-hed ar c'hantvedoù, e-touez ar Bobl vreizhat.

Ne fell ket din re-bouezañ war an traoù, Aotrou Pennskrivagner, hogen ret eo merkañ c'hoazh pebezh kammed o'houllo a ra an Aotrou Limagne o skrivañ kement-mañ ... " Rak n'heller ket kelennañ war an dro d'ar bobl ar yezh a zo galvet da rentiñ servij dezho ar muiañ, hag hini o hendadoù pell pe belloc'h. " Daoust ha n'en deus biskoazh an Aotrou Limagne klevet komz eus an "Doare-Skoliata Divyezhek" implijet da skouer e Bro-Gembre, e Frizia hag er Sleswig ?

Plijet pe zisplijet d'an Aotrou Limagne, **emañ** an doare-skoliata-se en implij, e Breizh zoken. E Ploueg-ar-Mor, gant aotredur ha grad-vat Renerezh an Deskadurezh eus Eskopti St-Brieg, ez a en-dro a-c'houde ur bloaz'zo ur SKOL DIVYEZHEK, ur "**SKOL-HENCHAÑ**" renet gant ur beleg yaouank, ur c'heltiegour eus ar c'hwekañ, an Aotrou'n Abad Kalvez.

Marteze ez eo un tamm dre na seblant ket ar Frañs ana-vezout sevenadur talvoudus ebet na yezh all ebet a **sekadurezh** estreget he sevenadur hec'h-unan hag he yezh-hi, n'he deus ket gallet ha n'eus ket bet fellet dezhi kompren spered ar bobloù all bet staget gant darvoudoù a bep seurt ouzh karr he flanedenn, hag he deus dre-se kement a vec'h ouzh o derc'hel **bet** en-dro dezhi.

Ha **ra** gouzimp diwar-benn Algeria hec'h-unan, Aotrou Pennskrivagner, daoust ha ne gav ket deoc'h penaos ar peurbhevelaat ar boblañs Algeriat, koustet a gousto, a zo risklet da grouiñ war dachenn ar gevredigezh, ar vuhezgezh hag an doareoù-soñjal, un digempouez a sach'o gwall-zrougioù d'e heul ?

Ho tigarezh a c'houlenna, Aotrou Pennskrivagner, war am eus kavet mat diskleriañ va soñj-, seul-vui ma **tiskouez** peurbhevelaat ho kazetenn hag ho kenlabourer, an Aotrou Limagne, kalz a objektivelezh.

Gant va gwellañ santimantoù relijiel.

M. LE CLERC, Person Buihen.

EMIL BOCHER  
(1889-1944)

ANZER AN ANKEN (Gwel. B.H. 7-8, 16)  
-o-o-o-o-o-o-o-o-

Deuet e oa ma soutr EMIL da Sant-Servez. N'eus forzh penaos e vije bet kont, e vije deuet. Pask kentañ e verc'h Marc'harid en em gave d'ar mare-se.

Erru e oa d'ar sadorn da noz, diwezhat, e Kerbernez, pennfollet, goude bezañ bet furchet ha graet dezhañ diskouez e baperioù, graet dezhañ c'hoazh derc'hel e zivrec'h savet a-pad n'ouzon ket pegement a amzer. E-pad an amzer-se e **rae** ar baotred goap outañ. Petra a oa bet lavaret dezhañ ? N'am eus ket gallet gouzout.

An deiz war-lerc'h, ar sul, ne oa bet netra 'bet, met glac'har hag anken. Ar vignoned a zeue d'an ti da lavarout ur

bedenn evit ere o amezeg a-viskoazh. E-pad an amzer-se odo al lazherien war-dro eno, ha tost... N'eo ket gwir e oa bet stlapet paperioù evit spontañ an dud ,evit o harz da zont d'an interament.Koulskoude e oamp holl ankeniet;evit ma eontr e oa bet hir an noz ha poanuis.

Al lun,24 a viz Ebrel, a oa un devezh dudius; an heol splann a bere.Pebezh plijadur war an douar, ha pebezh arken evidomp, hag un den o heul korf e vreur o vont d'e vez,hag eñ e-unan o c'houzout ( d'am soñj ) e oa kondaonet.

Ma eontr en em lakas entre moerob Mari ha ma c'henitervez FILOMEN ,hag a lavaras dezhe:" N'EUS FORZH PETRA A ERRUO, MA LAV'RET NETRA, HA CHOMET SIOUL ".

Da gentañ e oa en o soñj hen lazhañ o tonst er-maez eus an iliz. Klevet em eus bet goude, e oant bet harzet gant un ostiz o chom war hent ar c'hoad;hag hemañ a reas dezhe gortoz distro ar vered.Pa oamp o tont eus ar vered, am boa gwelet mat an dud-se en ti-se. Ur penbedig goude, e oamp erru e-kichen ar skol ha tremenet gani'mp zoken; ma eontr a oa dirazomp gant e c'hoar MARI ,ma eontr LOEIZ( breur mamm), FILOMEN, war-dro 50 metr.Ma tremenas en hor c'hichen un den war wer ur marc'h-houarn, e vindrailherez 9mm war ar stur.Hemañ a dremen anezhe, a stlap e varc'h-houarn ouzh kostez ar c'harzh, hag o tont neuze war e giz diraze. E-pad an amzer-se e oa erru e gamalad ivez,ur bistolenn en e zorn. Kerkent e c'houlennont digantañ:" Ho paperioù?", troet o armaj war e du." Ma anv eo EMIL BOCHER HA N'AM EUS GR'ET DROUG EBET." Ar re-mañ a reas goap outañ. Ma eontr a oa diraze, e peoc'h, sonn. Ma c'henitervez FILOMEN a lavaras : "Tonton EMIL, tonton Emi!" hag hemañ a respontas " ! MEN guezh ! n'eus ken netra d'ober". Ar re-se eo bet e gouzoù diwezhañ.

Un torn en e galon, ha neuze e zaoulagad a chomas difiñv, e c'henoù en em lakas a-dreuz, e gorf a droas, a gouezhas war e gain en kostez an hent.

Ar re-mañ neuze o youc'hal " Skarzhet ! mil...mallozh",en ur sevel o armaj hag oc'h ober d'an holl mont kuit. C'hoazh un ne-bout tennoù en e gorf paour, unan all e chouk e gil. Goude-se ec'h en em lakjont en o sav war ar c'horf marv en ur sevel o divrec'h ha youc'hal. Tennet o devoa c'hoazh digantañ e paperioù, e vont hag e votou-ler. Hag int kuit en ur ganañ an " Internationale", o-deou war ar memes marc'h-houarn da vont da Gerbernez da laerezh ur marc'h-houarn neuze a oa en ti du-mañ.

...Ur pennadig goude e teuas moerob MARI en-dro./n /otrouñ person a oa eno ivez- va eontr en devoa goulemet digantañ dont kerkent ha ma klevje e vije marv- . Hen kaout a rejont astennet en e wad. /r c'horf a oa bet douget neuze da Gerrouz, buan a-walc'h, n'ou-

zon ket ken gant piv. Un den eus ar vourc'h a sikouras ober ar marc'h-kañv - Hennezh a oa eus ar strollad; evit petra e oa hennezh eno? petra en deus graet er strolladoù-se evit marv va zud? N'ouzou ket. Un dra 'zo sur :ur c'hoari laus en deus dalc'het e-pad an amzerioù-se.


E-kichen korf ma eontr EMIL e oa e chapeled; en e zorn e oa e-pad e vrec'h diwezhañ... Tremenet e oa evned ar marv, pe gentoc'h gwashoc'h eget evned ar marv, rak tud eus ar vro e oant.

GOUDE-SKRID : Pa oa tremenet ar baotred en hor c'hichen , e lavaris d'am mamm " Ewaint o vont da lazhañ tonton EMIL".Ur pennadig goude ne oa ken nemet ur c'horf marv....

Setu aze marv ma eontr.Ankouset am boa kalz a draoù: pevarzek vloaz a zo abaoe. Evit ar pennad-skrid-mañ ez on bet sikouret gant ma c'henitervez, FILOMENA MARREC.

ERWAN BOCHER

SFAKS, Foenn.12.58  
Gwangolo.27.58



PIUS XII AR PAB YANN XXIII  
HAG AR VRETONED

Moarvat ne zroukplijo ket da lennerion VARR-HEOL klevout ur ger bennak diwar-benn ar PAB NEUR NEVEZ TREMNET (bennoc'h war e anv) Pius XII hag ar Pab nevez-savet war droun Sant Per, YANN XXIII. Dreist-holl diwar-benn o darempredoù gant BREIZH HAG AR VRETONED. Ne vo kavet netra gloc'hañ, nemet an adskrid eus pennadoù bet moulet dija war GOULMIG AR GINDI, kannadig Bullien. Neur e hini eus lennerion ar GOULMIG a zo kousanantet ivez da VARR-HEOL, o fedif a reomp d'hon digrezif ma reomp dezho troid adtomset !

I.KOUMIG AR GINDI(24 a viz Eost 1958-N-enn 17 pajenn 68 )

RA VO MEULET KALON GLAN MARI ( PIUS XII.26.7.54)

Er bloaz 1954 e voe kennekret ha roet da GALON C'HELAN ar Wer-c'has Veri gant /otrouñ Kardinal Roazhon hag ar pover Sakob all a Vreizh( Sant-Brieg, Gwened, an Heoned ha Keper) her bro-Vreizh. Gouelic'ho eus ar re gnerañ a voe greet e Santez Anna-Wened.



rak el lec'h-se bet dibabet gant Santez-Anna hec'h-unan, gant Mamm ar Werc'hez, an hini a zougas en he c'hreiz hag a roas ar vuhez da GALON C'HLAN MARI e voe graet ar Gouestladur-Meur. Hag hon Tad Santel ar Pab, Pius XII, a gomzas dre Radio ouzh ar Bardonerion deredet a-vilvern da Geranna, da verkañ e kemere ivez perzh er jestr santel a-rae Pobl ar Vretoned ha da bediñ Breizhiz d'ober ar pezh a c'hellfont evit kreskiñ enor ar Werc'hez, kreskiñ ivez o devosion hag o fiziañs en he c'heñver. Da echuiñ e brezegenn e lavaras ar gerioù-mañ hag a zo bet enskrivet dre urzh Aotrou'n Eskob Gwened war ur c'haer a vanniell da zerc'hel soñj eus an degouezh dreist-ordinal-se" RA VO MEULET KALON GLAN MARI ! RA VO MEULET SANTEZ ANNA, PATRONEZ VAT AR VRETONED !" ... E brezhoneg Gwened eo e komzas ar Pab, ha renket en devoa kemerout meur a gentel a-benn bezañ barrek da zistagañ ervat ar gerioù-se; rak kaer en deus Hon Tad Santel bezañ akuit war ar yezhoù e renkas kemerout poan evit dopet a-benn ... C'hoazh e oa ur frazenn, ur frazennig berr-berr da vezañ lavaret, e brezhoneg Gwened bapred: " Kentoc'h ar marv evit ar pec'hed" ( Kentoc'h er marv eit er pec'hed) met kaer en devoe Hon Tad Santel esa distagañ ar gerioù-se evel ma oa dleet, ne dapes ket hen ober, hag e tremenas eta kuit d'o lavarout.

E brezhoneg ordinal en defe ar Pab lavaret" Ra vo meulet Kalon C'hlán Mari", met e brezhoneg Gwened ez eo leoscoc'h an traoù. ... Met n'eus forzh penaos, ar pezh a zo bet graet e Santez-Anna Wened, e-harz treid Mamm Mari, a zo un dra hag a zle chom en istor Breizh, en istor an Iliz Katolik e Breizh...

(...) Ni, Bretoned, abaoe 1954, hon eus un digarez ouzhpenn da enoriñ (Kalon Vari) dre vertuzioù heñvel ouzh reoù ar Werc'hez... Er de Basion Hor Salver ha da Itron Varia-Druéz. Amzerioù kriz e oa an amzerioù-se, hag e klaske ar Vretoned konfort ha frealz en o ankenioù e-tal Krogz Mab-Doue, hag e-harz treid Itron Varia-Druéz. En amzerioù-mañ 'lec'h ma'z eo ken ankounac'haet kaerder santelezh ar C'horf hag an Ene, 'lec'h ma skignar ha ma vrader dre-holl lezenn ar pec'hed hudur, setu bremañ dirak deoulagad ar Vretoned evel ur skouer bur, ur petrom disi, KALON C'HLAN MARI...

NOTEENN : En Iliz Vulien e vez lavaret atav da echuiñ ar pedemou, hag e pron an oferinier, abaoe 1954 :

RA VO MEULET Kalon Glan Mari, RA VO MEULET Santez Anna, Patronez vat ar Vretoned.

War ar Banniell graet dre urzh an Aotrou Beleg, eskob Gwened ez eo skrivet er stumm-mañ :

Revo mélet Kalon Glan Mari. Revo mélet Santéz Anna, Patronez vat ar Vretoned

o o

KOULMIG AR GINDI ( 19 a viz Here 1958, N<sup>o</sup>-enn 20, p.84 )  
( Tennet eus Prezegenn an Aotrou Person, graet ar 14 a viz Here 1958, a-raok al Libere, er Servij bras evit Hon Tad Santel ar Pab, Pius XII )

..." Skrivet en deus... komzet en deus hag o vezañ ma ouie ur bern yezhoù e roe e lod da gement rumad-tud a veze dirazañ. Ha klevout a-rae a bep seurt yezhoù ivez. Ur miz bennak'zo e oa ast tud diwar-dro amañ, belein ha tud all d'oter tro an Itali, en un otokarr pourchaset gant an Aotrou Gag, kure Pontrev. (°) Pa vcent degemeret gant ar Pab e Kastell-Gandolfo e oa tud eus Bro-Holland, eus Bro-Alamagn hag a gasas a bep eil en o yezh ur c'hantik bennak : " Ma, eme ur beleg breizhat hag a oa er goupagnuzh, (°°) ret eo dimp diskouez petra 'omp !" Hag eñ da begañ war gantik Santez Anna. Ar Pab souezhet a savas e benn, met kerkent setu eñ o plegañ e benn adarre hag o juntrañ e zaouarn, evel un den o pedañ.

O pedañ marteze evit Bro ar Vretoned...

Rak mar anavezet ar broioù bras, ec'h anavezet ivez ar broioù bihan, hag unan eus ar broioù a blije dezhañ a dra sur e oa Breizh. Lavaret ez eus bet zoken penaos, pa oa deuet da Lizioù pa oa ben-niget an Iliz-Veur nevez en enor da Santez Tereza, e oa deuet e-kuzh betek Breizh da welout ar vro-mañ brudet abalamour d'ha c'haerder. Biskoazh n'en deus e-uran komzet eus se ha marteze n'eo ket gwir. Met prizout a-rae Breizhiz, dre ma selle anezho evel tud vat, tud leal, tud kristen, evel ma lavaras d'ar berc'heri-ned ast da Rom er bloaz 1947, pa oa bet lakeañ ur Breizhad war roll ar Sent : Sant Grignon Monforzh... " Breizh, ar vro gatolik-se" evel ma lavare c'hoazh dre Radio pa oa bet graet Gouelioù bras ar Sakrament en Neoned, e 1950

Er bloaz 1951, an 20 a viz Mae, deiz Sul an Dreinded, e oa bet lakeet an Tad Mener war roll an Dud Eilrus, an Tad Mener, ar misioner-se hag a zeuas a-benn, bez'ez eus 300 vlocas da ad- adreñ da Vretoned Vreizh-Izel ur Feiz start hag a zo chomet bev abaoe, daoust ma'z eo krog siwazh da horjellañ, a lavarfed... Deou zevazh goude, an 22 a viz Mae, er mearzh vintin, e voe degemeret ar berc'herined gant ar Pab; neuse e voe roet tonich-biniou da glevout dezhañ, kaout e voe DA FEIZ HON TADOU KEZH, ha BRO GOZH VA ZADOU. Ar Pab a oa stad ennañ hag a ziskennas diwar e dron da dremen e-toues an dud de lavarout ur ger da bep hini.

(°) An Aotrou Gag, kure Pontrev a zo gemidik eus Bulian  
(°°) An Aotrou Humbert, person ar Faved( Lañlon)

Ar Fab a oa MUELIKOUR BRAS. Al lur beure e voe gwall-skoet, ar mearzh beure, hiziv sizhun, e tifallas un tamm ha kentañ a reas e voe gou-lenn muzik, hag e voe roet da glevout dezhañ muzik eus BERTHOVEN, ha gant e zorn e verke ar muzul zoken. Kement-se a roas fiziañs d'ar medisin ha d'ar bed kristen a-bezh; allaz, ar fiziañs-se a tad-je un devezh hepken, evel 'ouzoc'h.

Ac'hanta! e-kerzh ar Bloavezh sentel a gev din, er bloaz 1950 e oa bet e Rom ur berc'herinded gant ar Vreuriñh Kanerion hag a vez graet anezho" Kanerion vihan o c'hroaz-Koad" renet gant an Aotrou Meyet eus Pariz. Goude ar Gouelioù e tichañsas d'ar Vretoned yaouank ha d'an Aotronez a oa ganto bezañ degemeret gant ar Fab. Hag ar Fab goude bezañ roet un neteut alicù keer d'ar vugale ha d'o renerion a c'houlennas diganto kanañ dezhañ un dra bennak e trezhonag... Ar re-mañ avat, a chomas gwall-nec'het: hini na ouie mann, nemet a-benn ar fin e voe kavet ur c'hronnard bennak hag a c'hellas distripen un tamm Anjeluz bennak 'giz Kemper dezhañ... Ar Fab evel 'ouzoc'h, a soñje gantañ e vije graet d'ar Vretoned yaouank ar pezh a vez graet en holl vroioù sivilizet : deskiñ da gantañ anavezout, prizout, karout traoù ar gêr ha traoù ar Vro a-raok deskiñ an traoù all. E-sell edo da gaout ar joa da glevout tonioù ha kaniri geer, hag ober plijadur d'ar vugale ha d'o c'helennerim ...Kouezhet e oa e viz-meur en e zorn .Kerse 'oa da vat gantañ...

Laveret ez eus bet ha skrivet ez eus bet e oa ar Pat Pius XI, Fab ar Misionoù hag ar Fab-mañ, Fab ar Werc'hez, dre m'en deus roet lusk ha lañs muiañ m'en deus gallet d'an Devosion da Vamm ar C'hrist: diskleriet zoken evel ur wirionez eus hor Feiz kristen, ez eo bet savet Mari d'ar baradoz Korf hag Ene( 1950) hag en deiz d'abardaez, war a leverer, e voe adgraet evitañ e jardinoù ar Vatikan burzhud Fatima: an heol o treiñ en cahl... Er bloaz 1954, e memor eus Diskleriadur Mbur ar Fab Pius IX, diwr-benn Krouidigezh Dinamm Ar Werc'hez, e reas ur "Bloavezh ar Werc'hez" hag er bloaz-se,1954 holl Eskibion Vreizh gant an Aotrou Kardinal Roques a ouestlas Breizh da GALON C'HLAN MARI, du-hont e Santez-Anna Wened, ol lec'h choazet gant Mamm ar Werc'hez, ANNA, SANEZ ANNA, an Hini a voe krouet ha ganet en he c'hreiz hag eus he gwad MAMM BUR DOUE, AR WERC'HEZ C'HLAN ( 26 a viz Gouere). Hag e komzas ar Fab dre Radio: " BREIZH, emezañ, a zo bet dalc'hmat hag a fell dezhi chom Douar Santel an Itron Varia. Diniver ez eo ar merkoù eus he karantez e-keñver ar Werc'hez. Fet ha pet Iliz en hec'h Eskoptioù a zo dindan hec'h anv santel; pet he pet skeudenn anezhi en ho Pro a zo bet kurunet hag a resev bendeiz testeni doujus ho pedennoù.Fet ha pet eus ho pugale a zoug abaoe o tadeziant anv Santel ar Werc'hez Vari !... Dougit holl en ho kalon anv benniget Mamm Doue. Enorit an anv-se dre ho tevo-sion, ha dreist pep tra enorit-eñ dre ho puhez !..."

Miromp eta ni, Bretoned, ar gentel-se lezet ganimp gant ar Fab marv: hennezh eo e Destamanet evit Breizh . Ha miromp ivez ar gentel-mañ roet d'ar bardonerion eus Breizh, gant gouelioù an Tad Mener e Rom : "kental an Optimistiozh", da lavarout ur gentel a fiziañs hag a feiz en amzer-da-zont. N'eus forzh pegen izel e c'heller bezañ, ez eus lepred esperañs da adsevel. Gwir ez eo ke-ment-se evit pep tra, evit pep pobl, evit pep bro, evit pep den dreist-holl evit an hini a zoug en e greiz ar Feiz hag ar Gredenn gristen.....

KOULMIG AR GINDI ( 2 a viz Du 1958, Nenn 21, raj. 87-88 )

Y A N N X X I I I

Ur Fab nevez hon eus hag en deus kemeret an anv a Yann. War a leverer ( hag en e-unan en deus hen lavarret ) en deus bet kemeret an anv-se e memor eus e Dad hag a oa Yann e anv, hag ivez dre ma'z eo Yann-Vadezour patron e barrez vihan :Sotto il Monte. ...YANN XXIII , setu petra a vezo graet anezhañ keit ha na vo le-zet gant madelezh an Aotrou Doue e penn an Iliz Katolik... .... Reoù all a gonto gwelloc'h eget Fennakrivagner ar GOULMIG e vuhez hag e oberoù. Met an dro-mañ war ar GOULMIG e vo kavet traoù na vint skrivet nep lec'h all ebet mearvat...Selacuit !

E Turkia edo Monsignor Roncalli pa voe galvet da ve-zañ Kannad ar Fab , e Pariz, hag an deiz kentañ a viz Genver , 1945 e tiskouezas e lizheroù-galloud d'an hini a oa e penn ar Gouarnamant e Pariz, ur jeneral... Trouz a oa ha riskl bras a drouz brasoc'h. Rak diskaret e oa bet gouarnamant Vichy hag an Aotrou Valerio Valeri, kannad ar Fab e Vichy,ne blije ket d'ar Gouarnamant nevez. Hervez ar vrad, unan eus pennoù bras ar Gouar-namant nevez, ur ministr katolik, en devoa kredet goulenñ digant ar Fab PIUS XII terriñ eus o c'harg : 3 gerdinal, ha 30 Eskob. Evel just, en devoa ar Fab savet e zivskoaz gant ar fae..Met ret e oa ingaliñ an traoù ha setu perak e voe dibabet ur Prelad bru-det evit e finesa hag e ampartz da blaenast an traoù: an Aotrou 'n Eskob Roncalli.

E-touez ar c'hudennoù diaesañ en devoa an Aotrou Ron-calli da zibab, e voe afer an Aotrou Serrand, Eskob Sant-Brieg, Tamallet e oa bet d'an Aotrou Serrand bezañ skrivet lizheroù a-du gant Gouarnamant Vichy, pa oa an Alamand aze; hag an hini a oa Prefed Sant-Brieg d'ar mare-se ne oa ket bras-bras e garantez e-keñver an Aotrou 'n Eskob... Galvet e voe an Aotrou Serrand da gaout Kannad ar Fab, e Pariz: an Aotrou Roncalli.

War an hent, un tu bennak war-dro Lamball e oa tud gent armoù o c'hortoz gwetur an Aotrou'n Eskob da dremen, d'ober e jeu dezhañ. Da c'hras Doue, e tremenas ar wetur hep gouzout d'ar c'hortozerion. An Aotrou Serrand trist-trist he dilavar er wetur hen kase da Bariz, a seblante bezaf un den kondaonet d'ar marv...

Er wetur gantañ, en tu-hont d'an dud all hag a zo bev c'hoazh hiziv an deiz, e oa an Aotrou Chaloni Herve, rener Kloerdi bras Sant Brieg, un Teologour eus ar re vrudetañ hag aozer levrioù Doueoniezh, hag a zo mervet er deizioù tremenet (+ 23.X. 1958, Doue d'hen pardono!). An Aotrou Roncalli a reas da gantañ un degemer yen d'ar veajourion. An Aotrou Serrand ne ranne grik d'en em zifenn, met un alvokad dispar a oa gantañ : ne voe ket pell an Aotrou Herve o sevel e vouezh hag o vezañ ma oa krak e spered, distagallet met e deod, hag un tamm dir zoken war e fas, ne voe ket nac'het evit displegañ an taolennoù da Gannad ar Pab !!! E gwirionez e rae Monsignor Roncalli bizaj fall dezho abalamour dezhañ da glevout aesoc'h a se an doareoù penn-da-benn. Gouzout a ouie a-walc'h peseurt danvez a oa oc'h ober Eskob Sant-Brieg ha pebezh labour gaer en devoa graet en e Eskopti... Pedit a reas e weladennerion da chom gantañ da zetrif ha ma voe mat a-walc'h ar pred ha seder an traoù ez eo a drugarez da Vreizh ha d'he danveziou mat ...met an dra-se a zo ur gont all... Pa voe ar c'houlz da gimiediañ, e lavaras Kennad ar Pab gant kalz a resped ha gant merkoù a istim vras, d'an Aotrou Serrand "Kit d'ar gêr e peoc'h, Aotrou 'n Eskob, ne rit ven ebet eus temelloù ar c'hrak-aotrou B... ha pedet ez on a-berzh Hon Tad Santel ar Pab da ziskleriañ deoc'h penaos "E Santelezh ha defe gwall-galonad m'en em gavfe droug gant Eskob Sante! Sant-Brieg!"... An Aotrou 'n Eskob war hent ar gêr a oa seder evel ur bugelig...

E-touez an Eskoption hag a voe gwasket da heul an Dieubidigezh e oa an Aotrou Floran de la Villerabelle, arc'heskob Aix er Brovañs. Er bloaz 1940 e oa bet anvet an Aotrou de la Villerabelle arc'heskob Roazhon, met Daladier, ministr Bro-C'hall a lavaras ne vije biken anvet ur Breizhad da arc'heskob Breizh. Kement-se a voe ur galonad evit an Aotrou de la Villerabelle hag evit e vignon, ar Pab e-unan, rak anaoudegezhioù e oa ar Pab hag eskob Annesi. Neuze pa ne oa tu ebet d'ober a-hend-all e voe kaset an Aotrou de la Villerabelle da sivilizañ peotred ar C'hreisteiz. Da fin ar brezel e renkes pellaat diouzh e arc'heskopti... Met pa varvas e 1951 e teuas an Aotrou Roncalli eus Pariz da Sant-Brieg d'e interamant. Fidel e oa ar Pab kozh!

Anaout a rae an Aotrou Roncalli ar Vretoned. Bet eo meur a wech e Breizh: Roazhon, Santez-Anna-Wened hag all. An 19 a viz Mae 47 e oa bet oc'h ober Pardon Sant Erwan, e Landreger, evit 6-et Kantved deiz-ha-bloaz Santelezhadur Sant Erwan... Ma oa tomm ar Pab nevez-varvouzh ar Vretoned, e vo YANN XXIII ken tomm all outo, ha prest da zifenn o c'hoaz pa vo ret. Marteze e ray se gwell eget ar Vretoned o-unan

BEVET YANN XXIII

( 29. IX. 1902 ) diwer-benn  
Prezgerrezh ha Katekizerezh

Ma 'z eus bet trouz ur wech bennak en abeg d'ar brezhoneg eo pa gredas Combes, ministr gall an Traoù-a-Relijion kas da brefeded Breizh-Izel, d'an 29 a viz Gwengolo 1902, ur c'helo'h-lizher o c'hourdrouz tennañ o gopr digant ar veleion a zalc'hje da brezeg ha da gatekizañ e Brezhoneg. D'ar mare-se en askont d'an Englev etre an Iliz hag ar Gouarnamant e veze paet ar veleion, evel kargidi... Pep maer a renkije testeniañ e pe yezh e prezege hag e katekize Personed ha Kureed ha m'o dije bet ar re-nañ roet ar golenadurezh kristen e brezhoneg e vije miret o gopr outo."

Trouz a savas a bep tu: kannaded, maerioù, barzhed, skrivagnerion a youc'has pe a skrivas enep al lizher hag a zifennas taer pe daeroc'h gwirioù yezh Breizh-Izel. Unanig bennak eus ar c'hazetennoù koulskoude, evel "LE PROGRES DU MORBIHAN" en em zisklerias a-du gant ar Gouarnamant, met kement-se a oa nebeut a dra e-skoc'h ar mouezhioù diniver a savas a bep tu: e Breizh, Bro-C'hall, Broioù Keltiek.

Gwir abeg ar reoladur nevez-se a-berzh ar Ministr e oa ar gonner a verve ennañ en askont d'an enebiezh a gavas e lezennoù a-enep ar Relijiozuz; hag e felle dezhañ en em veñjiñ war ar veleion. Aes e oa dezhañ kavout abegoù all, kement ha reiñ ur seblant a wirionez d'e lizher... Ne raimp ket er pennad-mañ an istor dre ar munud eus ar stourm etre difennourion gwirioù ar Vretoned hag harperion ar Gouarnamant... Klask a raimp kentoc'h an abegoù roet gant an eil rum hag egile, dimp da c'hallout ivez reiñ hor reoù-ni diouzh hon tu...

°°°

Kerkent hag an 2 a viz Here e skrivas ar Markiz d'Estourbeilhon d'ar Ministr : "En anv an 70.000 Breizhad eus ar Morbihan hag an eus an enor da vezañ o c'hannad er Parlamant, ez eo va dever sevel va mouezh gant va holl nerzh, enep ho lizher mezhus d'ar Brefeded, o tifenn ouzh ar veleion ober gant ar brezhoneg. N'eo ket a-walc'h deoc'h bezañ lamet digarimp ul lodenn vat eus hor frankizioù, ha setu ma kredit bremañ lakaet ho torn disakr war ar pep santelañ eus peadra hon tud-kozh thor Yezh... Met bez' ez eus un dra ha na vougot biken : KOUSTIANS AR VRO ha na nac'ho biken HE DOUE, HE YEZH, HE FEIZ."

Ernest Lamy ha Yann Guilloteaux, deputeed an Oriant a gasas ivez pep a lizher d'ar Ministr. Ar 14 a viz Here, an deiz ma tigoras ar Gambr, e reas DE MUN, kennad ar Finister, ur bresagenn da demall d'ar Gouarnamant e waskerezh enep" Yezh Vroadel  
GALLIA



An Aotrou Lefas, kennad Foujera, ne chomas ket da dortal: "Ma talc'hit, emezañ, da sevel lezennoù mac'homus ha dismegeñsus, o devo ar Vretoned gwir da ziskenn er ruioù!"

An Eskibion hag ar veleion ne doniet ket gant ar Gouarnamant, pell ac'hano: un digarez da c'hoari ar c'hontrol diouzh ar ministr dizoue, hep kontañ an abegoù pouezus-mañ: mad ar Relijion, hag evit lod karantez o yezh. Koulskoude e kavas d'un Eskob e vefe mat klask tremen diouzh ar Gouarnamant: an Aotrou Dubillard, Eskob Kemper, ur Gall eus Bezañson. Dre "Gannadig e Eskopti" e kasas kemennadurezh d'ar veleion: "Pet a vugale, a c'houlenne, a c'hellfe aes-tre ha gant frouezh heuliañ ar c'hatekiz gallek?". Goulenn a rae ouzhpenn doareoù diwar-benn yezh ar sarmonioù.

Kement-se a lakaas trouz da sevel, met daoust da se e voe graet an enklask ha setu amañ frouezh an enklask evel ma voe embannet d'an XI a viz Du 1902, war "LE COURRIER BRETON":

Parrezioù: 310.

Katekiz: Ibrezhoneg hepken: 167

Gallek ha Brezhoneg: 72

Brezhoneg hepken gant kentelioù gallek evit nebeutoc'h eget 5 bugel: 167

Gallek-tamm Brezhoneg: 3

Gallek rik: 11

Sarmonioù: Brezhoneg hepken: 256, tu ebet d'ober a-hend-all

Gallek-Brezhoneg: 49

Gallek hepken: 3

Evit pezh a sell ouzh ar c'hatekiz e veze bep bloaz well-wazh evit ar Paskoù Kentañ: 19.000. Diwar ar re-se:

Diwar ar re-se: 13.300 war ar Brezhoneg = 70%

" : 5.709 war ar Galleg = 30%

Hag er sifroù-se ne gonted ket bugale ar Skolajoù hag ar c'houentoù 'lec'h ma veze graet ar c'hatekiz E GALLEG hepken

EVIT AR PREZEGEREZH: 483. 848 a dud e brezhoneg, divarrek ma cant a-grenn da glevout galleg 289. 166 en div yezh.

Er rentañ-kont-se e komzed eus un degcuezhadenn souezhus a-walc'h. En ur berrez eus kichen Brest e oa bet graet ur Retred-Pask evit labourerion-ar-Porz, da lavarout eo evit tud loaz a-walc'h ouzh ar galleg. E galleg e voe sarmonet dezho, met daou pe dri deiz goude e teuas tud a-berzh ar re all da bediñ ar veleion da brezeg e brezhoneg: "Galleg a ouzomp hag a gomzomp, met bez'ez eus traoù ha gerioù ha n'omp ket evit kompren ervat; gwell e vefe ganimp klevout brezhoneg..."

o°c

E keit-se e tostae pred ar vreurtedeg e Kamb ar Gannaded Apellet e oa ur wech dija, rak goude lakaet d'an 28 a viz Du e voe kaset d'ar 16 a viz Genver 1903... Dileuridi eus Iwerzhon, en o fenn Le Fournier D'Albe, sekretour ar GEVREDIGEZH KELTIK, a zlee donet da Pariz, ha war-nes kemerout al lestr edont pe glev-jont ar pezh a oa bet divizet e bodadeg ar Parlamant, ar 16 a viz Genver.

Evel-hen e oa ar mennad kinniget gant an Abad GAYRAUD: "Ar Gembr o vezañ ne sav ket dezhi e c'hell an implij eus ar yezhoù-robil: evel ar Provanseg, ar Brezhoneg, ar Flandrezeg, an Euskareg ober gaoz ouzh unaded ar Vro, a zianzav kele'h-lizher Ministr an Diabarzh hag an Aferioù-a-Relijion"

Kentañ hini a savas war al leurenn-brezeg e voe an Ab. Lamy, kennad an Oriant. Ret mat ez eo du-mañ, emezañ, ober gant ar Brezhoneg. Diwar an 2 vilion eus hor c'henvroiz hag a gomz brezhoneg, ez eus ur milion bennak, marteze ouzhpenn, hag a oar galleg muioc'h pe nebeutoc'h. Met ouzhpenn 700.000 (743.000 endeo) ha na gomzont netra nemet brezhoneg... Gout a ouzon penaos da heul al lezennoù diwar-benn ar Servij-Soudard hag ar Skolioù, e teuo an holl bacted abred pe ziwezhat da c'houzout galleg, met bez' amañ c'hoazh ar marc'hed, ar re gozh, ar vugale. Bremañ ar bacted hag o deus ouzhpenn 35 bloaz n'ouzont nemet brezhoneg; hag ar re zoken a oar galleg hag her c'houmpren hag a zo gouest d'ober gantañ a zo gwell ganto alies ober gant ar yezh o deus desket war barlenn o mamm... Pa vez galvet testoù dirak al lez-vern, hag i o c'houzout galleg e c'houlennont dougen testi e brezhoneg. Anzavet ez eo ar gwir-se dezho gant al lezenn hec'h - unan peogwir en holl lezioù-barn Breizh, ez eus jubennourion douet. ... Renkout a reer eta komz brezhoneg gant an dud, dre n'aus tu ebet d'ober a-hend-all, er stad m'emañ an traoù en hor c'horn-bro... Ma reer gant ar brezhoneg n'eo ket dre blijadur da gomz brezhoneg kentoc'h eget galleg, met dre ma'z eo ar yezh a vez komzet koulz lavarout gant an holl artizaned, an holl vicherourion, an holl gouerien hag holl besketserion hon adoh.

... Evel pep kelennadurezh uhel: prederouriezh pe Relijion, ez eo ar c'hatekiz un dra diaes a-walc'h evit spered ur bugel dre ma'z int traoù difetis. Ma likit ar beleg da gomz galleg evit kelennañ ar vugale ez eo kerkoulz lavarout diouzhtu e tiskerit en un teol ar Relijion Katolik dre holl war ar maennoù a Breizh. Ar vugale ne gomprenont nemet brezhoneg; n'eus tu ebet da zisplegañ ar c'hatekiz dezho nemet dre ar brezhoneg... Ma teskar katekiz d'ur bugel n'eo ket evit deskiñ ar yezh pe un all dezhañ, met evit hen kelennañ war ar Relijion... Mont e ra ar vugale d'ar skoli; d'ar skolaer ez eo deskiñ galleg d'ar vugale. D'an 30 a viz Here diwezhañ, er Sened, Aotrou Prezident, hec'h eus disklriet e vennec'h hepmaiken digeriñ dorioù an Ilizoù



na ne intent an darnvuiañ eus ar vugale ha ne gomzont nemet brezhoneg. ...Hogen n'emañ kont evel-se, piv na wel n'eo komzou an Aotrouh La- my c' tifenn ar frankiz netra nemet un digarez brav da derriñ unan eus ho lezennou pouezusañ ha moulusañ...

Amañ hag a-hont... ez eus bet embennet diwar-benn stad ar c'helennerzh e skolioù ar c'hentañ-derez e Breizh, niveroù eus ar mantrusañ. Met dre eurvad na glotont ket gant ar wirionez... Hervez ar rentañ-kont savet diwar 260 skrid-danevell kaset da Eskob Kemper, n'eus ket e 110 parrez ur bugel gouest da zeskiñ e gresañsoù e galleg. Lavarout a reer c'hoazh n'eus en ur vourc'h bennak diwar 80 a vugale nemet 4 hepken e gemet a c'hell kompren ar c'hatekiz galleg. En ur pennlec'h-kanton : diwar 154 bugel, 12 hepken a heuilh ar c'hatekiz galleg...

Met ar sifrou-se aozet evit difenn kaoz hon enebourion ne glotont tamm ebet gant an doareoù klevet gant Prefed Penn-ar-Bed : SKOLIOU LAIK : 12.217 avit o Fask Kentañ 9.642 barrek da gompren aes-tre ar c'hatekiz galleg 2.538 n'int gouest nemet da heul ar hini brezhonek Aotrou'n Enseller-Akademiezh a gont 80 % eus ar vugale barrek da heul ar c'hatekiz GALLEK.

Da harpañ an testeni-se setu amañ unan all hag a zeu dimp eus ar memes perzh :

- E 1873, 2.251 soudard yaouank, anezho 40% eus ar bloavezhiañ a oa digelenn.  
- E 1900 niver ar re zizesk : 163 hepken = 8% eus ar bloavezhiañ.  
Rak-se en ur ober 37 vloaz ez eo koazhet niver ar re zizesk war ar galleg eus 40% da 8%... Ac'hanta! mar fell deoc'h klevout petra a ra ar velleion e-keñver ar yaouankizoù bet heñchet war ar galleg, selaouit an Enseller-Akademiezh :

3 Barrez hepken ( Brest, Kerber, ar Releg ) : katekiz galleg hepken 169 Parrez : galleg ha brezhoneg 123 Parrez, e redi ar bersoned hag ar gureed ar vugale eus hor skolioù hag a or galleg da zeskiñ brezhoneg hepken, hag eo'h argasont ar galleg a-grenn eus an iliz.

En ur barrez hepken : GWENGAD, emañ ar skolaer hag ar skolee- rez a-unvan evit an zav n'eus hini eus o skolidi barrek da heulieñ ar c'hatekiz galleg... " Ne roin ket meuleudi d'ar skolaer na d'ar skolee- rez-se evit ar frouezh eus o c'hentelioù !"

Ha koulskoude ar beleg hag a ra katekiz en deus deverioù sklaer e-keñver ar Vro: un den e-karg ez eo, dindan Gouarnamant ar Frañs; paset gant arc'hant ar Gouarnamant; dleet eo dezhañ plegañ evel ar gergidi all da lezennou ar Vro... Ha me'zav din e vank d'ober e karg pa gemer warnañ kolenn d'ar vugale ar c'hatekiz brezhonek hepken. ...Ar galleg a zle bezañ dre-holl ar Yezh Vroadel, ar Yezh Ofisiel en iliz evel ar Skol.

Ar gradonn start am eus e teuc ar peoc'h a-benn ar fin e Breizh, evel n'eo deuet e Bro-Flandrez. Trouz a voe e Bro-Flan- drez, pa zegouezhas kementadurezh Waldeck Rousseau. Meur a vaer a reas skouarn vouzar; ret e voe terrin eus o c'harg darn anezho ha n'o devoa ket bet aon o sirañ testenioù faos... An dud a-iliz a stourmas ivez; na voe ret lemel e c'hoep digant unan bennak anezho. Arc'heskob Kembrae a-benn ar fin en deus kaset urzhioù sklaer da velleion e eskopti ha gour:hemennet groñs dezho ar ar prezegennoù a bep eil e galleg hag e flandrezeg hag ar c'hatekiz e galleg hepken - testenn ha diskleriadurioù ... "

(SELLOUT Raj. 22 .e Traoù) °°

War-lerc'h Combes e voe tro Loeiz Hemon, kammad Kemper da sevel war al leurenn-gomz. Goude tamall da Prezidant ar C'huzul bezañ seblantet diskrediñ edo Breizh er Frañs hag e oa Frañ- sision eus ar Vretoned, e lavaras e oa unaset Breizh ha Bro- C'hall abaoe pell'zo, hag o devoa ar Vretoned diskouezet alies o lealded hag o c'harantez e-keñver ar Frañs en un doare kalo- nek-meurbet... Neuze e lakaas anat dirak an holl e oa ker barrek ar brezhoneg hag ar galleg da gomz eus politikerezh: ur yezh a zo ur benveg mat evit an holl gostezennoù politikel : "Nevez'eo end- eeun, emezañ, ez eus bet degaset din ur skrid he n'eo ket anave- zet marteze gant Aotrouh Prezidant ar C'huzul, hag am eus ar bli- jadur da reiñ dezhañ da anaout : ur veuleudi ez eo e Brezhoneg, eus e c'houarnamant hag e labour !" ( ° )

Goude-se e krogas gant kudem ar Yezh en ilizoù: " En iliz, emezañ, e vez tud a bep seurt oad, hag ar beleg pa vez o prezeg da dud 50 pe 60 vloaz ha n'int bet tiskoañ er skol, n'hell ket mont dezho e galleg: kement-se a vefe oter goap anezho... Evit ar vugale 10 vloaz ha n'o deus klevet er gêr nemet brezhoneg, ha n'o deus ket gallet e korf un nebeut mizioù deskiñ trawalc'h a c'halle, n'emañ ket ar c'hatekiz galleg diout. En iliz e ren- ker kemerout an dud evel n'emaint.

Met bezit dinoc'h ! Gouzout a ouzon ervat emeur krog da vat gant al labour-(gallekaat)- er skol... Aotrouh Prezidant ar C'huzul e-unan en deus merket ar pezh a zo bet gomzet war an dechem-se. E 1880 e oa 80% eus an danvez-scudarded ha na ouient na lenn na skrivañ. E 1900 ne oa mui nemet 8% anezho. Setu aze labour ar skol en ur ober 20 vloaz. Ac'hanta! deoust ha ne WELIT -HU KET E VO KASET AL LABOUR-se DA PENN DRE RED ? Hag evit ar gudenn a studiomp bremañ NE VO MUI ANEZHI A-PENN 10 VLOAZ AMAÑ . "

( Un tamm keflusk ha mesk a voe e Kembr ar Gannaded, o klevout ar gerioù diwezhañ-mañ. Souzhus a-walc'h eo klevout ar seurt komzou diwar vuzelloù ur Breizhad brezhoneger evel an Ao- Hemon... Met deuet e oant ha chomet int skrivet abaoe ! Nemet un dro-brezegeger gant un daelenn ad homiaez e c'hellent bout ! )



Gude e c'halle hardish gouenn ne vije savet skolioù gallek e Breizh-Izel. Hag evit lavarout ar wirionez, ez eo gwall-ventrus an daolenn a reas eus stad ar skolioù e Breizh-Izel : e kalz a glasoù e kaved ouzhpenn 100 a vugale evit an hevelep skolaer, hag e meur a glas e kaved penn 200 a skolidi!! Ya! 200 a vugale war gent ar memes kalenner !!! Bep bloaz, eus Hemon, e vez bec'h etre deputeed an Departamantoù breizhet ha Ministr an Deskadurezh evit kacut sikour da sevel un toulledig bihan a glasoù nevez, pe eilskolnerion...."

Koulskoude e tiskoueze Hemon bezañ a-du gant ar c'helennerien divyezhek :- N'eus bro ebet 'lec'h m'eo troetoc'h an dud gant ar skol eget Breizh. Daoust m'eo stag ar Vretoned ouzh o yezh, ne vir ket ar garantez-se outo da brizout ha da glask an ansoudegezh eus ar Galleg. Purak ne vefe ket unanet ar brezhoneg hag ar galleg ar skol, dezho o-daou de reif an dorn an eil d'egile ? N'eo ket ar galleg a gemet a vefe wazh a se, a dre sur... D'am meno ez eo ur gwall-fazi argas ar brezhoneg eus ar skol, pe zlefe kacut enni ul lec'h ken talvoudus ken naturel.... Gouzout a rit gent pebesh evezh ho devoa eozet ar Gof-vansion ha labour war ar skolioù. Ac'hanta! ne chome ket da dorth evit gouenn harp ha sikour a-berzh an holl yezhoù-pobl da aessat an deskif galleg...

Ar Saozon n'int ket chomet kennebeut hep ober gant ar c'hembraeg hag ar Gouezeleg a-benn heñchañ an dud d'ar Saoneg. Petra a zo c'hoarvezet ? Deuet eo ar pobloù-se da gomz er vat div yezh war an dro. (°) Setu aze ar pezh a garfen gwelout e Breizh ivez. Tizhout an ansoudegezh eus ar Galleg ( enep ar menoz-se ne gavot den ebet ) met dre lakaat en implij an holl skoc'hell a gever war al lec'h, hep aberzhiñ dre un taol-vandalerzh ar yezh dinnez-se hag a zo bet yezh hon Tadoù hag a zo c'hoazh mellezour ene ar bobl. " Hogen daoust d'ar c'homzoù fur ha nobl-se ne oa netra d'ober, ha keer en devoe Hemon leuskal ar poz brudet-mañ : " HOR GWA DA ZO DEOC'H, pa gerot; met HOR YEZH A ZO DIMP HAG HE MIROUT A REOMP ! " e oa graet e soñj gant ar Gouarnamant ha gant al lodenn vrasañ eus ar Gannaded.

Deuet e oa ar c'houlz da vouezhiañ ....

CF. FAJENN 21. (Dre un taol-dievezhted hon eus dibennet peurlok Komb ! ... Dont a raio ar peoc'h e Breizh, evel m'eo deuet e Bro-Flandrez, hen adlavarout a ran hep aon ebet. Met ken diskenn diwar al leurenn-mañ ez eo ve dever berzañ ez-leal ar re a sell ar gudenn-mañ outo, na vo gallet ober ar peoc'h ha na vo graet, nemet dre ar sentidigezh klok eus ar gloer vreizhat ouzh urzhioù ar Gouarnamant

( STRAKADEG-DAOUARN hir ha kalonek-tre en tu kleiz. TROUZ a-zehoù )

(°) Faj. 21 : Charlez Rolland eus Gwerliskin, e gev dimp.

En tu-hont d'ar menned kinniget gant an Aotrou Gayraud hag hon eus merket er penn-kentañ eus ar studiaden-mañ e oa 6 mennad all hag a c'heller da renkañ evel-hen :

1. Ar re a-du gant ar Gouarnamant
2. Ar re a-du gant ar peoc'h, da lavarout eo a-du gant ar Statu quo
3. He neuze hini an Aotrou Morkiz d'Estoubeillon, du Roskad, de Lanjuinais, Ernest Lamy hag Ollivier.

Ar re-mañ en em zisklerie a-du gant ar SKOLIATA DIVYEZHEK : ar GALLEG dre ar BREZHONEG.

Pep rumm evel just, a renkas displegañ talvoudegezh ha ster e vennad., kent d'ar Gembr mouezhiañ... Ar MORKIZ en devoe mil boan o kac'zel gant an trouz a seve da vouezh e vouezh. Evel-hen e lavaras : "-Ar pezh a c'houlennan ez eo ar pezh a zo bet gouenn et gant kalz a gelennerion ouizieq, gant kalz a skolaerion dihan o spered hag a garje gwelout ar Brezhoneg kelennet keñver-ouzh-keñver gant ar Galleg er Skolioù, hag ar Galleg neuze dre ar Brezhoneg. An deiz m'ho po divizet kement-se e vo kavet an diskoulb d'ar gudenn. Rak hon tud a oufe an div yezh. Ne vo mui ezhomm a lizheri heskims da rediañ ar veleion d'ober gant ar Galleg hepken. Dre sevended, dre zereadegezh, na pa ve ken, ne varc'hataio ket ar veleion d'ober sarmonioù gallek, hag ar c'hatekiz zoken, o vezañ na vint sur da vezañ intentet gant an holl...

Ne muioe'h ager evit hor feiz avat, ne asantimp biken bezañ gwallgaset atalamour d'hor gizioù ha d'hor yezh. Gwelloc'h c'hoazh ! ober a raimp o doujañ... KENTOC'H MERVEL (sic !), rak kement-se a vefe treiñ kein d'hon Istor ha disker hon Uhelvennadoù ! Hel lavarout a ran amañ a vouezh uhel : " Biken e Breizh ne blegimp da c'houzañ ar seurt oberioù, n'eus forzh pegen start e vo ar stourm. Nann! keer ho po c'hoari, n'eo ket dare hor Yezh da vont diwar Louar hor Bro ! "

Neuze e tigoras ar vouezhiadeg war venned Gouzy, Sarrien hag Astier a-du gant ar Gouarnamant :

|                  |       |               |
|------------------|-------|---------------|
| Voterion         | : 506 |               |
| Muiañ-Niver klok | : 254 |               |
| A-DU             | : 329 | A-ENEP : 177. |

E-kreiz an dourni e youc'has ar MORKIZ de l'Estoubeillon " BEVET BREIZH ! daoust da bep tra ! "

Kollet e oa an abadenn er Gembr. Met ne oa ket echu e Breizh-Izel ha war GROAZ AR VRETONED e voe savet un daolenn a enor d'ar veleion DIFRAMMET O FJE DIGANIE e-giz na lavare ; rak ar veleion ne blegjont ket evit kement seurt abegoù a c'helle bezañ hag e lezomp e karg hol lennerion da glask : Relijion, Karantez ar Yezh, Mad an eneoù...

N'emañ ket en hor soñj komz eus an doare kalonek ma voe renet ar stourmad gant ar bolitekerion, ar skrivegnarion, pe "SKOL AR VARZHED" gant Taldir e-kreiz e vrud hag e splannder en o fenn, na komz ken-nebeut eus an degouezhioù fentus en em gavas: evel gant Person an El-Yah, er Aorbihan, hag a voe lamet ivez e tae digantañ dre ma prezege e brezhoneg, hag en ur breizh-Uheliad anezhañ divrezhonek ! Gallout a rafent kontañ ivez ar pezh a glevis gwechall gant Jeanne-Marie Goni-deg ( matedh an Aotrou Lec'hvien ) diwar-benn an Aotrou 'n Herri, person Kervod, e-kichen Fempoull hag a lavaras diwar lein ar gadorsarmon e oa barrek da c'hoari e dammig "Bossuet" met ne raje biken o vezañ ma oa Breton. Darn eus ar re a oa ouzh hen selaou-en o zouez div gomezerezh yaouank, c'hoarezed Jeanne-Marie hag a veze alies er presbital o labourat- en em c'houlenne daoust piv 'oa an Aotrou-se : Bossuet !

Gwell ganimp esa tennañ ur gentel bennak eus an darvoudoù -se : I- Tapout div c'had gant un tenn a felle da Gomb, war hor meno. Evit Komb e oa Breizh ur vroad-Chouanted dalc'het dindan gaezelg gant ar veleion. An arrouddadoù diwar e brezegenn hag hon eus merket uhelloc'h ha troet koulz lavarout ger evit ger diwar ar galleg hon diskouez a-walc'h. Met en tu-hont d'ar blijadur a c'helle kaout ouzh en em veñjiñ war ar veleion a Vreizh-Izel, e venne ivez diskar Yezh ha Kultur ar Vretoned : traoù a c'hiz kozh, enep ar spered modern republikan. Er c'heñver-se lakaomp kein-ouzh-kein: KOMB, de NOMZIE, Nagelen, da lavarout eo Pariz hag ar Burevioù gant o Gouarnamantoù, ha n'o deus bet biskoazh c'hoant all ebet nemet distrujañ hor Yezh.

2.- Menozioù mat o devoa evelat tud evel ar MARKIZ kozh de l'Estourbillon hag e vignoned diwar-benn an DIVYEZHEGEZH.

3. Met ne oa wann ebet d'ober enep gwall-youloù ar bolitikerion c'hall gonzet-holl gant ar Gouarnamant : gwall-youloù enep Relijion hag enep Breizh. Henezh eo marevezh bleunius ar Radikaled Frañmasoned, arabat hen disoñjal !

4. Ur gentel donoc'h avat, hon eus da denañ. Un teol-disleald a rae ar Parlament " o tiffrañmañ o fae digant ar veleion " , met e -skeud se e oa bet barnet AFER AR SKOLIOÙ, evel pa vefe bet un AFER oc'h aparchantañ hepken ouzh BRO-C'HALL. N'o devoa ket komprenet an deputeed vreizhat e oa ar SKOLIOÙ-se lod eus FEADRA BREIZH, evel ar madoù-korf, madoù-ene ha madoù-spered all. Ar weledigezh-se a vanke dezho, hag ar weledigezh-se he dije gallet krouiñ un Emsav kreñv war dachenn ar Politikerezh hag un Ilvaniezh start etre partred a-raok gant ar ger-stur : TRAOÙ BREIZH da vezañ MERET HA GOARNNET GANT AR VRETONEZ o-unan.

Ha kaer a vo lavarout 'ez eo ar ger-stur-se eo a savetaio Breizh hag he feadra korfel, eneel ha speredel, bremañ c'hoazh !  
( PLOUBER- 1948- BULIEN 1958 )

## KELAOUENNOÙ HA MOULADURIOÙ

TRISTAN HAG IZOLD, gant Langleiz. Embannet gant al LIAMM, goulemm digant P. Bodenan, 3 Chemin des Potiers, Ergué-Armel, Quimper, C.C.P. 212-23 Roazhon. - Neb a blij dezhañ tenerded ha harrhoniaezh a breno hep tank levr kaer LANGLEIZ : Tristan hag Izold : 1000 lur war baper boutin, 1500 war Offset ( un nebeudig hepken a van c'hoazh c'hoazh eus ar re-mañ ), 2.000 lur war baper kaer. Gwerzhet e vez en un doare dispar. Hastit afo, mar fell deoc'h kaout ho lod...

GERIADUR ISTOREL (Lizherenn A) gant R. Hemon. 1000 lur. Goulemm digant P. Bodenan. Ur souezh ez eo gwelout penaos e c'hell un den evel labourioù lennegel koulz ha labourioù gouiziegezh. Pa c'hoarvez e n'eo ket maoc'h sivilizet ar Vretoned, a vez e oufent gwel pe skridoù ha mouladurioù harpañ eget na reont, ha kaout a rafent implij vat d'o arc'hant. PRENIT AR GERIADUR ISTOREL, tud ouiziekiel a Vreizh hag a lec'h all !

AR BED KELTIEK: N'hellont nemet adlavarout ar pezh hon eus skrivet dija diwar-benn ar BED KELTIEK unan eus teñzorioù ar brezhoneg, en amzer a ren. SKRIVAN d'an Aotrou Dubourg, ar C'houerañhed (Vx-Marché) C.D.N.

HOR YEZH, trimiziekiel : G. Etienne, Maen-ar-Ya, Kastellin K.R. II 62-91- Roazhon.... 1000 lur

SEUREZ KERMEZAN rouentig gant Dom Duchauchix, troet gant Klerg, diwar "La Bonne Soeur des Avettes" ( Liesskrivet ) 175 lur dre ar Post. Goulemm M. Le Clerc, parson, Bulien. - Un teol-esa ne deo ken an droidigezh-mañ hag al labour penn-da-benn, graet e presbital Bulien, nemet ar vandenn-gein peget ouzh al levrioù-goue e Milin-Ba-per BENAOC'H. Ha kerkent ha ma vo tu e vo moulet traoù all, en o zouez troidigezhioù diwar Shakespeare... Nebeut a-walc'h a skmaerrennoù a zo bet tennet. Grit eta ho koulonne-denn ar c'hentañ ar gwellañ. Meuleudioù a zo bet graet d'al levrig gant R. Hemon : ar BED KELTIEK (Here 1958, p. 266-a, b). Setu amañ ar pezh a skriver dimp " Bourrus e kavan al levrig-mañ. Un druez eo n'hon eus ket maoc'h a skridoù fresk a seurt-se da lenn. Ur soñj mat -tre ivez taolenmañ buhez Vreizh-Uhel dre ar brezhoneg." (Y.O. I 6. XI. 44). Un nebeudig fazioù ses da c'hwenmat a zo chomet : fazioù-bizieta

KONTADENNOÙ KOZH HA NEVEZ gant A. Kalvez (400 lur). Skeudennoù gant Y. Peron. - E gwirionez ul levr da geleñnañ ar brezhoneg, e Brezhoneg penn-da-benn. Liesskrivet brav e vo, ha war na deo ket bet moulet an dro gentañ ez eo abalamour d'ober labour klokoc'h, ha gwelloc'h, mar bez tu, goude klevout ali ar gelennerion. UL LEVR D' BRENNAN EZ EO ha da IMPLIJAN er skolioù.. Ul levr a DALVOUDEGEZH VRAS : ur ganned war-raok er stum da geleñnañ ar Yezh.

Per Bourdellez

"BERNIOÙ BUGALE  
ER SKOLIOÙ"

"Bernioù bugale er Skolioù". Setu ar pezh a glever a bep tu - Ha gwir eo - Hag e tiskouezer deoc'h ar skolioù nevez emeur o sel, hag ar re emeur o kreskiñ.

Gwelit Lanmuon : 2 Skol Nevez, ha 3 Skol gresket. Gwelit Plistin... hag e lec'h all. Ha penaos e **kredit-hu** skrivañ pennadoù en ur gelaouenn a bouez evel... "BARR-HEOL" da lavarout emañ Breizh o tibolañ ?

Bet 'z eus bet un amzer svat, e oa bugale e Breizh. E PRAD (Kanton ar Roc'h, Bro-Dreger) e c'hane war-dre ar bloavezh 1870, 78 a vugale ar bloaz. Bremañ e c'han 14 pe 15.

E Penn-ar-Bed e c'hane gwell-wazh etre ar bloaz 1901-1910 = 23.493 bugel ar bloaz. Ha bremañ 13.000. E pevar Departamant ar CELIB 68.000 neuze ha 45.000 bremañ.

"Koulskoude, eme Yann, abaoe ar brezel, hervez ar gelaouenn, ez eus bet ganet bagadoù bugale evel ne oa bet gwelet biskoazh neblec'h.


- Pet a vugale a zo e skol da geredenn bremañ, Yann ?
- Pemp, eme Yann.
- Hag en amzer na tarempredes...-te ar skol-se, pet a oa ?
- 50, eme Yann.
- Ar c'helaouennoù, Yann, a lavar ar pezh a blij dezho..."

Setu emañ da heul un daolenn (TAOLENN I, Paj.27) savet hervez an niveradurioù embannet gant INSEE Roazhon (siwazh ! Bro-Naoned n'emañ ket da heul). Honnezh eo an daolenn-ziazez. War honnezh ez eo skrivet amzer-da-zont ar Skol, hag amzer-da-zont ar Vro. Warni e welomp:

- 1- N'en deus graet niver ar vugale nemet koezheñ etre an daou vrezel.
- 2- Ez eus bet ganet muioc'h a vugale er bloavezhioù 1946-47-48-49. Met e Bro-Roazhon hepken eo savet an niver uheloc'h eget e 1901-10, na zoken 1921-30.
- 3- Penn-ar-Bed, ar Morbihan hag Aodoù -an-Hanternoz a zo koezhet abaoe 1954 izeloc'h eget a-raok ar brezel. Aodoù-an-Hanternoz a zo koezhet izeloc'h eget e-pad ar brezel : an eil e oa hemañ gwechall; bremañ emañ an diwezhañ....

Hag er bloavezhioù da zont n'eus nemet seblant diskar.

Taolenn I





Evel-hen emañ kont eta : bremañ, er bloavezhioù-mañ, ez eus degouezhet ur wagennad Breizhiz vihan er skolioù. AR RE-SE EO DIWEZHAN ESPERANS HOR BRO. N'eus forzh pegen divreizhet e vefe un den, e c'hell kompren emañ pep tra o vont da gouezhañ ma ne reer ket gant ar re-se tud barrek da adsevel Breizh .

Hogen, er V-et hag er VI-et klas emañ ar re goshañ anezho. Hervez ma welan ne reer ganto nemet ar pezh a zo bet graet gant o breudeur henañ = danvez-divroidi... Ha koulskoude, c'hoazh ur wech, ma ne gelenner ket d'ar re-mañ Douaroniezh, Istor, Arzoù-Kaer, Yezh ha Lennegezh, ha Karantez Breizh, ne dalvo ket ar boan dont da glask e Breizh danvez-beleion, na danvez-soudarded, na danvez-micherourion, rak ne vo ken nemet kozhidi ha pañsionidi, hervez giz Plistin ha Lomikael-an-Traezh ( 47 % eus Plistiniz a oa ganet a-raok ar brezel 1914, ha 49% eus Lomikaeliz )

°°°

Setu amañ un daolenn all : hini ar VUGALE ER SKOLIOU IZEL, skolioù ar c'hentañ-derez, hep derc'hel kont eus ar skolioù-babiged, ( gwelout pajenn 29 ). N'eo ket **ken sklaer** pep tra warni : er MORBIHAN, da skouer, ez eus muioc'h a vugale er skol bremañ, pa c'han war-dro 10.200 ar bloaz, eget er bloavezhioù 1901-10 pa c'hane 15.200. Moarvat ez eo k aketusoc'h ar vugale d'ar skol, moarvat e chomont diwezhatoc'h.

Un dra a bouez avat, a weler war an daolenn-se : arabat krediñ e talc'ho Skol ar Gouarnamant da chom bev dre lonkañ ar Skol Gristen . SKOL AR GOUARNAMANT n'he deus graet nemet koazhañ dre holl. Er Morbihan hag e Bro-Roazhon ez eo bet trec'het pell'zo gant ar Skol gristen. E Penn-ar-Bed emañ o vont da vezañ. En Aodoù-an-Hanternoz ez eo kouezhet Skolioù ar Gouarnamant eus 68.800 bugel da 44.600, e-keit ha ma chome ar Skolioù Kristen difiñv : war-dro 27.000.

Skolioù ar Gouarnamant a varvo da gentañ kalz anezho, ma ne harpont ket, int ivez, da zerc'hel Breizh bev. Pa'z eo bet serret Skol gristen PLOUGRAZ , n'he deus kollet ar Skol gristen nemet nebeut-tre a vugale : aet int da Werliskin pe da Logivi-Plougraz. Pa'z eo bet kouezhet skol... Yann eus 50 da 5, he deus kollet Skol ar Gouarnamant : 45 a skolidi...

°°°


Skol ar Gouarnamant eta emañ ar gwashañ he stad. Int a dleje kompren da gentañ n'eo ket o sachañ d'o skol c'houllo bugaligoù 3-4 bloaz eo e talc'hint pell en o sav, hogen o vaganñ en o skolidi speredoù ha kalonoù Breizhat...

Diaesoc'h eo reiñ da gompren d'ar Skolioù Kristen, e-lec'h ma tered muioc'h-mui a vugale: PENN-ar-BED = 33.700 -51.500

Pajenn 32 : Evezhiadenn : N'eo ket Yann XXII ( + 4. XII, 1334 ) a reas an diskleriadur, met Klemañs VI, er bloaz 1347 (19.5) . Met dre urzh Yann XXII e oa bet graet an enklask war vertuzioù St Erwan....

Taolenn II

Pre Vugale e skolioù ar c' bentan derez.



enn hall.

= e skolioù  
ar gouarnamant

= e skolioù Kristen

N.B Skol ar gouarnamant n'he deus adc'houezet nemet ul lodenn eus an dachenn kollet e-pad ar brezel diwezhan.

BRO-ROAZHON = 37.300 - 47.000; MORBIHAN = 35.200 - 56.400 ).

Emañ niver ar vugale o koazhañ er Vro, en un doare danjerus -tre. Ha koulskoude eo ret dezho kompren kement-mañ:

1) Na bedo ket an traoù evel-se: gant an DIC'HENEL hag an DIVROAÑ e vo gullonderet an HOLL SKOLIOÙ

2) Ha da c'hortoz, eo dever ar Skolioù Kristen, peogwir eo dezho e tiskouez an tiegezhioù o fiziañs mioc'h-mai, kemerout penn an Adsav. Ha kemerout penn an Adsav a zo ober gant o skolidi Breizhiz a Galon hag a Feiz.

Nag evit ar Skol, nag evit an Iliz e Breizh, nag evit ar micherioù, nag evit den nag evit netra, n'eus hent ebet etrezek an Auzer-da-Zont nemet hennezh, da lavarout eo, ober gwir Vreizhiz gant ar vugale a zo bremañ en hor Skolioù...

.... rak a-benn arc'hoazh e vo kalz a skolioù serret ha kalz all peuzc'houllo.

F.B.

DOUJAÑS DA VREIZH KUZUL AR BREZHONEG (Un nebeut dielloù)

Abaoe m'eo bet embannet gant KUZUL AR BREZHONEG levrig rez Per Denez "AU SUJET DE L'ORTHOGRAPHE BRETONNE" e seblant bezañ bet tapet an holl "c'hedon" laosket da redek diwar-benn un doare-skrivañ (hini Barr-Heol, da skouer) ijinet dre atiz an Alamanned. Lakaat a reomp amañ da heul un nebeudig lizheroù kaset en anv ar C'HUZUL da zifenn ar wirionez.

DA Aotrou RENER "Les Cahiers du Bleun-Brug" (Kaieroù ar Bleun.B. Bulien 22.3.58.

Aotrou Rener.

Iennet hon eus war GAIEROU AR BLEUN-BRUG, niverenn 5, kentañ trimizid 1958, ur pennad -skrid anvet LE VERITE, sinet gant an Aotrou Chaloni Falc'hun, sluzener-meur ar BLEUN-BRUG, diwar-benn KUZUL AR BREZHONEG

Evit ma c'hello lennerion AR C'HAIEROU kaout sklerijenn splannoc'h war ar Wirionez ho pedomp, Aotrou Rener da verkañ kement-mañ en ho kelaouenn:

1- Komzet ez eus bet eus ar Skritur Feurunvan kent ar breze 1939, hag al labour graet e 1936 en deus talvezet da beurunvaniñ ar Yezh, e 1941. Dre-se ne oa ket al labour-mañ ul labour savet a-droc'h trañch.

2- Hini ebet eus sinerion KUZUL AR BREZHONEG n'eo aet da heul an Alamanned en tu all d'ar Roen, goude drouziwezh ar re-mañ, er Bloaz 1945.

3- Tri beleg o deus sinet KUZUL AR BREZHONEG, -an darn vras

eus ar re o deus sinet a so katoliked vat, hag holl sinerion ar C'HUZUL o deus ar gwir da vezañ doujet hag enoret.

4- Al lizher-mañ a vo moulet war e hed, e Brezhoneg peur Feurunvan war gentañ niverenn ar C'HAIEROU a zeuio er-maez.

A-hend-all e viromp pep gwir da gas an afer pelloc'h, mar kavomp met hen ober.

Gant hor gourc'hemenoù kristen. Doujañs da Vreizh ha d'ar Wirionez.

Evit KUZUL AR BREZHONEG, ar Pennrener : Klerg.

Da Aotrou PENNSKRIVAGNER ar gazetenn "BREIZ" Bulien 6.3.58 (troet diwar ar galleg)

Aotrou Pennskrivagner.

War ar bajenn 2 eus niverenn 14 eus ho gazetenn, hoc'h eus lakaet un diskleriadur a-berzh Prezidant ha daou Eil-Prezidant KENDALC'H, diwar-benn kest ar Brezhoneg, o tiskuilhañ o doare-soñjal e-keñver ar Strolladoù breizhat ha n'emañ ket dindan o gal-loud.

Ober a reont eus ar strolladoù-se "Strolladoù Estremistet e glazentez gant ar Gouarnamant Gall, hag int-i o lavarout er penn kentañ eus o diskleriadur e fell dezho en em virout e-keñver an dud all a bep tamall displejus, koulskoude.

En anv KUZUL AR BREZHONEG e vefen aneoudek en hoc'h andred, ma karfec'h lavarout din hag-eñ e kemerit ar c'houzoù-se war ho kont, ha ma kav deoc'h merkañ ganto ar strolladoù bodet dindan anv KUZUL AR BREZHONEG.

Gortoz a reomp eus ho perzh ur respont o tiskouez ho ledander-spered hag ar c'hoant bras hoc'h eus da welout un emglev gwirion o ren etre kostezenoù disheñvel o menegoù.

Flijet ganeoc'h, Aotrou Pennskrivagner, degemerout va gwellañ gourc'hemenoù breizhek.

Evit AR C'HUZUL, ar Pennrener : Klerg.

Aotrou Pennrener KUZUL AR BREZHONEG Bulien 12.5.58 da Aotrou RENOIR SKINGASABURIOU An R.T.F., e Roazhon

Aotrou Renoir.

Hervez kelseier ar mintin-mañ e tle an Aotrou Chaloni Falc'hun, kelenner e Skol-Veur Roazhon ober warc'hoazh da 19.4.55 er Radio ur galv a-du gant DEVEZH AR BREZHONEG.



